

EMSAV

kelaouenn drimiziek

TAOLENN

Jean-Pierre QUIRION	<i>Dilabour</i>	3
Guy ÉTIENNE	<i>Notennoùigou</i>	9
Roger LE NESTOUR	<i>Ar brezel-dieubiñ kentañ en Angola</i>	22
	<i>Filmoù, lizheroù</i>	42
	<i>Gerva yezhel 1977</i>	60

124

1977

EMSAV

kelaouenn drimiziek

★

Skridadozerezh, Mererezh hag Embannerezh

EMSAV

B.P. 125 - 35003 Rennes Cedex

C.C.P. Rennes 2460 10 Z

Embanner : Yann-Baol an NOALLEG

Merour : Gwenael MAZE

Skridadozerezh en aked ar Bodadoù

★

Koumanant-bloaz : 75,00 F

Priz an niverenn-mañ : 20,00 F

Unnekvet bloavezh

EMSAV

Niv. 124 — 1977

TAOLENN

Jean-Pierre QUIRION	<i>Dilabour</i>	3
Guy ÉTIENNE	<i>Notennoùigou</i>	9
Roger LE NESTOUR	<i>Ar brezel-dieubiñ kentañ en Angola</i>	22
	<i>Filmoù, lizheroù</i>	42
	<i>Gerva yezhel 1977</i>	60

DILABOUR...

gant

JEAN-PIERRE QUIRION

Aozadurioù c'hweluniadel ha dic'hwel.

An traoù a grog e 1975 gant derou taol-kresk an dic'hwel. Broudet gant ar pezh a oa o c'hoari e klaskas tud Unaniezh lec'hel (U.L.) Naoned ar C.F.D.T. sevel ur "c'hengor an dilabour". N'eo ket hep trubuilhoù e-leizh e teujont a-benn, e rouestl an darvoudoù, da amparañ ur stroll dic'hweleion. Gant an diaes ma oa an embregadenn-se avat, ne arc'hwelas ar framm nemet evel stroll a-hed ar bloavezhioù 1975 ha 1976. Ennañ e voe sammet al labour gant un dek den bennak na oant ket holl c'hweluniadet, un darn vat anezho o vezañ stourmerion e strolladoù politikel eus ar c'hleiz pellañ. Ezvezañs peuzklok derec'houezourion c'hweluniadel an U.L. a viras ouzh amparadur ur c'hengor er ster strizh avat.

Petra edo ar c'hweluniad o vont da ober war dachenn an dilabour ? E seurt degouezhioù e c'hell degas skoazell d'an dud en o difraeoù da gavout peadra da zrestbevañ, aliou a c'hell reiñ dezho war an doare da ziluziañ o faperachoù, da gavout ur gourc'hwel nevez... Reiñ a ra da c'houzout d'ar vicherourion taolet er-maez ar perag armerzhel politikel eus ar blegenn m'emaint, sevel ur "levr du ar gourc'hwel", diskouez dezho piv a zo kiriek d'o gwalleurioù... Met arabat rambreal pelloc'h war ar pezh a ve tu d'ar c'hweluniad da ober pe war ar pezh emañ an dic'hweleion o c'hortoz. Gwell distreiñ d'an darvoudoù o-unan !

Er c'hweluniad e kaver gourc'hweleion frammet o tifenn o staeloù. Boas eo ennañ enta pezh a zo da ober betek ar mare ma c'hoarvez an ezfredadur. Un nebeut oberioù emgefreek a vez kaset en-dro a-benn diwall ar staeloù lakaet en arvar. Da gentañ e stag an atebion gant ar c'hevraouiñ, o harpañ war Dezveg al Labour, ar Poellgor embregerezh, Ensellerezh al labour... Ma ne gerzh ket, ha diouzh an dro, e vo lusket oberioù, ec'hwelioù, evit klask pouezañ war an implijer. C'hoarvezet an ezfredadur en diwezh, ne chomo mui nemet

da evezhiañ dedalvezadur an dezvrezh war an digolloù-ezfredañ hag ar goprou-dic'hwel. Diouzh ret e vo engalvet Ensellerezh al labour pe ar *Prud'hommes*.

Evit stourm ouzh an dic'hwel avat, ne c'hortoz ket ar c'hweluniad ma ve anv a blantañ tud er-maez. Un ober pemdeziek ez eus war an dachenn, skoret gant kinnigoù kengevreadel fetis : al leve da 60 vloaz, ar 40 eurvezh sizhuniek, da skouer, degaset evel pezh a c'hell herzel ouzh digresk niver ar gourc'hwelioù. Hogen seurt kinnigoù n'int nemet gerioù-stur. Anster, pe dost, ez int evit kalz tud. E degouezh ar stalioù SUMA e Naoned, evit kemer ur skouer, e voe digresket amzer labour pep implijad hep enfredañ koskor ouzhpenn, evit d'ur stal nevez bezañ digoret. War ar marc'had e krogas ar stal da ober gant kevratoù darnamzer ha taluadek. E lec'hioù 'zo e savas tabutoù ivez da heul bruderezh a-zivout ar 40 eurvezh, pa n'edo ket an implijidi e soñj dreistbevañ hep o eurvezhioù ouzhpenn.

Difraezh eo ar stourm ouzh an dic'hwel — ar stourm evit ar gourc'hwel ivez enta —, meizet hag embreget e termenou hollek. Ar c'hudennoù o sevel e meur a zegouezh a lakae en arvar an doare d'ober gant ar gerioù-stur. Ur si a oa tu bennak. Ne oa ket tro evit al labourerion hag ar stourmerion da ziorren eskemmoù war o aozioù labour pe o aozioù buhez. Savelañ a-gevret araezioù-eztaolñ hag -ober a hañvale bezañ dic'hallus. Pezh a soñje an den a-zivout e labour, e embregerezh, ar gevredigezh, a oa k arzhet a-raok bezañ fetisaet.

Ar gerioù-stur danzeet gant koskor ar c'hengevread a oa kement ha disoc'hoù eus dezrannou na oant ket bet graet gant an dud, oberoù na oant ket bet lusket ganto diwar o degouezh fetis ha resis. Kreñv a-walc'h e oa ar c'hoant da drec'hiñ da seurt gouzañvadegzh, hogen diaes e oa dont a-benn, pa oa ret mont a-enep gwikefreoù boas. An divizoù kemeret war an dachenn a voe hep heuliad... Padal, an atebioñ c'hweluniadel zo bet lakaet gant ar C.F.D.T. da zastum sifroù war ar gourc'hwelioù. Diwar ar stlenn ez eus bet savet ul Levr du ar gourc'hwel : *La C.F.D.T. de Loire-Atlantique accuse... Le livre noir de l'emploi*, Supplément à *La voix des travailleurs*, n° 303, 1977, Nantes.

Frammadur an dic'hweleion.

Ne c'hell ket un den dilabour kemer perzh en obererezh ur gevrenn pa n'emañ ket mui en embregerezh. Diaes eo dezhañ kaout un atebegzh bennak er c'hweluniad ma n'eo ket atebeg c'hoazh er

gevrenn. Ouzhpenn ez eus tud hep c'hweluniad, dre an abeg eeun ma klaskont ur gourc'hwel kentañ. Penaos o c'hlenkañ en ur c'hweluniad micherel ? Daoust hag e krogont gant an dic'hwel en hevelep doare hag an hini o paouez padout dek vloaz diouzh renk en hevelep stal ?

Diouzh pezh a voe gwelet e Naoned e c'haller soñjal e oa douget ar c'hweluniad da zegemer ha da gennerzhañ ar paour-kaezh tud kollet o labour-bara ganto, tra ma oa tuet ar stroll dic'hweleion da vodañ ar re droug enno gant an dro fall tennet dezho gant o fatromed. Politikel e oa forzh penaos an amkanioù. Anv a oa a berzhiañ en enluskadur ar milion dic'hweleg bennak. Petra a zegasent d'ar re-se avat ?...

Rouez eo bet a-benn ar fin an darempredoù etre dic'hweleion-stourmerion ha dic'hweleion na oant ket c'hoazh enlusket. Diaes e voe da stroll C.F.D.T. Naoned mont en tu all d'an dek keveler bennak en lakaas da vont en-dro a-hed ar wech. Kejet hon eus memes tra gant dic'hweleion ha danvez-dic'hweleion all e-ser ar burev digor d'an dud dilabour ha da-geñver an emvodoù aozet gant kevredigezhioù liesseurt. Dav lavarout, avat, nebeut a zic'hweleion a-ziavaez ar stroll a gemere perzh e seurt kejadennou.

Ur wech e tisplegas ur vaouez ez ae da boentañ en ANPE e sell da gaout he gopr tiegezh ha tagañ a reas ar re yaouank hep gourc'hwel o vevañ diwar-goust o c'herent, hervezi. Un ezdic'hweleg yaouank a gavas dezhañ e veze komzet kalzik eus an dilabour, met ne oa ket kalz anv eus ar re o c'houzañv seurt plegenn : penaos e rankont lostenniñ en ANPE hep disoc'h, hep kaout chomlec'h ebet evit ul labour all, ha lostenniñ dirak dor pep implijer hep bezañ enfredet, penaos e sell o ziegezh a-dreuz outo, hep kontañ an dispriiz a-berzh an dud sirius o deus-int ul labour. Menegiñ a reas an diouer a arc'hant, ar santad da na gaout krap ebet ken war ar pezh a c'hoarvez, da vezañ dic'halloud ha gouzañvat penn-kil-ha-troad...

Neuze e komzas an dic'hweleion-stourmerion a-zivout o c'hudennoù-int : an diaes ez eo bodañ tud dilabour daoust ma vez ar peurliesañ gwerzhet mat kenan kelaouennoù an dic'hweleion (1 000 skouerenn moulet ha gwerzhet evit ar C.G.T. hag 800 evit ar C.F.D.T.). Graet o deus anv eus spletoù kadouriezhel an arc'hadur evit an dezougen kevredik digoust evit an dud dilabour : deurus eo evito pa rankont beajiñ kalzik da glask war ur stael ha bastet e c'hell bezañ d'an arc'hadur-se er par lec'hel. Pezh a ro tu da enluskañ an

dud ha da gaout un disoc'h fetis, o kreskiñ ar skog dre se... Seikont den, stourmerion en o zouez, a voe en diskeladeg evit ar busoù digoust...

Gwazourion bad ar c'hweluniadoù a oa deuet. Goulennet ez eus bet outo perak e oa ken skort emell ar stourmerion c'hweluniadour ha perak e oa ken dieran ar c'hourc'hweleion en o darempredoù gant o c'henseurterd ezfredet. Komzet ez eus bet mesk-ha-mesk eus ur bern traoù : digeriñ an nor d'ar re yaouank ; roll enluskus an arc'hadurioù riezal ; penaos gounit ar gwir-skritellañ en ANPEoù ; penaos mirout ouzh dic'hweleion war ar raden a vezañ skarzhet eus o annez... An emvod a roas tro d'an dud da stigmañ un nebeut kudennoù o tennañ d'an dilabour. Evit ar stourmerion, degaset o deus-int un amkan politikel : enluskañ, disoc'hañ. D'an dic'hweleg e kinniget an doare da freuzañ an dic'halloud ma oa : degemerout bellouriezh politikel ar stroll. Diouzh un tu all ez anade elfennoù un dezrann o loc'hañ diwar ar stadadennoù fetis a rae an den dilabour war e saviad. Dober a'n dezrann-se a oa bet c'hoazh e diabarzh ar stroll a-geñver gant an diaesterioù a save er frammañ hag en arc'hwelañ. War an taol, avat, n'eo ket hent an dezrannañ a voe trec'h...

Dic'hweleion ?

E pep lec'h e kejer gant tud dilabour... En ur c'hweluniad pe er rann anezhañ arbennikaet war an dilabour zoken... Ne ouzer ket evit kelo piv int. An den a vez sammet gant kalz re a labour evit dioueriñ amzer d'ober goulennoù seurt-se outañ e-unan...

Ul labourer eo an den dilabour. Evel ar re all en doa e drevell hag e vuhez reizhet dioutañ penn-da-benn : Sevel ! Kousket ! Paouez sizhuniek ! Goar ! Tiegezh !... Tennañ pep intrudu digantañ, disammet eus ar muiañ r'gwellañ a strivoù war dachenn ar frammañ hag an ijinañ, gouzañv a rae ur sodell sturiet gant an embregerezh. Chom a rae a-sav evit miz, met n'eo ket eñ a zivize. Seurt mizvezh ehan n'en doa ster nemet a-geñver gant e dorr-keñ. Talvezout a rae dezhañ da zerc'hel penn a-hed an unnek mizvezh all. Etre daou benn a'n deiz e lamer e embregerezh digantañ : ar goar, an tiegezh, ar geneiled, an ehanoù a goll kalz eus o ster hep ar brev-korf. Diwar neuze n'int mui nemet tunioù da gas an amzer...

Tu zo d'en em c'houlenn eus petra e c'hoarveze seurt gourc'hwel a oa ur "chafis" d'al labourer kaout... Ne ro ket tro dezhañ da denañ e vad eus e amzer-eñ, na da dalvezout d'un dra bennak, na

da skoulmañ liammoù ouzh ar re all. Darbarer e stael ne oa ken ha n'en doa ket a voud er-maez eus ren an armerzh santel. En diavaez anezhañ silvidigezh ebet... Bezañ ul labourer eus ar gevredigezh c'hreantel, aze emañ, c'honvat, pennabeg kudennoù an dic'hweleg. Al labour-se a lonk e amzer, e nerzh, e breder, e intrudu, en lonk penn-da-benn erfin, hep reiñ tra dezhañ en eskemm. Ar goar, ar c'hletadur, an ehanoù, h.a., zo parzh kevaneke er vuhez kreizet en-dro d'ar gourc'hwel. Dilabour, en em gavout a ra dic'halloud, didalvez, dibourc'het, goullou... Klañv eo gant al labour, emañ e diouer a labour... N'eo ket al labour difetis, termen hollek, hogen an hini a zo *gwerzh* gantañ, a zo *mon* gantañ, al labour armerzhel, *dezvek*, an dra o tegas d'e heul ar gopr, ar skor kevredigezhel, al leve, ar goproù dic'hwel, ar bri, h.a... An dra a zo an den tonket da vervel heptañ.

N'eus kudenn ebet evit a sell an dic'hwel. Pezh a zo e kont eo saviad al labourer, eleze, etre traoù all, an diouer a lec'h, disterded an darempredoù kevredadel el labour. Krisoc'h eo evit an dic'hweleg evel just, pa rank tremen hep sodell ha hep torr-penn an torr-keñ. N'en deus mui tra. E batrom a dremen heptañ, hogen e genvicheridi, e genc'hweluniadidi ivez. E gwir, chom a ra ar re-se gouestlidi o staeloù. O ober armerzhel pe c'hweluniadel a erounezont evel ur redi na ro plas ebet d'un emouiziekadur ouzh an darempredoù a skoulmont gant an dud. Mar paouezont gant ar sodell, pe mar roont pouez da draoù all, e vo kement-se marv ar c'hweluniad, an embregerezh, pe o marv-int, hervezo. Eleze, er blegenn emañ an dic'hweleg o c'houzañv en em gavint. Heñvel eo ersav an den dilabour pa gemer da amkan retañ adkavout ur gourc'hwel nevez hag... ar sodell o vont gantañ. A-raok an dic'hwel e tistroe bemdez d'an torr-keñ da c'hortoz an noz, an dibenn-sizhun, an ehanoù, al leve, pe ar baradoz... Bremañ emañ o c'hedal al labour, a-benn un amzer pell pe pelloc'h... Ne oar ket pegoulz e vo, met goñt a oar ervat e teuy dre ret, ez eo *tonket*.

Un diskoulm all a c'hallfe koulskoude empentañ : kemer penn un ober o nac'h ar saviad labourer, da skouer. Ha sellout end-eeun ouzh an dislavaroù m'emañ, evel kenderc'hel bemdez gant un trevell a gav droch-mik, ha bezañ rediet dre se da zilezel oberoù ha prederiadennoù all a gav dedennusoc'h alies. Ar poell armerzhel eo a zo an trec'h gantañ neuze : pezh a zo barnet dister eo pezh nad eo ket arc'hantus ha dilezet eo pelloc'h. Dic'hwel ha gourc'hwel n'int nemet pil ha kroaz al labour kevalaour. Ul labourer eo an dic'hweleg. Ned eo ket saviad al labourer evit bastañ d'e ezhommoù ha ne ro ket tro dezhañ da seveniñ e izuniadoù. Seul gent a se, ned eo ket an dic'hwel a roy

tu dezhañ da gemmañ penn d'ar vazh. D'un emouezañ e c'hell kas, pe d'un darblegañ, kenkoulz all, evel n'eus forzh peseurt darvoud. Da skoulmañ darempredoù o troc'hañ diouzh ar sodelloù ha diorren oberoù ha prederadennoù krouüs, dieubus, e c'hell kas ivez... Pe neuze da glask tunioù da lakaat an droug da esmoliñ : herouezadur, kevraokaat, kavout ur faou, dic'hwel padus, labour du, h.a...

En devoud, ned eo ket an arnodoù a bep rizh a vank. Chom a reont prevez avat, dianav ha re zispis. Ne dizhont ket alies derou an dezrannañ : mont da goll a reont. Meur a wech e troont a-enep ar re o doa sañset da zienkañ, ken moan eo ar frailh etre an tun hag an ijin. War an dachenn-se eo bet diaes betek-henn distremen par poblekadur ar stourmoù a zo dezhañ, daoust d'e holl berzhioù-mat, an hevelep blaz hag an hevelep gwered hag ar goursankerezh-empenn embreget gant ar skinvaou. N'eus ket kalz plas evit an trouzioù nevez...

Ur gerig c'hoazh kent kenderc'hel...

En orin ar pennadig-mañ ez eus ur gejadenn gant ur c'heneil dilabour e stroll dic'hweleion C.F.D.T. Naoned ma kemeren perzh ennañ evit an hevelep abeg. Savet eo bet diwar notennoù a'm boa kemeret en emvodoù dalc'het e-ser ar framm c'hweluniadel ha diwar danevelloù eskemmet gant keneiled ar Bodad armerzhel. D'an danvez-se e'm eus ouzhpennet un nebeut evezhiadennoù a-zivout ur gourc'hwel nevez ha kejadennoù all. An amkan a oa reiñ un tamm skoazell d'un nebeut arnodoù a-berzh tud dilabour hor boa kejet ganto, me hag ar c'heneil, a-gevret er stroll pe pep hini diouzh e du. An holl o vezañ steuziet en natur abaoe, n'eus ket bet a genlabour kalvezel, ha diarver e chome ar skrid. Fiziet eo bet a-benn ar fin ar maladur gallek anezhañ er gelaouenn *APL* hag embannet dindan an talbenn *Chômeurs et syndicats, APL informations régionales*, n° 15, pp. 8-11, 23 janvier 1978.

N'eus ket un dezrann eus ar pennad-mañ evit gwir. Un heuliad eus un darvoud eo e stumm stadadennoù ha prederadennoù. N'en deus devoudet ober resis ebet — evit ar mare. Bezet a vezo, ne soñjan ket ez eo ret bezañ engortoz eus un dra a c'haller touch outañ. Ar pennad-mañ hag an hini embannet a-raok, "Madelezhioù an araokaat" (*Sl. Emsav* 123, 1977) a zo elfennoù un emouiziekadur ouzh plijadurezhioù ar vuhez... Un doare ez int ivez da glask tennañ un nebeut darvoudoù diouzh skeud ar brastresoù "politikel" ha "kulturel" re intret a stuzegezh c'hreantel.

NOTENNOUGOU

gant

GUY ETIENNE

UR GUDENN A STURYEZHOURIEZH : AROUEZ HA HONTAROUEZ

Abaoe Saussure e tiforc'her div gevenebiezh e par an arouez (*signe*) : ur gevenebiezh diabarzh etre an arouesaer (*signifiant*) hag an arouesaed (*signifié*), ur gevenebiezh diavaez etre an arouez he-unan hag an dra arouezet (*réfèrent*).

RÉFÉRENT. — *Objet ou manifestation du monde observable auquel renvoie une forme linguistique, par la relation de référence*¹.

*Le réfèrent est la réalité du monde à laquelle renvoie le langage. Comme tel, il échappe à l'analyse sémiologique. Celle-ci ne peut se développer qu'en pratiquant un écart entre le signifié et la réalité*².

RÉFÉRENCE. — *La langue, en elle-même ensemble structuré de formes, n'a de raison d'être que dans la mesure où elle est en relation avec l'expérience que les locuteurs ont du monde. Au sens le plus large, la référence est cette relation, orientée du signe au réel. Plus précisément, on emploie référence pour la relation qui unit une forme du discours à un objet ou à une manifestation particulière de l'expérience des locuteurs*³.

An notenn-mañ 'm eus savet da-geñver ul labour-sturyezhañ evit kaout an termen brezhonek o klotañ gant *réfèrent*. Buan e'm eus merzet

1 Georges MOUNIN, *Dictionnaire de la linguistique*, P.U.F., Paris, 1974, pp. 284-285.

2 Jean-Baptiste FAGES, Christian PAGANO, *Dictionnaire des médias*, Mame, 1971, p. 248.

3 Georges MOUNIN, *id.*, p. 284.

e oa krenegellek an dachenn ma valeen ha ranket 'm eus gwiriañ soliadur damkanel ar meizadoù a oan lakaet da embreger.

Komz zo peurliesañ komz eus un dra bennak. Diwar ar stadadenn eeun-mañ o deus ar yezhourion kavet mat ober un troc'h etre al lavar hag ar bed. Ar *réfèrent* zo ar parzh eus ar bed a ra anv anezhañ ar parzh-mañ-parzh eus al lavar. Dav eo goulenn petore gwiriegezh zo d'an troc'h. Daoust hag al lavar n'emañ ket er bed, n'eo ket tra eus ar bed ? Daoust hag an arouezioù n'int ket ken gwerc'hel hag ar peb-all eus ar werc'helezh ved ? Ar yezhourion n'o deus ket daleet d'en em gavout dirak un diaester dre berzh end-eeun ma verk dezho o diskiblezh studiañ al lavar evel forzh pe zomani all eus ar bed, ober eus al lavar ar *réfèrent* eus o lavar dezho. Aet int e-biou d'ar skoilh dre ijinañ ur staelad brientek d'o lavar, e skritellañ "tralavar" (*métalange, metalanguage*). « Mar rankomp komz a-zivout ul lavar-ergorenn hon eus ezhomm eus un tralavar⁴. » Kemeromp ar frazenn : « Hemañ ne zere ket », lavar boutin e vo mar talvez evit un tog pe ul lavreg, tralavar mar bez meneg eus ur ger. Tu zo da c'houlenn pe anv reiñ d'al lavar a gemero da ergorenn an tralavar, hag all... Marteze e rent keal an tralavar servijoù bihan, da Jakobson da skouer pa venn deskrivañ ha rummañ arc'hwelioù eus al lavar⁵, hogen ne oufe mont pelloc'h eget un dachenn embregel strizh dre an arbenn ma n'eo ket bet digejet he sol damkanel. Graet e vo dimp merzout n'eus ket aze ur c'heal a bouez, ha ne c'houzañver ket betek re diwar seurt pennboelladurioù keit ma chomer kantet er yezhoniezh : ne denn ket da vras e ve sellet al lavar evel o vezañ e-barzh pe e-maez ar bed, — forzh penaos « le réfèrent échappe à l'analyse sémiologique ».

Ar sturyezhour, evitañ, ne c'hell ket chom bac'het el luziadelloù n'he deus ket diskoulmet ar yezhoniezh. Hervez an deskrivadur a ra houmañ, ez eo al lavar tro-ha-tro trehontus hag enmanus d'ar bed, o kemer ar bed hag o'n em gemer e-unan da ergorenn. Perak ken splann emgontroliezh ? Peogwir e strisha ar yezhoniezh roll al lavar d'un daveadiñ (*référence*), d'an denotañ (*dénotation*), d'an aroueziañ (*désignation*) ; ne oar gwelout nemet daou vloc'h diungenezh, o stadañ liammoù hep nepred mont pelloc'h eget ur skritelladur a

4 R. CARNAP, *Meaning and Necessity*, Chicago, 1947, p. 4, meneget gant Roman JAKOBSON, in *Essais de linguistique générale*, Ed. de Minuit, Paris, 1974, p. 53.

5 Roman JAKOBSON, *id.*

skiant-voutin ; o kampañ diouzh un tu al lavar evel daveader, araez-denotañ, reizhiad arouezioù, ha diouzh an tu all un X (ar bed, kantouezadur al lavarerion, al lavar e-unan, pe forzh petra) evel daveaded (*réfèrent*), denoted (*dénoté, denotatum*), arouezed (*désignatum*). Gant se, e lez e-maez kont doareenn bennañ al lavar a zo bezañ araez-krouiñ ha -krouiñ bedoù hag ar bed.

E 1963 endeo e'm eus bet tro da skrivañ diwar-benn an danvez-se⁶. Ne oa ket c'hoazh eus meizadoù an nidiadelezh hag an hontkenderc'hañ ; koulskoude, gant kealiou an "hontger" hag an "hontved", e lakaen a-wel doare ar c'heñver a zo etre an arouezioù hag ar bed krouet diwarno ; ur c'heñver andoniek a hontkenderc'hañ. Un nebeut addisplegoù zo dleet reiñ d'al lakadenn-mañ. Ar vilienn a zo dirazon war va zaol-labour, n'eus etre va lavar ha hi pa ouzon keñver ebet a hontkenderc'hañ. An dave sioul, ankrouus, a ra dezhi ar ger "bilienn" a hañval klotañ dik gant ar c'heñver-daveadiñ evel m'en intent ar yezhourion. Klaskomp neoazh savlec'hañ an "dave sioul, ankrouus"-se er reizhiad keñverioù ez eo lodek enni.

Goût a ouzomp ez eo ar bed a vuhezomp an disoc'h eus ul lerc'hiad eilsaveladurioù hervez ur brastres deskrivet c'hoazh⁷ : eilsaveladur an alvez eo ar beved, eilsaveladur ar beved eo ar vuhez. Unan eus dezverkoù ar vuhez eo ar c'henderc'hañ, — hon c'henderhenterion war an douar, ar plant hag al loened, « ne hadont ket ha ne vedont ket⁸ », na derc'hañ na kenderc'hañ ne reont. Gwelet hon eus c'hoazh ez eus div furm d'ar c'henderc'hañ, ur furm-eskoriñ a zo an hontkenderc'hañ hag ur furm-drebadout a zo an askenderc'hañ. Mar sellomp ouzh ar c'henderc'hañ en e zisoc'h, e verzomp ez eo ar c'henderc'had en ur ser araez hag arouez. Ar c'heginour o tarbar ur meuz a genderc'h un araez beved hag un arouez buhez ; kenderc'hañ un arouez zo dec'hervel ur bed (ur stuzegezh, ur sevenadur, un istor, h.a.) d'ar werc'helezh : en degouezh uhelañ, ha rouesañ, mard eo ar meuz an dec'halv d'un doare nevez da vuhezañ, e vo komzet a hontkenderc'hañ, rak roet e vo bet gwerc'helezh d'un arouez digent ha d'ur bed ken digent all, an daou o tiflukañ eus unded an hevelep taol-nid. E tri arc'hwel diforc'h e vez enta engwezhiet an arouez :

1) hontkenderc'hañ, eleze lakaat ur bed da eskoriñ ; er skouer dibabet, ar c'heginañ, e c'hoari ar c'henderc'hañ araez beved roll ur

6 ABANNA, "Evezhiadennoù war yezh ar ouiziegezh", *Tonkad* 63, *Preder* 53-54/51-58, 1963.

7 "An deberzh diziouerus", *Emsav* 94/329-349, 95/398-404, 1974.

8 *Aviel Sant Mashev*, 6, 26.

gouskor e-keñver an hontkenderc'hañ, — e lec'h all hon eus graet eus seurt gouskor ur bonveziad :

2) askenderc'hañ, eleze lakaat ur bed da drebadout ; d'an ampoent ma stag gant e armoù, e ro ar c'heginour gwerc'helezh d'ar pezh na oa nemet derc'helezh, eleze rekipec'h hag anaoudegezh handizhek ar bed ma kemer e geginouriezh perzh ennañ : askenderc'hañ a ra ar meuz ha war un dro ar bed keñverek ; gouskor d'an askenderc'hañ eo amañ ar c'heginañ ;

3) derc'hañ, eleze diwar-bouez un anaoudegezh derc'hel eus ar meuz (dre e anv, e rekipec'h, h.a.) kaout anaoudegezh ken derc'hel all eus ar bed keñverek ; dav eo spisaat e seller amañ ouzh an degouezh m'en em denner a bep gwerc'helaat, ma'z eo dilamet an arouez a bep arc'hwel kenderc'hañ, ma'z eo steuziet pep roud eus an unded nidek a ziogele al liamm andoniek, organek, istorek etre an arouez hag he c'heñvereg : noazh-dibitilh en em gav an arouez er bed, ken emzivat hag ar goueriadez divaeziet o tidreniañ er gêr vras ; an neb a zo dic'houzvez eus an istor ne welo ket etre an arouez hag he c'heñvereg muioc'h eget ul liamm titek, kealiadek, deberzhek, e berr, ur *relation de référence*, ur c'heñver-daveadiñ yen, plat ha kras, — ha piv a broou gaou warnañ ? D'ar c'himiour ivez eo titek dasparzh ar molekul en daolenn livet. En un diarsell istorek koulskoude, ar c'heñver-daveadiñ zo an degouezh bevannat ma tenn davitañ al liamm etre an arouez hag he c'heñvereg o vont war ziwer'helaat, — merkomp ne dizh nepred an derc'helezh pur rak, evel ma ouzer abaoe Freud, e vez bepred gant nep derc'had ur garg kantaazel pegen dister bennak e ve, eleze danvez gwerc'helaat. Evezhiadenn all : fazi e ve enebiañ amañ beveziañ ouzh kenderc'hañ, pa na ra ar beveziañ nemet peurgas, ken e tachenn ar beved, ken e tachenn ar vuhez, ar gwerc'helaat lusket gant ar c'henderc'hañ.

Pezh emañ o paouez displegañ a-zivout ar gegin a dalvez evit al lavar. Ennañ e tizoloer an tri arc'hwel : eskoriañ, trebadout, derc'hañ. Hogen, tra ma'z eo gouskoret ar gegin war an emvagañ, ez eo gouskoret al lavar, en orin da vihanañ, war an anal. A bouez bras eo, rak ar frankiz gounezet diwar se he deus roet tro da ziorren an arc'hweliou diadrez. Diskleriañ a ran. An ergorenn geñverek d'ar meuz-arouez zo pe ur bed roet a-vloc'h, pe un arvez darnel anezhañ o chom dispis-tre e vevennoù. Faltaziomp kouskous servijet gant gwin fresk — ar c'houkous a c'hell aroueziañ tuiou feuls, angerzhek ar bed magrebat hag ar gwin an tuiou c'hwek, peoc'hus, ar c'hemm etrezo oc'h aroueziañ e-unan ur rumm kemmoù etre arvezioù eus ar bed-se. Greomp arc'hweliou *diasaezh* eus ar re a sell ouzh an

darempredoù arouez-bed, arc'hweliou *diadrez* eus ar re a sell ouzh an darempredoù arouez-arouez en un tu, arvez bed-arvez bed en tu all. Seul vui ma talvez an arouez d'an derc'hañ, seul baotoc'h e vez an arc'hweliou diadrez ha, war un dro, spisoc'h ar c'heñverioù diasaezh. Al lavar end-eeun, bennozha da ouestet ar vouezh da genderc'hañ arouezioù puilh, en deus gounezet ar brasañ korvo gant seurt paotadur ha spisadur : tennañ a ra pep arouez ennañ da zenotañ un arvez didermenet strizh eus ar bed. Alese an daou zurc'hadur kevenep a stader el lavar, ken berzhus an eil hag egile, berzh an eil oc'h azlañsañ berzh egile : ar ouezoniezh, domani an derc'hañ pur-ouzh-pur, ar varzhoniezh, ma tichal an arouezioù d'en em lakaat sentusañ en arempred an hontkenderc'hañ.

Evel a ouzer, pezh a gont a-raok pep tra evit ar yezhoniezh, ar yezhoniezh strukturelour dreist-holl, eo an arc'hweliou diadrez. Koazhet he deus an arc'hweliou diasaezh dre erlec'hiañ ouzh ar gevenebiezh arouez-bed ar gevenebiezh arouesaer-arouesaed — an daou-mañ, liz da Saussure o savelas, heñvel ouzh tu-mat ha tu-gin ur follenn baper. Ar c'hoazhadur-se avat n'eo gallus nemet gant furm "emzivat" an arouez, goude ma'z eo bet argaset eus an Eden nidiadel, m'he deus paouezet a vezañ un araez-kenderc'hañ buhez evit bout hep-mui araez-derc'hañ, -anaout, ha ma'z eo ereet ouzh ar werc'helezh dre liamm ar c'heñver-daveadiñ, ken dister ma c'haller hep gaou bras e zioueriañ.

Ur goulenn a sav : ha ne ve ket ar yezhoniezh evit astenn he domani d'an arouez evel araez-hontkenderc'hañ ? Tu zo a dra sur da ziorren seurt "arouezoniezh". Ur ouezoniezh ne vefe ket avat. Dre dermenadur e pled ar ouezoniezh gant beziadoù soliadet hepken, hag an arouezoniezh a rankfe lakaat beziadoù nidiadel e penn-kont. E gwir, o deus an arouezioù ur staelad dibar. Beziadoù soliadet int, hogen ne dennont ket o dibarded eus ar soliazelezh. Heñvel int ouzh tanvenezioù morgousket : bev e chom warno dalc'hmat louc'h an nidiadelezh — prestoc'h ma'z int eget nep poent all da reifi digor d'un dedarzh nidiadel nevez. En ur mod ez int ur gwarz er soliazelezh : hag int parzhioù enni, en em zinac'hont evit talvezout kement ha parzhioù all anezhi. An talvezout-se, al lamm-se eus ur poent d'unan all er soliazelezh ne c'haller ket e gompren nag e gantreizhañ dre ar soliazelezh he-unan. En hontkenderc'hañ emañ andon an arouezioù. Ar beziad nidiadel, steuzet ken prim ha ma'z eo dedarzh, a lez war e lerc'h daou veziad soliadet : ar bed digent ez eo bet an eskoridigezh anezhañ, hag an tamm eus ar bed kent,

lec'h ma'z eo dedarzhed, begel ha dor — en ur ger : arouez — eus ar bed nevez. Al lamm diazremm — savlec'hiet er solidadezh — etre an arouez hag he c'heñvereg, zo enta an aspadenn, al lava yen, diwar al lamm diazerc'h a roas boud dezho en unded nidiadel.

Liammoù an arouez ouzh he c'heñvereg a ranker meizañ evel ar furm aspadennek, diazremmaet, soliadelaet eus ar c'heñver a vonveziadezh. An termen "keñver-daveadiñ" a ro un arvez hepken eus al liammoù-se, ne sell nemet ouzh an hini paourañ, tasmantekañ anezho. Evit un anv a glotfe gant al liammoù beziat, na lezfe ket er-maez o donder amzer, e kinnigan an termen *keñver a hontarouezelezh*, ar rakger *hont-* o verkañ an drehontelezh chomet bezant, gwerc'hek, gant an arouez a-ziwar-lerc'h an hontkenderc'hañ. Evit keñvereg an arouez, eleze koulz a) pezh a vez dec'halvet d'ar werc'helezh a-ser gant ha diwar-bouez an arouez en hontkenderc'hañ hag en askenderc'hañ, ha b) pezh a vez dec'halvet d'an derc'helezh diwar-bouez an arouez er c'heñver-daveadiñ, an daveaded enta, e kinnigan *hontarouez g.*⁹

⁹ An termen *hontger* arveret e'm skrid a 1963 zo gantañ daou zisplet : ent furmel, ne glot ket gant termenou all ar steudad : *arouez, arouesaer, arouesaed* ; d'an eil, e vije diaes e arverañ war an tachennoù en diavaez eus al lavar.

PEVARE NOTENN BARIZIAN

Skuizh o vale eo aet Gizella da azezañ e skeud lijer an Tour Eiffel, tra ma treuzan ar Seine betek Palais de Chaillot evit eilskrivañ linennoù Paul Valéry engravet war an talbenn :

*Tout homme crée sans le savoir
comme il respire ().*

Sofñj 'c'h eus, Alan, eus hon arguz warlene a-zivout ar gerioù-se ? Brouezet oan, pa na zeuen ket a-benn da zisplegañ perak ne oan ket a-du ganto. Un nebeut mizioù goude, ha ni o pourmen c'hoazh dre ar c'harter, ez anzavis, a gav din, edo ar gwir ganit-te ha Valéry, ha pell oa koulskoude an traoù a vezañ fraezh evidon. Ur wech ouzhpenn e teuin d'hon c'hraf pa n'on ket evit leuskel un askorn hantergrignet.

Adarre ez abegan an arver graet e galleg eus ar verb "créer". Er yezh resis e reomp gant "hontkenderc'hañ", er skridoù gallek e ran gant "poiesis", "acte poétique originaire", pezh nad eo ket gwall hebleustr, a ouzon. Mar arverer "krouiñ", "créer" en ur yezh laosk, e ranker troc'hañ ar gerioù-se diouzh o c'hemeradur biblek : krouer eo Doue pa denn pep tra eus netra ; d'ar muiañ eo mab-den al lec'h ma tiwan traoù digent diwar an traoù kent : hontkenderc'hañ a ra pe, dikoc'h c'hoazh, hontkenderc'hañ a c'hoarvez gantañ. Mar krou Doue dre e youl, nepred ne ra mab-den a-ratozh, er wellañ tro e lavar ya d'ar pezh a zeu dezhañ.

*Wir kommen nie zu Gedanken. Sie kommen zu uns*¹⁰.

[Nepred ned eomp d'an dezevoù. Int a zeu dimp.]

A-du-rall, daoust ha n'eus ket un emzislavar en droienn "krouiñ hep rat" ? Gant an trede linenn :

Mais l'artiste se sent créer ()

e tlefed degemer ez eo an diforc'h etre an arzourion hag an dud all un diforc'h a emouziegezh... A-benn ar fin, petra eo krouiñ pe, kentoc'h, hontkenderc'hañ ?

¹⁰ Martin HEIDEGGER, *Aus der Erfahrung des Denkens*, Neske, Pfullingen, 1976, p. 11.

E'm intentadenn gentañ eus ar meizad-se edo va selloù dreist-holl gant al lamm o c'hoarvezout e diabarzh ar solidadelezh etre stad an traoù a-raok ha goude an taol-nid : dezastumet e veze bezoud hemañ diwar-bouez ur geñveriadenn, un diskontadenn¹¹. Er pezh a chome dizispleget dre ar savelegezh edo an hontkenderc'had. Hogen diwiriek oa an hentenn, rak mar lakae a-wel bevennoù an displegatur gouezoniezhel, e oa bevennoù ar mare ha n'eo ket bevennoù retvezel. En dilerc'h dizispleget ne roe ket an tu da ziforc'hañ pezh a ve displegatus en dazont diouzh ar pezh a chomfe andisplegatus dre anien. E berr, hentennoù ar ouezoniezh n'int ket evit rentañ kont eus bezoud an hontkenderc'hañ, pezh a ouiemp endeo pa ziskleriemp ne c'hell ket ar beziadoù nidiadel bezañ ergorenn a ouezoniezh pa n'int ergorennoù e nep doare. Sevel stadegoù neuze da c'houzout gant piv e c'hoarvez pe ne c'hoarvez ket an hontkenderc'hañ zo ken amoet ha soliañ war ar vrizstadadenn, a vije pal ar stadegoù-se sifrekaat, ne vez ket nidiaded eus nemeur a dud.

Koulskoude e ouzomp ivez e tegas ar ouezoniezh ar brouenn eus bezoud an hontkenderc'hañ, n'eo ket en he ardraoñ hogen en he argrec'h, n'eo ket evel un devoud savelet ganti en he maezienn, hogen dre ma'z eo-hi he-unan frouezh d'an hontkenderc'hañ¹².

Un denesadur all ouzh an hontkenderc'hañ eo mont d'an aspadenn anezhañ, ar c'heñver a drehontelezh etre an arouez hag an hontarouez. Gwelet hon eus ez eo divzremmek ar c'henderc'hañ : ar meuz zo war un dro araez beved hag arouez buhez. An termen " araez beved " ne c'hellomp ket lezel hep spisadur evelkent. O tont tre e kelc'h ar vuhez, e wisk an danvez boued ur staelad nevez. Kaer zo da jestr an den ha da jestr ar marmouz o kutuilh ur frouezhenn bezañ heñvel, jestr an den hepken zo ur c'henderc'hañ ha gantañ ez a ar frouezhenn d'ur meuz. Emañ ar c'hemm staelad-se en orin ar c'hemmoù na baouezont ket a c'hoarvezout en ober mab-den hag en danvez danzeet gantañ : bac'het er bondoug emañ jestr ar marmouz, digor en ijin jestr an den. Ober mab-den zo kalvezerezh, e-se e rin *kalvezad* eus pep taol-ober e kelc'h ar vuhez, araez a zo war un dro arouez, ha *buhezad* eus hontarouez ar c'halvezad.

Pep taol-kenderc'hañ zo enta ensavus dre ret d'ur c'heñver a drehontelezh, ar c'heñver a hontarouezelezh bezant er graonell kalvezad-buhezad. Kalvezañ zo war un dro :

11. Sl. Beziadoù ha meizadoù nidiadel, *Emsav* 74/48 hñ, 1973.

12. Sl. Guy ETIENNE, " Un hentennouriezh nevez ", *Emsav* 121/12 hñ, 1977.

1) *keveliñ* ouzh kalvezadoù kent hag, e dibenn steudad, ouzh argerzhadoù kelc'h ar beved ha kelc'h an alvez (pep meuz zo kevelad d'ur meuz kent hag, e dibenn steudad, d'ar boued er ster bevedel ; pep lavar zo kevelad d'ul lavar kent hag, e dibenn steudad, d'an arhentoù ; an aerviñs zo kevelad d'ar rod hag, e dibenn steudad, da izili ar c'horf ; ar gimiezh zo kevelad da zazgweredoù an alvez, h.a.) ;

2) *kevaniñ* kelc'h ar vuhez en tu-hont da gelc'h ar beved : tra ma'z eo perzh kelc'hioù an alvez hag ar beved trebadout diouto o-unan, e rank kelc'h ar vuhez bezañ gwerchelaet e pep mare diwar-bouez ar c'henderc'hañ ; moarvat ez eo ar c'halvezadoù — ar meuz, al lavar, an aerviñs, ar gimiezh, h.a. — kemend-all a c'houkourioù da gelc'h ar vuhez : ne vez eus hemañ koulskoude nemet e kement ma c'hoarvez taolioù-ober, taolioù-kenderc'hañ o reiñ bezoud gwerch'el, *revoud*¹³, dezhañ. E diouer ar c'henderc'hañ ez adkouezh en derc'helezh, eleze en direvoud.

E galloud hon jestr disterañ emañ dec'hervel ur bed d'ar werc'helezh.

*Pa zistagan, Annaig Riou, da ano,
e sav dirazon gweledigezhioù diniver* ()¹⁴.

Er ster-se, e c'haller diskleriañ da heul Paul Valéry ez eo pep den ur c'hrouer.

N'eus eno koulskoude nemet ur mennoz hanter-hent, pa'z eus en erdal seurt keal a'r c'hrouiñ daou veizad diforc'h, an askenderc'hañ hag an hontkenderc'hañ. Evit o digemmañ omp bet boas betek-henn da sellout ouzh an disoc'hoù hepken, oc'h intent an hontkenderc'had evel ur graonell kalvezad-buhezad nevez, digent, an askenderc'had evel ur graonell kalvezad-buhezad gwelet c'hoazh. Dav eo anzav ez eo hevelep diforc'hadur dre an disoc'hoù un danzead-spered, rak n'eo ket dioutañ e tennomp hon anaoudegezh eus an hontkenderc'hañ. Kemeromp skouer an daolenn livet hontkenderc'had diles. Diouzh an taol-nid c'hoarvezet gant an arzour ez eus difluket ur c'halvezad, an daolenn he-unan, hag ur buhezad, ur gevanidigezh nevez eus ar

13. An ezhomm a santer pell 'zo da gaout ur ger o verkañ keal ar « bezoud gwerch'el ». An termen **revoud* (hBr. *rabad*, *rebid*, sl. DGVB 291, 294), ennañ ar rakger-krefvaat *re-*, a hañval din bezañ azas. Ouzhpenn se, splot ar verb *revout* eo kaout e orioù diforc'h, pezh na gaver ket gant *bezout*.

14. KERVERZIOU, *Barzhonegoù*, Al Liamm, Brest, 1955, p. 9.

bed. Sellomp a-dostoc'h. Pezh a zo c'hoarvezet gant an arzour zo un derou hepken. Moarvat en deus-eñ anavezet an hontkenderc'hañ, sammet al labour micherel, kalvezel-strizh, ha war un dro buhez un alberz eus ar bed nevez o nodiñ. Hogen, ur wech echu al livadur, ne vir nemet ur brient a zo bezañ an arvester kentañ, ar c'hentañ tizhet gant ar gevanidigezh nevez. Kloz eo prantad an nid hiniennel ha derou zo d'an nid kevredik. Mont a ra an oberenn en arbenn da arvesterion all a vo tizhet gant goell ar gevanidigezh : ganto e tifluko buhezadoù nevez, digent zoken evit an aozer e-unan, drezo e kendalc'ho hag en em zispako an hontkenderc'hañ, d'o zro e vint oaled an tan nidiadel, sevenourion an dispac'h enaouet dre an arzour. Darvoud kevredik hag istorel eo an nid, ned eo hiniennel nemet en e zerou ; n'emañ ket a-geñver gant hoali an hiniennoù, hogen gant hoali ar pobloù hag an denezelzh. Kantvedoù e pad kevanidigezh ar bed diwar un oberenn. « Les créations () ont presque toute leur vie devant elles¹⁵. » Ar vent amzeriek eo ment-diazez ar buhezadoù : keit ma pad an hontkenderc'hañ ez eo an amzer diazerc'h an amzer eus korf kevrenel an nidiaded ma c'hoarvez drezo kevanidigezh ar bed. A-benn ar fin n'eus ken nemet speredoù bac'het er soliadegezh evit dont da c'houl azonoù ha dezverkoù eus an hontkenderc'hañ — ken puilh int forzh penaos en-dro dimp hag an dour en-dro d'ar pesked —, rak emañ an holl dud e tro da gantouezañ, n'eo ket hepken dilerc'hioù, aspadennoù, met an hontkenderc'hañ e-unan. Mard emañ e piaou hiniennoù 'zo, evel o c'harism, bezañ poent-eskoriñ ar buhezadoù nevez, emañ e goar an holl kas pelloc'h ar gevanidigezh divrazet hag e-se bezañ nidiaded, hontkenderc'herion diles. Splann eo din kement-mañ abaoe va zroiad e Pavillon de Flore warlene¹⁶. Daoust ha nes eo ar c'hlozadur-mañ da lakadenn Valéry : « Tout homme crée sans le savoir » ? Respondet an neb a gantouez ar c'hennemsklaeriadur...

Sellomp bremañ ouzh degouezh ur seurt all a livourion o tennañ korvo eus hontkenderc'hadenn o diaraoger. O kemer da zremmwel ar bed eskoret diwar e labour, e savont d'o zro oberennoù a zo evel troidigezhioù e yezhoù all eus arz andoniek al livour kentañ. E-lec'h bezañ treantet gant luc'hedenn ur beziad nidiadel, hentet gant an amzer diazerc'h, labouret gant gwilioud ur c'halvezad hag he hontarouez digent, e kreizont o strivoù war oberidigezh ur c'halvezad a zo e amkan gwerc'helaat un hontarouez rakvezant, adeztaolif ur

15 Maurice MERLEAU-PONTY, *L'Œil et l'Esprit*, Gallimard, Paris, 1964, pp. 92-93.

16 Guy ETIENNE, E diskouezadeg Marc Chagall, *Emsav* 123/13-15, 1977.

buhezad kenteztaolet. Monedonea a reont etre an daou veziad soliadel ez eo an oberenn orin hag he hontarouez ha neuze etre an daou veziad soliadel all ez eo o oberenn dezho hag an hevelep hontarouez, hentiñ a reont un amzer diazremm hep-mui, o holl brederi o vont gant an araezioù : diskoachañ ar rekiye, dastum ar c'hentaozadoù, isurzhañ o labour da "giminiadezh" an oberenn andoniek war-benn he adwerc'helaat, e berr disoc'hañ gant keveladoù dezhi : pezh a reont zo askenderc'hañ, merañ ar soliadelezh. Lavaret e vo e ran anv eus an degouezh platañ ha purañ, hini an askenderc'hañ rik, arz an diskibion. A dra sur, ha dav eo ouzhpennañ e c'hoarvez dalc'hmat an hontkenderc'hañ e gouskor an askenderc'hañ. Un dez, un diskibl, goude pleustrif ar monedonea etre kalvezadoù ha buhezadoù kent, a zispak e zivaskell, a zibrad : sammet gant an awen, ez anavez erfin an amzer diazerc'h ha dioutañ e tifluk kalvezadoù ha buhezadoù andoniek, oberennoù a zo eskoridigezh ur bed nevez. Ne baouez ket evit kelo al labour-kevelif kreizet war vestronierezh an araezioù, paouez ne ra ken a vezañ e bal dezhañ e-unan, engwezhet ha ma'z eo hiviziken en un avantur all : bezañ bonveziad d'al labour-kevanif ez eo aet an arzour en e arempred « hep gouzout da belec'h ez a ».

Dic'hallus eo hep mar sevel betek orin hanezel ar c'henderc'hañ — pehini voe ar c'halvezad, ar buhezad kentañ ? Derenet omp da gudenn gozh orin al lavar, an arz, an ijinerezh, h.a. Ne c'hellomp nemet pignat en tren war loc'h — o terc'hel avat da zigel daou dra : 1) ne voe ket strinkadur al luc'hedenn gentañ disheñvel diouzh strinkadur al luc'hed omp test anezho hiziv ; 2) ar c'halvezad-buhezad kentañ a reas an den kentañ. An hevelep kenderc'hañ, enaouet evel un tan den ne oar pelec'h na pegoulz ha ne ra forzh, a gendalc'h da flamminañ abaoe an derou-se. An hontkenderc'hañ o vezañ derou peurzalc'hus mab-den, ez eo "kondaonet" mab-den d'an hontkenderc'hañ er ster end-eun ma lavare Sartre ez eo "kondaonet" d'ar rezid. "Kondaonet" avat n'eo ket ar ger dik, pe gentoc'h n'eo dik nemet evit ar re a zibab, dre nac'h o rezid, bezañ kondaonet. An hontkenderc'hañ o vezañ amparus da vab-den, bezañ den zo bezañ lec'h d'an hontkenderc'hañ. Hag ar gwir ne ve ket c'hoazh gant komzoù Paul Valéry : « Krouif a ra pep den » ? Bezañ ganet den zo bezañ ganet buhez, eleze "krouer" buhez.

Ne c'hell ket mab-den na vezañ buhez — amañ emañ ar c'hondaonadur e ster Sartre. Ur poent dizistro. Padal n'eo ket ur

poent dizibab. Dibab bezañ buhez zo dibab bezañ pezh ez omp, eleze nidiaded ; hag ez omp, diac'hinad kentañ, dre anien ha dre awen en ur ser : dre anien, peogwir hep hontkenderc'hañ ne vije ket eus mab-den, dre awen, rak n'eo mab-den mestr na perc'henn e nep doare war an hontkenderc'hañ, hemañ o vezañ atav ro dic'hortoz ha glan, gras grataet e barvenn an amzer... Eil diac'hinad : dibab dere leun ar vuhez zo dibab ar goulo. Dre an hontkenderc'hañ eo taolet hon c'halon en tu-hont da gement tra zo, da vevennoù ar soliadelezh, er goulo, ha, war un dro, ez eus kevanet ur bed nevez, ur soliadelezh nevez. Ar temptadur neuze eo reiñ hon c'halon d'ar vuhez nevez-se, deuet pe da zont — ha hi n'eo ket ganadur an awen, gopr reizh an nid, frouezh ar c'hras ? — ha dilezel ar goulo, priziañ hepken ar pezh a zo, gwell eo ur c'had paket eget teir o redek, soliañ er soliadelezh, diskleriañ paouez-mizioù ar spered, ober eus ar bed, hontkenderc'had dre e orin, ur glad da virout ha da askenderc'hañ.

Merkomp amañ savlec'h dibar ar c'halvezañ : keflusker eo d'an hontkenderc'hañ evel d'an askenderc'hañ. Kevaniñ ur bed digent pe keveliñ ouzh treugoù ar bed kent a ampleg ken-ha-ken lakaat araezioù da c'hoari, eleze kalvezerezh. Hemañ a ya en-dro dre werc'hañ ha derc'hañ : gwerc'hañ, embreger gouezioù, beziadoù leun, tud ha traoù ; derc'hañ, embreger arouezioù, beziadoù neptuet, o tec'hervel hontarouezioù. E-ser ar c'halvezerezh eo bet ganet skourroù bras trepetoù mab-den : mard eo ar c'halvezerezh an derc'hañ-gwerc'hañ en arempred ar c'henderc'hañ, ez eo ar ouezoniezh an derc'hañ o kemer ar soliadelezh da hontarouez, ar jedoniezh an derc'hañ o'n em gemer e-unan da hontarouez (mard eus un tralavar eo ganti en en kaver), an arz...

An arz zo kalvezerezh en arempred an hontkenderc'hañ, kalvezerezh da gas war-raok kevanidigezh ar bed oc'h eskorifi, hent etrezek an hontved. Ur wech echu e gevanidigezh avat ez a an hontved da ved. Alese an daou zorc'hadur a gaver gant pep arz : an durc'hadur o reiñ pep pouez d'an *hont-*, divrall gantañ an tued da drehontiñ pep soliadelezh, d'en em zieubiñ diouzh kelc'h ar c'henderc'hañ ; an durc'hadur o reiñ pouez d'an hontkenderc'hañ evel *kenderc'hañ* ur bed da zont en tu-hont d'an hini a zo ha gwelloc'h, araokaetoc'h, h.a. egetañ. Anat ez eo an durc'hadur kentañ a ra dilested an arz, ha ned eo an arzur lusket gant an eil durc'hadur nemet ul ledarzour. Emañ kalon al ledarzour en e oberoù, er ranndir-

se a soliadelezh ez eo an denelezh dleour dezhañ. Kalon an arzur en tenn en tu all da bep oberenn, pa oar eo mut an arz diles hag e ranker, d'en em zieubiñ diouzh kelc'h ar c'henderc'hañ, en em zieubiñ diouzh an arz e-unan, ober anezhañ ur meneger durc'hadur ken eeun, ken diforc'hell hag ur c'hloc'hdi o verkañ an neñv. An arz zo arouez, eleze emnac'h e gounid an hontarouez. Adkouezhañ a reer er c'helc'h ma ne weler en hontarouez nemet un arouez all, dezhi he hontarouez d'he zro hag all. Hent an dieubidigezh eo kavout en hontarouez hent an *tu-hont*. An arz diles zo hent d'an tav, arhent d'ar puñs, tevenn lugernus o valirañ war ar goulo.

AR BREZEL-DIEUBIN KENTAN EN ANGOLA¹

gant

ROGER LE NESTOUR

Ur pennad embannet war *L'Express*² e derou here 1977 a ro un deskrivadur eus stad an traoù en Angola nad eo ket gwall skedus. Hervez Christian Hoche, aozer ar pennad, en darn eus ar vro a zo dindan vestroni gouarnamant Luanda n'eus nemet « berrennez, goubrenerezh, anveli, demagogiezh, dienez », hag en darn all e vez dalc'het en diaskren lu an M.P.L.A. (ar strollad er galloud e Luanda) hag al lu kuban deuet d'e harpañ gant gourzhbellerion an U.N.I.T.A.. Ar pep heverkañ eo e klot mui pe vui an tachad reolet gant an U.N.I.T.A. hervez ar gartenn embannet war *L'Express* gant an hini a oa dalc'het gant an M.P.L.A. evel m'edo diskouezet war ar gartenn treset e levr Basil Davidson deuet er-maez e 1972³ : en daou zegouezh ez eo Reter, Gevred hag un darn eus Kreiz Angola domani ar gourzhbellerion. Er Gwalarn en deus ivez an M.P.L.A. da dalañ ouzh gourzhbellerion an F.N.L.A. hag e sankenn Kabinda ouzh re an F.L.E.C.. An arvar brasañ evit gouarnamant Luanda eo avat an U.N.I.T.A., ha Jonas Savimbi, ambilher ar strollad-se, en deus diogelet da Christian Hoche e tevio a-benn da skarzhañ ar Gubaned diouzh Angola. Gouez da Christian Hoche atav, ez eo troc'het ar pep muiañ eus araeziou-kehentiñ Angola ha seizet armerzh ar vro. Ha pa zalc'her kont eus reteriadur politikel *L'Express*, a oa renet n'eus ket pell c'hoazh gant J.J.S.S., ez eo dav anzav ned eo ket gwall galonekaus an taolennadur graet gant Christian Hoche. Petra zo c'hoarvezet en Angola abaoe 1972, pa oa an M.P.L.A. douger ur vro sokialour nevez ? Perak n'en deus ket an dispac'h angolad dalc'het d'e bromesaou ?

En orin an emsavadegoù angolad kentañ ouzh Portugaliz e 1961 e kaver an M.P.L.A. (*Movimento Popular de Libertação de Angola*) hag an U.P.A. (*União das Populações de Angola*). Diwanet e oa an

1 Sellout ouzh An emsav angolad, in *Emsav*, 73/15-20 1973.

2 Christian HOCHÉ, Angola : l'enlèvement des Cubains, in *L'Express*, n° 1369, pp. 128-130, 3-9 octobre 1977.

3 Basil DAVIDSON, *L'Angola au cœur des tempêtes*, Maspero, Paris 1972, p. 346.

M.P.L.A. e 1956 dindan levezon ul luskad amparet gant kefredourion afrikat portugalaet o doa staget e derou ar bloavezhioù 1950 da studiañ ar yezhoù angolad war-benn sevel ur sevenadur broadel nevez, ha da ren un dezrann marksour eus kevredigezh Angola. Paliou dispac'hel a embannas an M.P.L.A. adal an derou, a-c'hin d'an U.P.A., luskad broadelour ha mirelour, savet gant gouvriaded lakaet o saviad en arvar gant portugadur ar vro. Liammet e oa an U.P.A., ambilhet gant Roberto Holden, ouzh broadelourion Kongo velgiat, ha kuzuliet gant kefridiaded amerikan. Skoazell a zegemeras a-du-rall digant an dispac'herion aljerian dre atiz Frantz Fanon. Hemañ oa emouez ouzh argilusted politikel an U.P.A., nemet e kave dezhañ e oa gouestoc'h an aozadur-se da ren un emsavadeg eget an M.P.L.A.. Ur c'hwitadenn e voe avat gorreadegoù c'hwevrer ha meurzh 1961 e Luanda hag e Norz Angola. Ar re a zreistveas d'ar moustrerezh a rankas en em repuiñ e Kongo-Kinshasa, o paouez kaout he dizalc'hiezh. Hogen, na pa voe degemeret mat Roberto Holden ha levrierion all an U.P.A. gant gouarnamant Kinshasa e voe heskinet dibaouez tud an M.P.L.A. lakaet diskred a gomunouriezh warno. Gant kenwallerezh al lu kongolat e klaske an U.P.A. mirout ouzh stourmerion an M.P.L.A. a dizhout Angola, ma kendalc'he ar gourzhbellerion enep Portugaliz e koadegi ar Gwalarn. Adalek gwengolo 1962 e voe blienet an M.P.L.A. gant Agostinho Neto, o tegouezhout e Kongo-Kinshasa goude bezañ tec'het diouzh e doullbac'h e Lisboa. E du 1963 avat e voe skarzhet Neto hag izili all e aozadur diouzh Kongo-Kinshasa, nemet e kavjont repu e Kongo-Brazzaville. Eno e c'hellas an M.P.L.A. degemer armoù digant S.S.S.R. ha Tchekoslovakia, ha luskañ ur gourzhbellerion oberiantre e sankenn Kabinda.

E meurzh 1962 en doa an U.P.A. kendeuzet gant daou luskad broadelour bihanoc'h evit sevel an F.N.L.A. (*Frente de Libertação Nacional de Angola*) hag amparañ ur "Gouarnamant dispac'hel angolad en Harlu", arleviet gant Holden, a voe anavezet gant an O.U.A. (*Organisation pour l'Unité Africaine*, Aozadur evit Unaniezh Afrika) e 1964. En hevelep bloaz avat e tistrannas Jonas Savimbi, Maodiern an Traoù diavaez, diouzh gouarnamant Holden, o tamall da hemañ bezañ ur gwazour eus ar C.I.A.. Sevel a reas Savimbi an U.N.I.T.A. (*União para a Independência Total de Angola*) a stagas da luskañ ar gourzhbellerion e Reter Angola, hep kalz disoc'hoù avat. E 1966, goude bezañ prenet skiant dre ar gourzhbellerion renet e sankenn Kabinda, e tigoras ivez an M.P.L.A. un talbenn brezel all e Reter an drevadenn. An armoù kaset gant ar riezoù sokialour a veze dilestret e Dar-es-Salaam, hag a-dreuz Tanzania ha Zambia e tizhent Angola dre un hent anvet gant Portugaliz o-unan ar « forzh

Agostinho Neto ». Berzh a reas ar gourzbellerezh e Reter Angola, hag ez emledas buan war-du Kreiz ar vro. Adalek 1971 e oa gouest tud an M.P.L.A. da sevel unvezioù kant den ganto kanolioù diargil dibezhiadus ha hezoug, oc'h argadiñ hag o tistrujañ savlec'hioù kreñv Portugaliz. E 1968 e teuas poellgor-leviañ an M.P.L.A. da chom e rannvroioù dieubet ar Reter.

En em dermenañ a rae an M.P.L.A. evel un aozadur digor da holl Angoliz « hep diforc'h a rev, liv, oad, a orin gouennel, a gredennoù kravezel, a lec'h genidik pe a chomlec'h »⁴, oc'h en em ziforc'hiñ krenn diouzh an F.N.L.A. enepgwen, enepheon hag ivez enepkatolik. Paliou politikel ha kevredigezhel an M.P.L.A. zo bet diverret en diskleriadur a reas Agostinho Neto da Basil Davidson e 1970 : « Strivañ a reomp da zieubiñ ha da arnevesaat hon pobl dre un dispac'h daouel : enep an emframmoù henvoazel na c'hellont ket talvezout dezhi ken hag enep ar galloud trevadennel »⁵. Notennomp mat e tremen e komzoù Neto freuzadur an emframmoù kozh a-raok diskar ar veli bortugalat ; paliou dispac'hel e oa re an M.P.L.A.. Hogen gant un talbenn broadel digor da forzh piv, pegen izel bennak ma ve e stummadur, ha n'edod ket en arvar da forc'hañ diouzh ar paliou-se, da risklañ er gempennelouriezh, hag alese en treuzvarc'had gant an trevadennet ? Evit parraat ouzh seurt argoll e soñjad diazezañ framm ur strollad dispac'hel ambilher ar brezel-dieubiñ. Kement-se a voe klozadur kendalc'h dileuridi Kabinda ha Norz Angola e Brazzaville e c'hwevrer 1968 ha hini dileuridi talbenn ar Reter en ur c'hendalc'h all e-kichen Moxico en Angola en eost 1968. Santet e voe an ezhomm stummañ stourmerion evit lakaat a-sav hevelep strollad, hag e 1970 e oa dek kreizenn-gelenn dispac'hel oc'h arc'hweleñ er rannvroioù dieubet. Hogen Neto e-unan a anzavas e 1970 e oa re abred c'hoazh evit empentañ krouidigezh ar strollad-se, hag e oa anv hepken evit an ampoent a « stummañ an hiniennoù gwellañ hag onestañ a c'hellomp kavout hag a raio o-unan livenn-gein hon strollad da zont »⁶. Un dislavar e oa etre pennaennoù dispac'hel al levieriezh ha diseurtezh mennozioù an diaz bodet en un talbenn broadel.

Goude kendalc'h Moxico ivez e voe amparet ur poellgor-leviañ nevez gant ar pergont daou benn-tachad, ar re-mañ dibabet evit o barregezhioù politikel kement hag evit o ferzhioù milourel war-benn lakaat harz d'ar vilouregezh. Nemet e oa strewet ar gourzbellerezh war un tiriad ec'hon kenan, gant ur c'hehentiñ arvarus, hag evit

⁴ Basil DAVIDSON, id., p. 279.

⁵ Basil DAVIDSON, id., p. 280.

⁶ Basil DAVIDSON, id., pp. 281-282.

aeoliñ ar pennoù-tachad ha kendonian o obererezh e voe savet ur C'hengor-kenurzhiñ politikel ha milourel a bemp ezel. Kadarnaet e voe tuadur dispac'hel an M.P.L.A. : sammañ atebegezhioù ennañ a emlegas bezañ diskouezet ur speredegzh o klotañ gant ar paliou klasket ha dizorniet e voe an atebion a oa dindan ziskred a hiniennelouriezh, meuriadelouriezh, mirelouriezh. Ur c'henglev a oa etre levieriezh an M.P.L.A. ha poblañs ar Reter, ha sturiadouriezh al levierion ne vire ket ouzh ar poblañs a gemer ur perzh oberiat er brezel-dieubiñ, ken er stourm milourel, ken en aozadurioù trevourel. Skolioù, klañvdiou a voe adeiladet ha poellgorioù-kêriadenn e-leizh a voe savet. Berzh a rae ar gourzbellerezh ; « evel ur pesk en dour » edo an M.P.L.A. er poblañs, ha koulskoude ne wriziennas ket enni. Annezidi ar Reter a gounae c'hoazh emsavadegoù dibenn an 19^t kantved ha derou an 20^t, emsavadegoù o doa argaset a-wechoù Portugaliz evit ur prantad. Ledanaat a reas a-galz dremmwel ar gouerion e-ser ar stourm-dieubiñ. Met gwerc'h a oa chomet gant an emframmoù henvoazel er Reter, ma oa bet a-boan boulc'het ar portugaladur. Un azasadur eus an emframmoù-se ouzh amveziadoù ar brezel eo a c'hoarvezas, ha n'eo ket un eilpennadur anezho. Un disklot a vanas atav etre paliou hollveziadel an M.P.L.A. ha broadelouriezh ar poblañs chalet dreist-holl gant skarzhañ Portugaliz. War-raok ez ae ar gourzbellerezh etrezek Kreiz ar vro hag anat e oa dic'halloud al lu portugalat da drech'hiñ dezhañ. Hogen un diouer a zarempredoù a oa etre an diaz hag an aozadurioù-leviañ, en abeg d'ar c'hehentiñ diaes e rannvroioù ec'hon ha koadek, met ivez d'ar speredegzh diforc'h etre levierion ha levidi. Eus gwiskad an "assimilados" (Angoliz kêrelaet, skoliet ha dezho ar riezadelezh portugalat) e teue Agostinho Neto hag ambilherion all an M.P.L.A., ha bras oa ar foz etrezo ha kouerion ar Reter chomet gant o zeodyezhoù hag o stuzegzhioù henstuzel. Ne arc'hwele ket an M.P.L.A. en un doare gwerinek met en un doare sturiadour, hag unan eus strivadegoù pennañ al levieriezh oa stourm ouzh ar veuriadelouriezh hag ar ouennelouriezh en diaz. Ar c'henglev savelet e-ser ar brezel ouzh Portugaliz a zamguzhe an diouer-se a werinegezh.

Adalek an emsavadegoù angolat kentañ en doa Salazar klasket kaelañ an hent ouzh an dispac'herion dre luskañ un diorreadur armerzhel herrek eus an drevadenn. O stadañ e oa gwan ar gevalaouriezh portugalat, e tivizas en ebril 1965 digeriñ Angola hag an trevadennoù all d'ar c'hevalaoù estren. Un afer spletus-tre e voe evit ar gevalaourion amerikan, europat, japanat, suafrikat : en Angola e kavjont ur vro ma oa pinvidigezhioù e-leizh da drevekaat hag un dud-labour niverek hag ezhommek o c'hoarvezout eus darbarerion vorian ha labourerion berzhiek pe damberzhiek portugalat.

Gant postadur ar c'hevalaoù nevez-se e voe lusket ul lammgresh n'he doa an drevadenn anavezet nepred betek neuze. Kenderc'h ar c'hailh-houarn a savas eus ur milion a donennoù e 1967 da 5,6 milion e 1969 ha da 7 milion e 1971, hini an tireoul eus 900 000 tonenn e 1964 da 5 milion e 1970 ha da 7 milion e 1972 (ar pep muiañ anezhañ o tont eus eoulvaez donvor sankenn Kabinda). Eztennerezh an diamantoù a zaougementas etre 1965 ha 1971, o tremen eus 1 200 000 da 2 400 000 karad. Betek 1960 e oa chomet Angola ur vro ma labourer 95 % eus ar boblañs er gennad kentael. Ezporzhiañ a rae diamantoù ha kenderc'hadoù unground ar plantadegoù bras (kafe, sizal, h.a.) : e 1951 e rae ar c'hafe 44,6 % eus an ezporzhiadoù, ar sizal 19,3 % hag an diamantoù 10 %. A-du-rall ez enporzhe Angola diouzh ar vrobenn gwin, gwiadoù, arc'henadoù hag aozadoù all eus ar greanterezh portugalat a gave aze un nevid gwarezet, pa na oa ket kevezus er par etrevroadel (e gwirionez edo ar greanterezh portugalat en ur c'helc'h-bac'h : ne glasse ket dont da vezañ kevezus dre ma kave un digorva diarvar en trevadennoù). Pourchaset e veze gwezhourion d'ar plantadegoù kafe ha sizal dre reizhiad al labour rediet, hag emled ar plantadegoù a gase da skarzhañ mui-ouzh-mui ar gouerion vorian a-ziwar o douaroù, o herrekaat enta diskar ar gevredigezh henvoazel. Ar bankteulennoù pourchaset gant ezporzhiadurioù Angola a roe tu d'an drevadenn da brenañ tangirri, stlejerioù, ijinennoù, trelosk hag an holl aozadoù na oant ket oberiet er vrobenn, nemet e talvezent dreist-holl d'ar vourc'hizelezh portugalat da brenañ madoù-kenderc'hañ : gant an trevadennoù all e teue Angola da leuniañ divigad kenwerzh diavaez Portugal. Dister e oa an daspugnadur en Angola end-eeun : houmañ a dalveze da von-daspugn evit ar vrobenn.

Met displeberañ a reas prizioù-gwerzhañ an ezporzhiadoù. Pa veze gwerzhet da skouer an donennad kafe angolat 37 konto (1 c'honto = 1 000 eskudo) e 1951, e oa tremenet ar priz anezhi da 14,5 konto e 1960 ha da 11,9 konto e 1962. Evit derc'hel hepken o buzadoù o doa ar blanterion hag ar c'hevredadoù o trevekaat ar gounezadoù-ezporzhiañ en Angola ranket pevarc'hementañ gorread o douaroù ha niver o gwezhourion (pobladoù a-bezh eus ar C'hreiz a oa bet trevvaç'het e plantadegoù kafe an Norz). Divastus e oa aet enta ar c'henderc'hadoù gounezel evel bon-daspugn. Ouzhpenn se e oa tarzhet an emsavadegoù kentañ e derou 1961, pezh a vroudas gouarnamant Lisboa da adluskañ diorreadur armerzhel Angola ha staliañ ar muiañ gwellañ a drevadion portugalat er vro evit stourm ouzh an dispac'h. Dav e oa klask e trevekaerezh an danvezioù krai greantel ur bon-daspugn nevez. Met ar gevalaourion portugalat ne

oant ket galloudek a-walc'h evit ober ar postadurioù ret. Digoret e voe enta Angola hag an trevadennoù all d'ar gevalaouriezh etrevroadel e 1965. Met ar postadurioù nevez a zegasas kemmoù don er reizhiad trevadennel.

Tra ma savas niver ar Bortugaliz enbroet eus 172 000 e 1960 da 350 000 e 1971, e voe diorreet oberierezhioù nevez : ar mengleuzioù da gentañ-penn, met ivez al labourioù foran da sevel un danadeilad arnevez, an tisaverezh hag an oberierezhioù liammet outañ (ar simant, an dafaroù-adeiladiñ), hag ur bern ijinerezhioù nevez evel ar gimiezh, ar gwiadoù, an aozadoù boued, an diedoù, h.a., hep kontañ kenwerzhioù ha gwazadurioù liesseurt. E derou ar bloavezhioù 1970 o doa tost an holl gevredadoù greantel portugalat, ar re vihanañ zoken, un iskevredad en Angola. Met gant an amvezioù nevez e teraouas un daspugnadur a-vras en Angola, hag ur vourc'hizelezh emren a ziwanas. Etrezi hag ar broleteriezh e tiorreas gwiskadoù bihanvourc'hiz ha kalvezer graet gant Portugaliz hag a-wechoù gant "assimilados". Ne oa plas ebet d'al labour rediet er greanterezh : c'hoarvezout a rae ar c'hoskor diberzhiek eus gwezhourion angolat dieub (ent furmek da nebeutañ) tra ma oa Portugaliz pe "assimilados" eus ar vicherourion berzhiek. Bremañ ez anaveze Angoliz frankiz nevid kevalaour al labour ha reizhiad al labour rediet a veze arveret nebeut-ouzh-nebeut. War ar plantadegoù, evit talañ ouzh gouzizadur ar prizioù-gwerzhañ e veze erlerc'hiet ouzh ar gounezerezh astennidik ar gounezerezh askoridik : herrekaet e veze an arnevesaat hag an ardivinkaat. Mui-ouzh-mui e oa ezhomm enta eus ur c'hoskor stummet, ha n'eo ket eus darbarerion digelenn.

Daoust ma vire atav ar gevalaourion portugalat ur savlec'h brientek en Angola evit abegoù politikel, e tislebere ar savlec'h-se diarsav, dre m'edo trevekaerezh an danvezioù krai greantel e dalc'h ar c'hevalaoù estren (gant ur perzhiadur portugalat dister). E 1960 e rae an hollad kafe + sizal 46 % eus an ezporzhiadoù angolat hag an hollad tireoul + kailh-houarn + diamantoù 18,2 % ; e 1974 e oa tremenet an dregantadoù-se a-getep da 24,3 % ha da 60,2 %. Ha gant kresk ar boblañs wenn en Angola e tiorreas un nevid nevez. Met an enbroidi o paouez en em staliañ en drevadenn, an elfennoù bihanvourc'hiz ha kalvezer anezho pergen, a veve diouzh patromoù ar stuzegezh-veveziñ ha Portugal ne genderc'he ket ar madoù (kirri, tiaveadoù tredan, h.a.) a glaskent prenañ. Kement-se a roe lañs, diouzh un tu d'an enporzhiadurioù eus ar riezoù greantel, diouzh un tu all d'an ijinerezhioù nevez staliet en Angola. E 1960 e teue 49 % eus an enporzhiadoù angolat diouzh Portugal, e 1974 e oa gouzizet

ar sifr-se da 22 %. A-c'hin e tenne ar vrobenn da gemer ur plas brasoc'h en exporzhiadurioù : 22 % e 1951, 24 % e 1961, 27 % e 1974. Mentel genwerzhel an drevadenn gant Portugal, a oa bet atav dleek betek 1969, a zeuas da vezañ kredek da c'houde. An divigad portugalat en eskemmoù gant Angola a savas da 1,4 milmilion a eskudoioù e 1973. Angola a baouezas a c'hoari ar roll a vondaspuvadur hag a bourchaserez bankteulenoù evit Portugal.

E derou ar bloavezhioù 1970 enta n'eo ket mui Angola ent armerzhel un drevadenn eus Portugal, met un neveztrevadenn a vez trevekaet an danvezioù krai anezhi gant ar gevalaouriezh etrevroadel : eilrenk eo aet roll ar vourc'hizelezh portugalat. En Angola end-eeun e tiorre afo ur vourc'hizelezh emren, gwenn ar pep brasañ anezhi gant un nebeut "assimilados". Diazas-mik eo aet dezvad politikel Angola, n'eo ket hepen diouzh savboent an dispac'herion, met ivez diouzh ur savboent kevalaour. Ar gudenn evit ar gevalaourion nann-portugalat o reoliñ bremañ armerzh ar vro eo kavout un touseg mat a vefe tu da lakaat e penn ur Stad angolat dizalc'h, ma ne vefe plas ebet d'an dispac'herion ha na lakafe ket en arvar ar reizhiad armerzhel beziat. E-se e kendalc'h ar Stadoù-Unanet da harpañ Roberto Holden hag an F.N.L.A. dre hantererezh Mobutu, Arlevier Zair (ezKongo-Kinshasa). A-du-rall e tiwanas luskadoù disrannour e bourc'hizelezh wenn Angola, a skoulmas darempredoù gant an U.N.I.T.A., deuet-mat gant an drevidion dre ma ne oa ket gouennelour evel an F.N.L.A. na dispac'hel evel an M.P.L.A.. Abaoe 1971 e keveleras Savimbi gant al lu portugalat, o tiaesaat obererezh an M.P.L.A.⁷ Ha daoust d'e frazennadurezh amprestet digant Maozedong e talc'has Savimbi darempredoù gant ar C.I.A. evel Roberto Holden.

Emledañ a ra ar gourzbellerezh e derou ar bloavezhioù 1970 e Kreiz Angola (rannvro Bié) hag en Norz (rannvro Malange). Emañ ivez an M.P.L.A. o prientiñ ar stourm armoù er Mervent (rannvro Moçâmedes). Gwellaat a ra armadur ar c'hourzbellerezh : kanolioù diargil, morteziou, bannerioù-fuc'helloù. Kreskiñ a ra kolloù al lu portugalat ha displeberañ e zeltu. Gant stourmerion eus an M.P.L.A. e vez aozet tarvadurioù er c'hêrioù. Ha tra ma kresk e diabarzh Angola levezon bolitikel an M.P.L.A. e ra berzh hemañ en diavaez

⁷ *Afrique-Asie* (Jack BOURDERIE, Angola : la longue trahison de l'U.N.I.T.A., in *Afrique-Asie*, n° 61, pp. 7-17, 8-21 juillet 1974) he deus embannet ul lizher gant Jonas Savimbi d'ar c'hadour Luz Cunha hag un eskemm lizheroù etre Savimbi hag an advaer Ramires de Oliveira, an holl skridoù-se savet e gwengolo, here ha du 1972, hag o tiskouez fraezh en doa an U.N.I.T.A. dilezet ar stourm ouzh Portugaliz ha keveleret ganto enep an M.P.L.A. (hag a-wechoù ivez enep an F.N.L.A.).

ivez war an dachenn bolitikel. E gouere 1971 ez eo bet anavezet evel an aozadur nemetañ o terc'houezañ Angola gant an O.U.A., a droc'h neuze pep darempred gant « Gouarnamant dispac'hel angolat en Harlu » Roberto Holden⁸. D'an hevelep ampoent ez a Agostinho Neto ha pevar dileuriad all eus an M.P.L.A. d'ober ur veaj e Sina. Degemeret eo Neto gant an Tevezeg Chou En-lai ha gant ar Penn-Sturvod : fonnus e voe adal neuze ar skoazell vilourel a-berzh Sinaiz d'an M.P.L.A.. Bodadeg hollek ar Riezioù Unanet, da-geñver he ugent seizhvet dalc'h, a zarbenn ur mennad ma tiskler ez eo luskadoù-dieubiñ Angola, Mozambiko, Ginea hag inizi Cabo Verde derc'houezourion wirion pobloù ar broioù-se. E riezioù europat 'zo, Belgia, Alamagn-Gornog, Italia, Sveden hag en Izelvroioù dreist-holl ez eus bet savet poellgorioù-skoazell evit dispac'herion an trevadennoù portugalat : an M.P.L.A., ar FRELIMO (*Frente da Libertação de Moçambique*) hag ar P.A.I.G.C. (*Partido Africano da Independência de Guiné e Cabo Verde*). Ha dres ez enporzh an Izelvroioù ur c'hard eus ar c'henderc'h kafe angolat. Ar poellgor-skoazell izelvroat a embreg ur stourmad e dibenn 1971, diouzh un tu evit stlennañ ar c'hedveno dre skignañ diwar-bouez an 250 poellgor lec'hel al levrenn *Ar C'hafe hollandat, gwad angolat*, diouzh an tu all evit lakaat ar vezezerion da voikotiñ kenderc'hadoù ar grazerion oc'h arverañ kafe angolat. 400 000 trakt a skignas a-du-rall luskerion ar stourmad, a voe harpet gant an tri c'hreizva c'hweluniadel izelvroat. An eil war-lerc'h egile e rankas an embregerezhioù-krazañ paouez a enporzhiañ kafe eus Angola. D'un dalvoudegezh a 190 milion a lurioù gall e savas ar c'holl evit Portugaliz, ha gouarnamant Lisboa a soñjas kemer darbaroù a zial armerzhel enep an Izelvroioù. E meurzh 1973 e voe lusket ur stourmad-boikotiñ heñvel e Kanada.

Hogen en Angola e kendalc'h Portugaliz da zerc'hel ar rannvroioù a zo pouezus ent armerzhel. E derou 1974 e reol 20 000 gourzbellerezh an M.P.L.A. 400 000 kilometr-karrez, met n'eus enno nemet 500 000 annezad o vevañ atav diwar ur gounezerezh henstuzel (eleze e talc'h an M.P.L.A. un tiriad bras evel ar peder fempvedenn eus Frañs, ma n'eus avat nemet ar gantvedenn eus ar boblañs c'hall). Skoilhoù nevez a zo evit ar gourzbellerezh. Bras-ouzh-bras eo ar skoazell roet gant riezioù an N.A.T.O. da Bortugaliz. Ar re-mañ ne glaskont ket mui trec'hifiñ d'an M.P.L.A., nemet e vagont ar spi d'e gantañ en tareadoù didud ha da gaelañ outañ hent Luanda hag ar c'hêrioù bras. An tirlu hag an aerlu suafrikat a emell bremañ

⁸ E gwirionez e voe kement-se ar c'haogantadur gant an O.U.A. a-bezh eus un disentez bet kemeret e 1968 gant ur poellgor strishaet.

war-eeun en Angola. Gwazourion bortugalat en em sil e benvegadur an M.P.L.A., oc'h aozañ iriennoù evit drouklazhañ Neto hag atebion all. Adalek 1973 en deus an M.P.L.A. da dalañ ouzh ur stourm enepdispac'hel en e ziabarzh dezhañ e-unan. Hevelep aergelc'h a iriennoù n'eo ket lañsus d'ar werinegezh, ha startaat a ra tuadur sturiadour an aozadur. Ha kenderc'hel a ra an M.P.L.A. da stourm ouzh ar ouennelouriezh, ar veuriadelouriezh, nemet e chom atav un talbenn nerzhoù diseurt : ne zeuer ket a-benn da sevel ur strollad dispac'hel hag ar berzhioù milourel a dalvez da guzhat an dislvaroù diabarzh.

Darleviadoù zo embreget gant ar broioù kevalour evit derc'hel an M.P.L.A. en arlez en Angola. Ar gourzbellerezh a grog da zifourkañ er rannvroioù a zo pouezus ent armerzhel, nemet e kav eno skoilhoù na gave ket en taredoù didud ha koadek, ma ne servije ket kalz da Bortugaliz o dreisted a-fet armadur hag aveadur. Kevelerñ a ra bremañ Portugaliz ha Suafrikiz, o deus o-unan skoulmet darempredoù gant Zambia. E Kongo-Kinshasa e tegemer an Arlevier Mobutu (ha drezañ Roberto Holden) skoazell war un dro digant ar Stadoù-Unanet ha Sina. Ha treuzfurmadurioù armerzhel ha kevredigezhel don a c'hoarvez en Angola : ar greantelaat, ar c'hêriekaat, skarzhadeg ar gouerion vorian diouzh an douaroù strujusañ ha kresk pouez an drevision wenn. Ur stourmusted vras a ziskouez ar broleteriezh angolat nevez, da skouer simidi Luanda oc'h ec'hwelañ e gwengolo 1973, oc'h aozañ un diskeladeg dirak palez ar Gouarnour Meur hag o tiframmañ ur c'hresk gopr 50 %. Adalek 1972 e kompren an M.P.L.A. emañ en arvar da chom kantet e toleadoù arlezat ha da na gaout pouez ebet er vro. Emañ dazont Angola e dalc'h an treuzfurmadurioù o c'hoarvezout en tachadoù kêrelaet ha greantelaet, nad int ket reolet gant an M.P.L.A., ha ma c'hell an neveztrevadennerezh gourlakaat e ziskoulmoù. An M.P.L.A. a ziviz degas ar brezel ar buanañ gwellañ er broezennoù a zo pouezus evit armerzh Angola, hini Luanda pergen. Hogen evit diorren an obererezh milourel e taver war ar c'hudennoù politikel hag e klasker kevredañ gant an F.N.L.A., oc'h ankouaat ar genoaz kent. Goude kevraouegoù hir e sin an daou aozadur un emglev d'an 13 kerzu 1972. Savet e voe tri aozadur boutin :

- ur c'huzul uhelañ eus dieubidigezh Angola (kadoriad F.N.L.A., beskadoriad M.P.L.A.),
- ur gourc'hennerezh milourel unanet (kadoriad M.P.L.A., beskadoriad F.N.L.A.),
- ur c'huzul politikel angolat (kadoriad F.N.L.A., beskadoriad M.P.L.A.).

Betek an enbrezel o teraoñ e mezheven 1975 e chomas talvoudek well-wazh an emglev-se. Soñjal a rae an M.P.L.A. n'en doa netra da zoujañ a-berzh an F.N.L.A. war an tachennoù politikel ha milourel. N'en doa ket an F.N.L.A. graet kalz a dra talvoudus abaoe 1961, ha chomet e oa strobet en ur gealiadurezh gouennelour ha meuriadelour. Pal an M.P.L.A. eo astenn ar gourzbellerezh e Norz Angola, e-touez ar pobladoù manet dindan hol an F.N.L.A. ha dre se dioberiant ent milourel. Met an F.N.L.A. eo dreist-holl a denn s'plet eus an emglev-se. Krakvevañ a rae betek neuze, nemet ez eus gantañ un azlañs e-ser an amveziadoù nevez. A-dreñv d'an F.N.L.A. emañ Mobutu, dezhañ da c'houvernoz rannañ Angola e daou : an darn Norz o chom gantañ, an darn Su o vont gant Suafrika. Ur roll bras en deus c'hoariet Arlevier Zair er c'hevraouegoù etre an daou aozadur angolat.

Droukverzhuz ez a ar brezel evit Portugaliz e Ginea, ma'z int bet skarzhet diouzh ar peder fempvedenn eus an diriegezh ha ma'z eo dalc'het o aerlu en diaskren gant fuc'helloù leur-da-aer an emsavidi. E Mozambiko ivez o deus ranket dilezel un darn eus ar vro. En Angola ez a gwelloc'h an traoù evito, nemet emañ bremañ ar gourzbellerezh war dreuzoù ar rannvroioù diorreet. Kollet o deus ar vilourion bortugalat pep spi da faezhañ an dispac'herion en dalc'hadennoù tramor. Etre 1961 ha 1971 o deus ar brezelioù-trevadenniñ koustet 80 milmilion a eskudoioù, eleze dre-vras 55 % eus kelliidsteuñv ar Stad. An dispignoù milourel a gresk dibaouez, o sevel da 15,2 milion a gontoioù e 1972 ha da 17,6 e 1973. Ha gouarnamant Lisboa a anzavas e 1975 8 000 lazhet ha 28 000 gloazied eus 1961 da 1974. Ar vourc'hizelezh portugalat he deus kollet Angola evel bon-daspugn, ha krog eo d'en em c'houlenn hag e talvez ar boan kenderc'hel gant ur brezel a goust ker hag a zo s'pletus dreist-holl d'ar gevalourion estren. A-du e teu da vezañ gant emrenerezh Angola hag an trevadennoù all e stern ur c'hevreadur portugaleger. Gant bec'h ar brezelioù e vez skoilhet ouzh diorreadur ar vrobenn a chom warlerc'hiet, enni un darn vras eus ar boblañs digelenn. Ur milion a labourerion bortugalat zo aet da glask gourc'hwel e Frañs hag e broioù greantel all, ent dirgel peurliesañ ; en o zouez ez eus kalz paotred yaouank o tec'hout rak an enluadur ; e 1973 e tizert evel-se an hanter eus ar c'halvidi. Abaoe derou ar brezelioù-trevadenniñ ez eo bet dilezet mui-ouzh-mui ar vicher vilourel gant mibion ar vourc'hizelezh uhel hag etre, hag an ofisourion a zeu bremañ niverus-ouzh-niverus eus gwiskadoù izeloc'h, o tegas ur speredegezh nevez el lu. Alies eo tremenet an ofisourion nevez-se dre ar Skol-veur : lenn a reont oberennoù Lenin, Maozedong, Che Guevara. Barn a reont garv ar brezel o lakaer d'ober. E Ginea-Bissau

en eost 1973 e tiwan ul luskad ofisourion nagenner a zeuio da vezañ an M.F.A. (*Movimento das Forças Armadas*, Luskad an Nerzhoù-Lu) ; en derou e vevenont o arc'hadurioù d'an dachenn vicherel, met buan e santont an ezhomm da stourm war an dachenn bolitikel evit diskar ar Stad faskour ha lakaat fin d'ar brezelioù-trevadenniñ a sellont evel arvarus evit dazont Portugal.

D'an 23 c'hwevrer 1974 ez eo embannet e Lisboa al levr *Portugal e o futuro. Analise da conjuntura nacional* (Portugal hag an dazont. Dezrann an tuez broadel) skrivet gant ar c'hadour Antonio de Spínola. Ar penn milourel portugalat anvekañ eo hemañ. En em gannet en deus diouzh tu Franco e-pad brezel Spagn ha diouzh tu an Alamaned e Stalingrad. E 1961 ez eo aet da vrezeliañ en Angola hag e 1968 eo bet ezholet da C'houarnour Meur e Ginea. Eno ez arver hentenoù arnevesañ an enepgourzbellerezh, evel tolpadur ar boblañs e touinelloù bellouriezhel ; klask a ra tizhout ar P.A.I.G.C. dre ober drouklazhañ ar bleiniad anezhañ, Amílcar Cabral, e Conakry e genver 1973. C'hwitañ a ra avat a-benn ar fin : al lu portugalat a rank dilezel ar pep brasañ eus tiriagezh an drevadenn, ma'z eo bonnet Republik Ginea-Bissau d'an 24 gwengolo 1973 gant an emsavid. Anavezet eo ar Stad nevez gant an U.N.O. d'an 2 du. Paouezet en deus Spínola a grediñ en un diskoulm milourel. Deraouiñ a ra e levr o stadañ ar goulerc'h bras he deus Portugal e-keñver ar broioù europat all. Hogen ne zeuio nepred Portugal a-benn da ziverkañ an dilañs-se, gouez da Spínola, mar kendalc'h gant ar brezelioù-trevadenniñ. Diogeliñ a ra eo aet dic'hallus an trec'h dre an armoù ha ne c'hell an diskoulm bezañ nemet politikel ; hervezañ ez eo arabat enebañ ouzh iziunadoù poblañsoù an dalc'hadennou tramor. Kinnig a ra un hent etre ar stad'zo, a sell evel kondaonet, ha dilezidigezh an trevadennou gant an dispac'herion : savidigezh ur C'hevreadur luzitan ma vo emren Angola, Mozambiko ha Ginea.

N'eus ket un den digenvez eus Spínola. E vennozioù zo re askell araokadek ar vourc'hizezh portugalat, a glask ober eus he bro unan arnevez ha greantel (liammet eo ar c'hadour ent personel ouzh trust portugalat ar vetalouriezh Champalimaud). Mennet eo an askell araokadek-se da erlerc'hiañ ouzh dezvad kozh an dalc'hadennou tramor ar reizhiad enep-trevadennour : an emrenerezh politikel hag ar gougevanadur armerzhel ouzh Portugal hag ar broioù Kornog all (emouez eo Portugaliz ouzh o bevennoù dezho a-fet barr-postañ). Soñjal a reont e chomo atav ar sevenadur portugalat ul liamm kreñv a-walc'h evit reiñ an tu da ziazezañ ur c'hevreadur eus an holl vroioù luzitaneger. En Angola e kontont ouzhpenn se war niver bras an drevadion wenn evit derc'hel ar vro e horgant Lisboa. Kejañ a ra ivez mennozioù Spínola gant re kalz ofisourion yaouank. Kemmoù

don ez eus a-du-rall er c'hedveno portugalat. Brasaat a ra an droukvoz er boblañs da heul an dic'hwel, an divroadeg, kolloù ar brezelioù-trevadenniñ o padout abaoe bloavezhioù hag a zo bet kollet ar spi d'o gounit. Dre hanterezh ar re a labour en estrenvro ez a Portugaliz emouez ouzh o goulerc'h e-keñver ar riezoù diorreet. Greanteladur Portugal, daoust ma chom skort-tre, a ro lañs er vro d'an emsav micherour a ya war voniekaat, daoust d'ar skoilhoù politikel ; dindan levezon gomunour emañ an Etrech'hweluniad amparet e 1970 gant 217 uniad enno daou vilion a vicherourion hag a implijidi, evit ar *Partido Comunista Português* da vezañ dirgel. Ha kalz efedusoc'h e teu da vezañ stourmoù al labourerion diwar ma vezont kenurzhet gant an Etrech'hweluniad. Ar stuzegezh-veveziñ a zeu da vezañ hini gwiskadoù 'zo er renkadoù-etre, pezh a lak o speredegezh hag o zalvoudoù da gemmañ : dispredet e teu da vezañ evito ar renad hollveliek hag an Impalaeriezh trevadennel, hetiiñ a reont diazezidigezh ur weriniezh vourc'hiz. En arme e kresk levezon Luskad an Nerzhoù-Lu. Gwalldaolioù ha tarvadurioù a vez aozet gant ar gleizelourion. Ne chom ket kennebeut ar skolioù-meur portugalat er-maez eus an nagenneriezh o reuziañ skolioù-meur ar bed kevalaour. Tangleuziet e vez mui-ouzh-mui renad faskour an Tevezeg Caetano, a zo diskaret d'an 25 ebrel 1974 gant ofisourion eus an M.F.A.. Spínola a gemer penn ar gouarnamant nevez. Adsavelet eo ar frankizoù gwerinek ha loezet ar P.I.D.E. (Polis politikel kuzh savet gant Salazar war batrom ar Gestapo). Didoull-bac'h et eo ar brizonidi bolitikel, hag an harluidi a c'hell distreiñ da Bortugal. Startaet eo savlec'h dispac'herion an trevadennou dre m'o deus eziporzhet o dispac'h er vrobenn.

D'ar 15 mae 1974 ez embannas an M.P.L.A. dre e wazva eus Luzaka, kêrbenn Zambia, un diskleriadur foran ma stade ne oa kemm ebet en Angola abaoe an 25 ebrel, ha ma c'houlennas digant ar gouarnamant portugalat nevez bezañ kempoell gant e bennaennoù gwerinek dre anavezout gwir ar bobl angolat da emsavelañ ; diogeliñ a rae an M.P.L.A. e oa mennet da genderc'hel gant ar stourm armoù betek an dizalc'hiezh klok. Diskleriadurioù heñvel a voe graet gant dispac'herion an trevadennou all, a ouie e oa darvoudoù ebrel e Portugal un heuliad a'r brezelioù renet ganto o-unan abaoe bloavezhioù, ha n'o doa ket c'hoant kouezhañ en antell ar C'hevreadur luzitan. Seul ziblegoc'h e oa an M.P.L.A. ma soñje e vefe didrevadennadur Angola da vezañ luziet-tre, en abeg da binvidigezhioù ar vro, d'al lazioù liammet outo, da niver ar boblañs wenn ha d'ar genoaz etre luskadoù broadel disheñvel. Diouzhtu goude an 25 ebrel e tiwan e-metou an drevadion un tregont bennak

a strolladoù politikel, faskour pe emrenelour, dezho da bal pe enebñ ouzh nep didrevadennañ pe derc'hel mestroni ar re wenn en un Angola dizalc'h e-giz Rodezia. Ur giriegezh vras a sammas ar strolladoù-se e darvoudoù gouere hag eost 1974 e Luanda. D'an 12 gouere e tizoloer kelan ur blenier taksi portugalat e-kichen ur *muçeque* (bidondrev) tudet gant Angoliz. Diouzhtu ez eo tamallet annezidi ar bidondrev gant ar re wenn, ha gant strolloù trevidion e vez embreget dialgerc'hioù. Daoust d'ar c'heulfe ez eus e Luanda bemnoz e-pad ouzhpenn miz fuzuilhadegoù ha lazhadegoù. En abeg da c'houzañvadegezh al lu portugalat, na gred ket moustrañ ar re wenn, e sav poblañs vorian ar *muçeques* bezinoù evit en em ziwall. Bodadennoù karter zo amparet gant Angoliz evit plediñ gant an difennerezh hag ar pourvezerezh-boued, tra ma'z eo skarzhet ar *fubeiros* portugalat pe kaboverdeat, hantergenwerzhourion, hanterhoulierion, staliet er bidondrevioù. Ar re wenn o-unan n'en em santont ket e surentez e seurt amveziadoù, ha diboblañ a ra Luanda tamm-ha-tamm : deraouet eo distro an drevidion da Bortugal.

N'eo ket mui gwall dagus al luoz portugalat enep ar gourzhbellerezh abaoe an 25 ebrel, hag an dispac'herion a denn korvo eus kement-se evit startaat o savlec'hioù. E Ginea e rediont Portugaliz da zilezel bon Jamberen, unan eus ar re bouezusañ er vro ; e Mozambiko e tostaont ouzh Beira, porzh bras an drevadenn. Ha leviadurezh neveztrevadennour Spinola a gav harz gant ar strolladoù kleiz hag an M.F.A., a zo digembezus evito ar werinelezh en diabarzh hag an impalaerouriezh en diavaez, hag a zarvenn un diskoulm herrek eus kudenn ar proviñsoù tramor⁹. Politikerezh armerzhel ha kevredigezhel ar gouarnamant arleviet gant Spinola zo ivez nagennet gant an tu kleiz. Ken e rank an Tevezeg Palma Carlos, keneil personel d'an Arlevier, reiñ e zilez e gouere 1974 ; amsavet eo gant ar glevgadour Vasco Gonçalves, eus askell a-du-komunour an M.F.A.. D'an 27 gouere e ra Spinola ur brezegenn gefridiel ma tiskler anavezout gwir an dalc'hadennoù tramor da emsavelañ. An Arlevier en deus graet van aze da zarbenn savboent an M.F.A., nemet e kendalc'ho gant e zarleviadoù evit derc'hel an trevadennoù, Angola dreist-holl, en horgant portugalat. Hogen e Ginea-Bissau hag e Mozambiko, ma n'eo ket deuet a-benn an aozadurioù graet gant tousegi da gaout ur pouez bennak, ez eo re anat ar c'hefiverioù-nerzh evit ma klaskfed herzel an dispac'herion. D'an 28 eost e sin gouarnamant Lisboa un emglev gant ar P.A.I.G.C. ; d'an 10 gwengolo

⁹ Gant Agostinho Neto e-unan e voe graet eus an M.F.A. « ar pevare luskad-dieubiñ ».

ez anavez dizalc'hiezh Ginea. Un emglev all zo sinet d'ar 7 gwengolo gant ar FRELIMO : raksellet eo dizalc'hiezh Mozambiko evit an 25 mezheven 1975.

En Angola koulskoude ne goll ket Spinola ar spi da ziazezañ ur reizhiad neveztrevadennel ha da ezvevennañ an M.P.L.A.. Kavout a ra dezhañ ez eo seul aesoc'h derc'hel an M.P.L.A. en arlez ma emañ hemañ evit an ampoent en un enkadenn c'hrevus. E Kendalc'h Luzaka en eost 1974 e sav nagennerezh e diabarzh an M.P.L.A.. Diouzhtu un tu e tistrann Daniel Chipenda, unan eus an atebion vilourel pennañ, e penn an tuad broadelour dehou " Emsavadeg ar Reter ". Aznerzhet eo bet ar vroadelouriezh e-barzh an M.P.L.A. dre an emglev gant an F.N.L.A. e kerzu 1972. Chipenda, e penn tri mil gourzhebeller, en deus klasket diskar levrierezh an M.P.L.A. ; gwallvesket eo bet ivez en un irienn evit lazhañ Neto. Diwezhatoc'h e tiogelas ar morvezhen portugalat Rosa Coutinho, bet uhelgefridier Angola, en doa en e gerz prouennoù darempredoù etre Chipenda, pa oa studier e Skol-veur Coïmbra, hag ar P.I.D.E. A-du-rall e sav a-enep Neto an tuad kleizelour " Emsavadeg oberiat ". Bleniet eo an tuad-se gant ar vreudeur de Andrade, hag embannet en deus ur " Galv da holl stourmerion ha holl sternioù an M.P.L.A. ", o tezvarn amgwerinegezh ha sonnadir al luskad, nannperzhiadur an diaz en disentezioù, dispistet ar gelennadurezh politikel, o tamall da Neto e leviouregezh, o stadañ ned eo ket aet da get e diabarzh an aozadur ar ouennelouriezh hag ar veuriadelouriezh. Gant an daou duad disrannour e oa bet diskuliet gwanderioù an M.P.L.A., a oa chomet damguzhet en abeg da bouezekadur ar stourm milourel. Hemañ oa morzet abaoe an 25 ebrel, o lezel ar plas kentañ d'ar c'hudennoù politikel tavet warno betek neuze.

Ur foz oa bet atav etre levierion an M.P.L.A., bihanvourc'hizion stuziet ha kêrelaet, emouez ouzh ar stourmoù hag ar c'hefiverioù-nerzh e par ar bed a-bezh, ha poblañs ar Reter, graet gant kouerion chomet gant o stuzegezh henstuzel ha na c'hallent reiñ d'ar brezel a renent nemet un endalc'h broadelour hag enepportugalat, e-maez a bep diarsell hollveziadel. An M.P.L.A. en doa en em gannet en amveziadoù tenn kenan, e broezennoù ec'hon ha didud enno ur c'hehenterezh diaes. Nepred n'en doa arc'hwelet en un doare gwerinek, an diaz a veze lezet er-maez eus an disentezioù : breutaat gant an diaz a vije bet sellet gant al leviadezh evel noazus ouzh efedusted an obererezh milourel. Stourm a rae an M.P.L.A. ouzh ar ouennelouriezh hag ar veuriadelouriezh, met en un doare aotrouniek ha moustrus : dic'houzvez e oa peurliesañ ar sternioù a orin kêriat

eus kevredadelezh ar rannvroioù dieubet. Hogen evit kouerion ar Reter e talveze skarzhañ al lu portugalat kement hag adkavout ar frankiz e-barzh o emframmoù kozh ; ha berzhioù end-eeun ar stourm milourel ma kemerent perzh oa lañsus d'ar veuriadelouriezh. War ar genel M'Bunda e harpe tuad disrannour Daniel Chipenda : gant kevredadelezh ar Reter e tispleger an darnad-se kement ha gant uhelegezh Chipenda. N'en doa ket an M.P.L.A. kaset dezrannoù politikel don ; atav en doa embannet palioù sokialour hag enep-impalaerour, met hep digejañ ur gelennadurezh resis. Chomet e oa un talbenn nerzhoù broadel o c'houzañv dislavaroù diabarzh.

D'ur c'hwitadenn e tisoc'h Kendalc'h Luzaka. Neoazh ur vodadeg all dalc'het e Brazzaville etre an 31 eost hag an 3 gwengolo a ro tu da ziazezañ un treuzvarc'had etre leviadezh an M.P.L.A. hag an daou duad disrannour. Ul leviadezh ersezat zo savet, hag a zle bleniañ an M.P.L.A. betek ar C'hendalc'h kentañ, a zo da vezañ dalc'het goude dizalc'hiezh Angola. Ar framm nevez a c'hoarvez eus :

- ur c'hadoriad : Agostinho Neto, daou veskadoriad : Daniel Chipenda, Joaquim de Andrade (eus " Emsavadeg oberiat "),
- ur Poellgor-kreiz a 39 ezel, 16 anezho o tont eus al leviadezh kent, 13 eus " Emsavadeg ar Reter ", 10 eus " Emsavadeg oberiat ",
- ur Burev politikel a 9 ezel, al leviadezh kent hag an daou duad disrannour oc'h ezholiñ pep a dri ezel.

Met al leviadezh ersezat-se n'he devo ket tro da arc'hwelañ. Neto, o santout emañ an M.P.L.A. en arvar da forc'hañ diouzh e balioù dispac'hel, a glask harp stourmerion an diaz, n'o deus ket c'hoant gwelout al luskad o tarnaouiñ ha gounidoù bloavezhioù a vrezel kaset da get. A-daol-trumm en em gav tud an diaz war ar rakleur ; eus an 12 d'an 20 gwengolo ez emvod e-kichen Moxico kuzuliadeg etrerannvroel ar stourmerion, a zilenn he Foellgor-kreiz hag he Burev politikel en ur ezvevennañ izili an div " Emsavadeg ". Neuze e sank Chipenda er bratelladur : mont a ra e darempred gant broioù kevalaour, Brazil pergen¹⁰, a bourchas dezhañ armoù, hag e c'hwevrer 1975 ez entu gant an F.N.L.A. An tuad " Emsavadeg oberiat " ne voe-efñ nepred dañjerus evit Neto, dre ma oa ul luskad hep diaz poblañsel. Ne voe ket an M.P.L.A. tizhet e arwarzh en Angola gant an enkadenn, met e-pad un nebeut mizioù ne voe ket e tro da c'hoari ur roll politikel devoudus er vro, hag a-benn ar fin e voe gwashaet c'hoazh pleg sturiadour al levrierezh.

¹⁰ Deuriet-tre eo ar gevalaourion vrazilat gant Angola, hag ivez ez eus kevezerezh etre Brazil ha Portugal evit bezañ blein al luzitanegva-bed.

Tra ma'z eo gwanaet an M.P.L.A. gant e enkadenn e tenn splot an F.N.L.A. hag an U.N.I.T.A. eus an amveziadoù nevez hag e kemeront en Angola ur pouez hep keñver gant ar roll o deus c'hoariet er stourm-dieubiñ. Muioc'h eget biskoazh e tegemer Roberto Holden skoazell digant ar Stadoù-Unanet hag ar broioù kevalaour (hag ivez digant Sina), dre hanterezh Mobutu. Jonas Savimbi a starta e zarempredoù gant al lu portugalat hag an drevidion, oc'h en em ginnig evel un habaskterour a zoujo da lazioù ar Bortugaliz staliet er vro mar en devez ar galloud en Angola. Hag en eost 1974 e sav e sankenn Kabinda a-enep an M.P.L.A. ul " luskad-dieubiñ " all : an F.L.E.C. (*Front de Libération de l'Enclave de Cabinda*), o tiskleriañ da bal dizalc'hediñ Kabinda war un dro diouzh Lisboa ha diouzh Luanda. Diogeliñ a ra an F.L.E.C. ned eo ket lodennek sankenn Kabinda en Angola dre ma vez komzet enni kalz muioc'h ar galleg eget ar portugaleg. Respont a ra an M.P.L.A. ez eo bet Kabinda gwechall lod e Rouantelezh Kongo diazezet e Norz Angola, ez eo bet rediet Portugal e 1884, da heul Kuzuliadeg etrevroadel Berlin, da lezel an tachad o tistrannañ ar sankenn diouzh peurrest Angola gant Kongo velgiat evit m'he defe houmañ digor war an Atlantel, ha n'o deus ket bet ar stourmerion gabindat an disterañ rukun o vont d'en em gannañ e rannvroioù ar Reter. Gant eoulvaez Kabinda, donvoriat ar braz anezhañ ha trevekaet gant ar c'hevredad amerikan Gulf Oil, ez eo kenderc'het ar pep muiañ eus an tireoul angolat. Lesanvet e vez Kabinda « ar C'howeit afrikat » : er sankenn ez eo savet ar c'henderc'h tireoul eus ur milion a donennoù e 1966 da 8 milion e 1973, ha rakjedet e vez 65 milion a donennoù evit 1978. Pa ouzer ez eus danvezioù krai all ivez e Kabinda : houarn, manganez, fosfatoù, prenn prizius, h.a., e c'haller spurmantiñ peseurt « dieubidigezh » a fell d'an F.L.E.C. ren. E daou skourr eo rannet e gwirionez an aozadur-se : unan kelledet gant ar Gulf Oil ha haroet gant Mobutu, egile arc'hantaouet gant ar c'hevredad tireoul Elf-Congo hag o tegemerout skoazell ar gouarnamant gall. En here 1974, goude bezañ deuet er-maez eus an enkadenn m'edo ha saveteet e unvaniezh, ez aloub an M.P.L.A. sankenn Kabinda a-bezh. Neuze e chom kantet an F.L.E.C. en ur roll a vezin brevez eus Gulf Oil, o tiwall ar puñsoù hag an aveadurioù tireoul : d'an 12 c'hwevrer 1974 en deus an M.P.L.A. diskleriet e oa mennet da ziberc'hennañ ar c'hevredadoù estren o labourat en Angola. Tal-ouzh-tal e chom stourmerion an M.P.L.A. ha re an F.L.E.C. war vevenn ar greantvaoù, hep en em gannañ avat, hag ar Gulf Oil a c'hell kenderc'hel da drevekaat an tireoul.

D'ar 15 gwengolo 1974, en enez Sal, unan eus an inizi Cabo Verde, e kejas Spinola gant Mobutu, a oa mennet eveltañ da

ezvevennañ an M.P.L.A. (Un nebeut deizioù a-raok e oa bet un emweladenn etre Spinola hag al Leviour amerikan Nixon en inizi Açores). Mobutu a c'houlennas digant Arlevier Portugal :

— disrannadur Kabinda diouzh Portugal, gouarnamant ar sankenn o vezañ fiziet en F.L.E.C.,

— ezhoadur ur gouarnamant angolat « dizalc'h » o tereout, ken ouzh Mobutu, ken ouzh Spinola (eleze, ent empleg, reiñ ar galloud e Luanda da Roberto Holden ha d'an F.N.L.A.),

— diazezadur ur Stad kevreadel oc'h enklozañ Zair, Angola, Kabinda, gant Mobutu da Arlevier¹¹.

Spinola a asantas d'ar goulennoù-se, met war an divizoù-mañ :

— Mobutu en defe da harpañ Spinola war an dachenn diplomatel en Afrika, o reiñ anezhañ ur skeudenn a vuhezegzh politikel mat d'ar pennoù-Stad afrikat,

— ar c'hevredadoù portugalat pe skourroù portugalat ar c'hevredadoù liesvroadel o trevekaat danvezioù krai Angola, Kabinda ha Zair, a c'hallfe kenderc'hel gant o obererezhioù e pep frankiz e-pad ugent vloaz da nebeutañ,

— Mobutu a skoazellfe Spinola da aspiaouañ Mozambiko ha Ginea-Bissau, diwar-bouez stourmadou-gourzhtreñ, drouklazhadennoù, goubrenadur izili 'zo eus al luskadoù dispac'hel, ergerzhadegoù renet gant gopr-soudarded, taolioù-Stad, h.a..

Gant Mobutu e voe degemeret an holl zivizoù-se. Goude kejadenn an daou Arlevier, e tisklerias ar morvezhen Rosa Coutinho, ezel eus an M.F.A. : « D'an deiz m'hor bo en hon c'herz eskadenn gefridiel emweladenn Sal, e vo an embannadur anezhi un dra spouronus ». Ne gredas ket ar gouarnamant portugalat he lakaat da vezañ diskuliet a-raok an 11 here 1975, ma voe embannet gant ar gelaouenn *República*.

N'en devoe ket amzer Spinola da gas da benn e ratozh a-zivout Angola. An taol-Stad embreget gantañ d'an 28 gwengolo evit skarzhañ an tu kleiz diouzh ar gouarnamant a c'hwhitas en abeg da eneberezh taer an M.F.A. ha da enluskadur ar renkad vicherour oc'h aloubiñ straedoù Lisboa. Ha d'an 30 gwengolo e rankas Spinola reiñ e zilez eus e garg ; amsavet e voe gant ar c'hadour Costa Gomes.

¹¹ Jean Dutourd a huñvre ivez en ur C'hevread eus an holl vroioù galleger, ambilhet gant Frañs evel just (sellout ouzh *Mascareigne ou le schéma* er rann Levrioù in *Emsav* 123/43-48, 1977). Hogen Mobutu n'en deus ket skiant an humour a zo gant Dutourd, ha kemer a ra e huñvreoù kevreadel a-zevri-tout.

Savet e voe un tevezvod nevez ma oa ar gourfouez gant an tu kleiz. Adal neuze e vez kaset herrek war-raok an didrevadennadur. Gant un emglev diazezet d'an 26 du 1974 etre gouarnamant Lisboa ha d'erc'houezourion eus Sao Tomé ha Príncipe, ez eo raksellet dizalc'hiezh an inizi-se evit an 12 gouere 1975. D'ar 5 eus an hevelep miz e tle ivez inizi Cabo Verde dont da vezañ ur riez, da heul un emglev all sinet d'an 19 kerzu 1974. Hogen en Angola e rank Portugaliz d'erc'hel kont eus ar c'hevezerezh etre tri luskad. En eil pemzektez gwengolo, etre emweladenn Sal ha diskar Spinola, en deus lu an F.N.L.A. aloubet distriegoù Zair hag Uige e Norz Angola gant kenwallerezh al lu portugalat roet dezhañ an urzh da na enebañ. Soudarded pourchaset gant Mobutu a ya e gwirionez d'ober ar braz eus arme an F.N.L.A.. Ha war an amboaz mirout en Norz hepken tud ar genel Bakongo (hini Roberto Holden), e ra an F.N.L.A., e sigur freuzañ al labour rediet, skarzhañ ar wezhourion o tont eus Kreiz ar vro hag o labourat war ar plantadegoù kafe. Un emweladenn zo aozet gant Mobutu war e lestr-bale personel d'an 12 here 1974 etre ar c'hadour Fontès Pereira de Melo, eil Penn-Sturvod al lu portugalat, ha Roberto Holden. Hemañ a gemenn neuze d'e soudarded paouez gant ar brezel ouzh Portugaliz d'ar 15 here. Damc'houde e kej ivez Pereira de Melo e Kinshasa gant Savimbi ha Chipenda. D'an 25 du 1974 e sin an F.N.L.A. hag an U.N.I.T.A. un emglev e kêrbenn Zair, o sevel un talbenn enep M.P.L.A.. Hag an U.N.I.T.A., diouzh e du, zo harpet gant an drevidion. Chom a ra an M.P.L.A. kantet e tachadoù isdiorret ar Reter hag e Kabinda : mard eo deuet a-benn da skoilhañ ouzh disrannadur ar sankenn diouzh Angola, n'eo ket digor dezhañ hent ar galloud e Luanda.

Ar gouarnamant portugalat nevez a ersav ouzh an holl embregerioù da ezvevennañ an M.P.L.A. ha da droc'hañ Kabinda diouzh peurrest ar vro. Strivañ a ra da zistagañ an U.N.I.T.A. diouzh an F.N.L.A. dre c'hoari war goulzataerezh Jonas Savimbi. Kaset eo an advael Passo Ramos e Reter Angola d'ober an hanterour etre Neto ha Savimbi, ha dont a ra a-benn da gendrec'hiñ bleintiad an U.N.I.T.A. e vo spletusoc'h dezhañ kevrediñ gant an M.P.L.A. eget gant an F.N.L.A.. D'an 18 kerzu 1974 e kej Neto ha Savimbi e Luso, e Reter Angola, o sinañ un emglev ma tiogelont ez eo Kabinda lodenn e tiriagezh Angola ha ma kouviont an F.N.L.A. da gemer perzh e diazezadur ur gensavenn bolitikel e sell d'ar c'hevraouegoù gant Lisboa evit dizalc'hiezh Angola.

An tri luskad broadel a oar e rankint en em glevout war un amkaniad boutin evit kevraouiñ a-gevret gant gouarnamant Portugal. Dileuridi an M.P.L.A., an F.N.L.A. hag an U.N.I.T.A. a emvod e

Mombasa, e Kenia, eus an 3 d'ar 6 genver 1975, o tisoç'hañ d'ur c'hendiskleriadur ma tizarbennont nep rannadur eus an diriegezh angolad, ma anzavont ar ret ez eo sevel ur gevredigezh nevez en o bro war diazezoù gwerinek, ma embannont bezañ mennet da zarvennout digant ar gouarnamant portugalat darbaroù mallus evit parraat ouzh disleberadur armerzh Angola ha gwareziñ lazioù al labourerion. D'an 10 genver e teraou en Alvor, e Portugal, ar c'hevraouegoù etre an tri luskad ha gouarnamant Lisboa. N'eo ket bet ezvevnet an M.P.L.A., nemet ez eo bet lakaet war an hevelep pazenn hag an daou aozadur all : dav eo bet d'erc'hel kont eus ar pouez kemeret gant an F.N.L.A. hag an U.N.I.T.A. abaoe an 25 ebrel 1974 tra ma oa gwanaet an M.P.L.A. gant e enkadenn diabarzh¹². Ha digenvezet en em gav ar gouarnamant kleiz portugalat, taget gant ar wask vourc'hiz e Kornog-Europa hag o c'houzañv un dial armerzhel a-berzh ar broioù kevalaour abaoe an 28 gwengolo 1974. Ha Maodiern an Traoù Diavaez zoken, Mario Soarès, eus askell dehou ar strollad sokialour, n'en deus ket heuliet al linenn enep-impalaerour erbedet gant e strollad¹³, ha miret en deus gouvennozioù neveztrevadennour : en here 1974 en deus kejet gant Savimbi, Holden ha Chipenda e Kinshasa, hag e du gant Holden adarre e Tuniz.

Diwar an emglevioù sinet d'ar 15 genver gant an tri luskad hag ar gouarnamant portugalat, ez eo anat e ranko an M.P.L.A. rannañ ar galloud gant nerzhoù neveztrevadennour. Raksellet eo dizalc'hiezh Angola evit an 11 du 1975. Da c'hortoz an deiziad-se e vo savet e Luanda ur gouarnamant ersezat a vo kembeliek adalek an 31 genver. Arleviet e vo gant ur stroll arlevierel a dri ezel, unan a bep luskad : ha dindan c'houlevierezh un uhelgefridier portugalat ez arc'hwelo ar stroll arlevierel. Daouzek maodiern a vo, Portugal hag an tri luskad-dieubiñ oc'h ezholiñ pep a dri maodiern. Kadoriadet e vo Kuzul ar Vaodierned gant unan eus izili ar stroll arlevierel, a bep eil. Evit difennerezh Angola en devo ar gouarnamant ersezat en e c'hourc'hemenn un arme 24 000 soudard portugalat hag 8 000 soudard a bep luskad-dieubiñ, hag ar vilourion portugalat na vint ket lodennek el lu-se a ranko kuitaat Angola a-barzh an 30 ebrel. Aozet e vo dilennadegoù a-benn nav miz d'ar muiañ, ha ne vo nemet an tri aozadur kensiner o devo ar gwir da ginnig emstriverion. Ur

12 E 1974 e-pad un nebeut mizioù o doa zoken Soviediz paouezet a harpañ an M.P.L.A. dre m' o doa kollet fiziañs ennañ. Adalek du 1974 avat ez adkrojjont da skoazellañ luskad Agostinho Neto.

13 Ur mennad darbennet gant kendalc'h ar strollad sokialour portugalat e Lisboa d'ar 15 kerzu 1974 a c'houlenne ma ve anavezet an M.P.L.A. evel d'erc'houezour nemetañ al labourerion angolad.

C'hengor kemmesk, hanterportugalat, hanterangolat, a bleo gant ar c'hudennoù kellidel hag armerzhel o teverañ diouzh an treuzkas riegezh. Anavezet eo Kabinda evel lod e tiriegezh Angola, a ranko chom kevana.

N'eo ket diemsav a-grenn emglevioù Alvor evit an M.P.L.A., ha darnel eo trec'h an nerzhoù neveztrevadennour : dalc'het eo bet en arlez an F.L.E.C., luskad Chipenda, ar strolladoù savet gant an drevidion goude an 25 ebrel 1974. Ha gant ar gouarnamant ersezat e vo lakaet Angoliz da sammañ atebegedzioù uhelañ levrierezh o bro : ar gudenn evit an M.P.L.A. a vo mirout ouzh an dizalc'hiezh a chom e par an ensavadurioù hepken. Hogen tavet ez eus bet gant emglevioù Alvor diwar-benn unan eus ar c'hudennoù pouezusañ, hini trevekaerezh danvezioù krai Angola : goñt a ouie ar c'hevrennoù ne vije ket bet tu d'en em glevout war an divoud-se. Padal emañ ar riezoù kevalaour o klask arverañ an F.N.L.A. hag an U.N.I.T.A. war-benn diskar an M.P.L.A. a-raok m'en defe hemañ kemeret ar galloud da vat e Luanda. Diaes e oa krediñ e teufe an tri luskad a-benn d'en em glevout war ar c'hudennoù-diazez. Unan eus dezverkoù pennañ kealiadurezh an F.N.L.A. hag an U.N.I.T.A. oa an enep-komunouriezh. An M.P.L.A. oa-eñ « marksour », « adukomunour », « adusoviedel », evel m'en spisae gant aked d'ar mare-se *Ouest-France* bewech ma rae meneg anezhañ, moarvat evit termenañ fraezh an enebour da boblañs Kornog Frañs : da lavarout eo e oa mennet aozadur Agostinho Neto da gengladekaat skourroù pouezusañ armerzh Angola. Emouez e oa an holl ouzh breskted emglevioù Alvor. E-keit-se edo ivez an tu dehou portugalat oc'h iriennañ a-enep gouarnamant Lisboa.

Levrlennadur berr (estregt an oberennoù usveneg) :

- Jean-Pierre COSSE & José SANCHEZ, *Angola : le prix de la liberté*, Syros, Paris, 1976.
- Groupe Afrique centrale du Cedetim, *Angola : la lutte continue*, Maspéro, Paris, 1977.
- ARNO MUNSTER, *Révolution et contre-révolution au Portugal*, Gallée, Paris, 1977.

FILMOU

Marta MÉSZAROS, *Orókbefogadás* 1, Magyarország, 1975.

Ur film gwenn ha du o reiñ ur pouez bras d'ar skeudennoù a zo kaer kenan : an traoù, an dud a zo tapet al linennoù dudiuz anezho. Ur c'horf, un dorn, selloù, ur benveg, ur vicherourez a ro o holl nerzh dre an doare ma'z int skeudennet hepken. Dinodiñ a ra neuze ur sammad a drivliadoù, angerzhiou...

Gronnet a gement a garantez skeudennet ez a an div benndudenn, mut koulz lavarout. Div vaouez eo. Div vaouez en arlez : Anna bet lamet digant he zud da vezañ fiziet en un oaled merc'hed yaouank ha Kata, pergont vloaz, dibried ha divugel. Evit a sell buhez ar galon ez eo reol pep tra : an hini yaouankañ en em geit da welout he mignon er-maez eus an oaled, an hini deuet d'he ment a zarempred e kuzh ur paotr dimezet. Sammet int o-div gant an trepetoù pemdeziek, rediezhoù al labour diouzh ar stlej evit an eil ha rediezhoù ar greizenn verc'hed evit eben.

Un degouezh o lak d'en em gavout an eil gant eben. Ne c'haller ket lavarout e kejont avat. Adal an derou ez eus gant pep hini anezho un amkan a bado daoust d'ar gejadenn. Ar plac'h yaouank a zo keal ganti da zimeziñ, ar vaouez "diazezet" a zo c'hoant dezhi kaout ur bugel. Kalon ha skoazell en em roint an eil d'eben, hep lakaat kudenn war seurt paliou. Ha koulskoude... Ar prantadoù m'emaint a-gevret eo ar re zedennusañ-holl. Ouzhpenn ma hañvalont komz dieub, bezañ spiswel, ez eus ar skeudennoù. Ha daoust d'an diforc'h a zo etre un den yaouank hag unan koshoc'h, div zremm heñvel eo a weler kichen-ha-kichen. Kaer int, ha n'eo ket koant, ken sirius ha ken anat o-div. Engortoz eus un dra bennak emeur neuze...

En-dro d'an daou zen-se, iskis e meur a geñver, ez eus taolennet tud "reizh". Mezeg an embregerezh arrebeuri, rener an oaled, ha dreist-holl Joska, karedig Kata, a zo pimpatromoù tud sirius hag "atebek". N'int na evurusoc'h, na krisoc'h avat, ha n'eo ket "dieupoch" an div vaouez, Razh an dud-se o deus o buhez, o micher, hag ar mennoz resis a zo da gaout war bep tra. Ma ne fell

1 Film bannet e Frañs dindan an titl *Adoption*.

ket da Joska ober d'ar plac'h ar bugel he deus c'hoant kaout, ez eo peogwir e oar petra eo ar vuhez tiegezh. Da reiñ un tañva dezhi en he c'has ur wech d'e di da gejañ gant e bried, mamm ha gwreg anezhi. P'en em gav er gêr e lak ar paotr e gofignonoù en e dreid, servijet e vez dezhañ e vanne te, e-keit ma ra an itron war-dro ar vugale. N'eo ket ne ve-hi ket dedennet gant pezh a c'hoarvez er-maez eus ar mog, met a-unan gant he gwaz e kav dezhi ez eus a-walc'h da ober gant bugale ha trepetoù an ti. N'eus nemetañ a gont a-benn ar fin... E kêr en deus ur serc'h evit e blijadur-eñ, hag un tammig kuñvder, ha setu perak ne asant ket d'ar bugel a vefe evitañ un eil tiegezh ha marv e eurvadig-eñ.

Ma ! Setu div vaouez n'emaint ket tre en o bleud er gevredigezh. Ar saviad o deus pep unan ne zegas netra dezho, ne daol ket a frouezh e nep keñver. Da zienkañ e klaskont pleustrañ an hentoù kinniget gant ar gevredigezh ma vevont enni : advabiñ ur babig emzivat e vo evit an eil, dimeziñ evit eben. Sourfiñ a ra Kata war he oriad a nac'he outi ur babig, trec'hiñ a ra Anna d'he ziegezh a oa a-enep an dimeziñ. Tizhet o amkanioù ganto, ne hañvalont ket en em gavout gwellicoc'h a se avat, pep hini en he c'horn...

Diaezus eo bet ar film. Trivliadoù kreñv skeudennoù filmoù Marta Mészáros, hag aner an oberoù, ar sodelloù, amjestregezh pep saviad e-ser, kement-se a zevoud un digempouez hag un hiraezh diaes da goazhañ.

J.-P. Q.

Jacques TATI, *Mon oncle*, France, 1958.

Eontr ar film zo an Aotrou Hulot, dremmet gant Tati. Ober a ra e annez en ur c'harter kozh eus Paris, warnañ neuz ar broviñs. E c'hoar, dezhi ur bugel, zo dimezet d'ur greantiour a vev er metou arnevesañ, hini an ardivinkoù-kenderc'hañ ha -beveziñ, ar bed greantel. An dudenn-greiz a gantren en daou vetou-se, ken amparfal en eil hag en egile. Plegañ a ra bewech dindan youl diroll an dud. Strivoù e diegezh d'e lakaat da vezañ reizh — gwreg ha gourc'hwel dezhañ —, a vo tost aner avat. Erfin e vo harluet er broviñs gant e vreur-kaer a brofo dezhañ ul labour du-hont, d'en em zizober anezhañ.

Pouezus eo ar sonioù er film. Ar bed arnevez a son trouzioù divuhez. Glan ha yen ez int e ti ar breur-kaer : trouzioù houarnach ar c'hadorioù stlejet war simant al leur, dason spontus mell vezell an niz skoet ouzh ar c'harrelloù e sioulder an ti goulo, bourbouilhoù heugus ar stivell e-kreiz ul liorz hep ar vihanañ bleunienn. Ken lu ha ken displijus eo embregerezh ar breur-kaer, ma rouzmouz an didrouz. En eneb, leuniet eo karter Hulot gant mouezhioù, sonerezh akordeoñs ha trouzioù boas d'ar skouarn-sul en ur gêriadenn. Eno e ren an dispac'h brasañ e-keit ha ma kaver ur genurzh strizh e ti ar c'hoar.

Mut eo Hulot a-hed ar film koulz lavarout. N'emañ na diouzh un tu, na diouzh an tu all. Ne ouzer ket penaos emañ aozet diabarzh e di. Ne eztaol trivliad resis ebet da dudenn all ebet. Ne hañval bezañ nemet un digarez d'un nebeut saviadoù enkus, farsus evit an arvesterion. Ur bec'hiad gourzhtroüs zo gant ur c'hentodadennoù pe zigentodadennoù a-berzh an den. Chom a reont digenvez avat, hep fetisaat, a-boan boulc'het a-wechoù : pa gousk e-lec'h evezhiañ un ijinenn a fard korzennoù-dourañ mezell, da skouer, ha ma teu ar benveg da vezañ dirollet ; pa daol dre brenestr ar c'harr an enaouer-segalennoù goude bezañ tanet e gorn-butun... Gortoz a reer, met ar fentigelloù a chom kuñv, seven. Pa laka daou garr da skeiñ an eil a-benn ouzh egile ez eo dre zegouezh eo, ha ne vez ket petra a c'hoarvez... En eneb, da skouer, e weler Woody Allen e *Bananas* o sturiañ un den a glask tuañ e garr betek ma sko a-benn ouzh ar c'harr a oa a-sav a-dreñv dezhañ.

Hulot zo sioul, hael, hag er-maez eus trubuilhoù ar pemdez, kement ma ne c'haller ket na soñjal en un dec'hadenn. Kilañ a ra rak e atebegzhioù, gant ur mousc'hoarzh e stumm ur pik-goulenn : met petra a lavarit-hu ? Ne gomprenan seurt ebet ! Er c'heñver-se eo heverk e zarempred gant merc'h porzhier e di. Dremmet eo an dudenn gant ur plac'h ugent vloaz bennak. E derou ar film eo gwisket evel ur plac'hig trizek vloaz hag en dibenn, neuz un dimezell zo ganti. Karantez he deus ouzh he amezeg. Eñ, avat, a nac'h kement-se, evel ma nac'h e ve atar plac'hig da blac'h. Ha hep gouzout dezhañ eo ? En em ziwall ouzh luziadur e vuhez ? Pezh a chom er film war-lerc'h an degouezh a zo tenerded an darempred, peadra da dennañ un daeraouenn eus korn ul lagad bennak hepmuiken. En eneb, ar garantez a zo buhez gant un tammig muioc'h a jourdoul e filmoù Chaplin. En emdroadur ar bed m'emañ o vevañ, ez ersav Hulot evel e degouezh ar plac'h. Ne ra met arvestiñ hep emellout, ken na vo diverket an dudenn e dibenn ar film, eleze lakaet e saviad da glotañ gant ar

wirionez : ne oa ket bezant, kaset eo kuit... Met pelec'h edo o vevañ evit gwir ?

Evel ma krogas e kloc an abadenn war ebatoù ar chas o kantren dre straedoù kêr. En ur gambr c'houllo emañ an avel o c'hoari flourik gant gouel ar prenestr. Un dudi d'an daoulagad hag un diduell d'ar spered. Hag ur c'hoari dinoaz eo bet an darempred gant ar film ? Hag en em denn Tati a-dreñv evit hon " c'henteliañ " suroc'h ? Ur c'hevrin a chomo en e filmoù evidon, ken ma'z a kuit va goulennou pep ster diouto... Gwell a se, marteze...

J.-P. Q.

★

Marta MÉSZAROS, *Kilenc honap*¹, Magyarország, 1976.

Kilenc honap... Nav miz, un tamm buhez, ur plac'h a gar ur paotr, ur paotr a gar ur plac'h. Etrezo, hogos netra, evel ur goulo nann leuniet gant an aozerezh. Etrezo, ur c'hoant d'ar garantez — c'hoant da betra ? E dibenn ar film, ur bugel o tont er bed, pa emaint dirannet... Istor ur gejadenn a zo kontet amañ. Un deiz e tegouezh Juli er greanti ma'z eo Janos penn-pare. « Ho kortoz a raen abaoe dek vloaz », emezañ. Un darempred iskis ha tenn a zinod neuze etrezo. Evel ul lod kaer a verc'hed e tec'h Juli da gentañ : « C'hwil zo boas da gousket gant ar re nevez-enfredet emic'hañs ! » Ha kas a ra ur gizennad vlev war-dreñv gant he dorn da ziskouez bezañ youlek ha diliamm. Tamm-ha-tamm avat en em gav dedennet gant ar paotr-se, ken pennek ha ken gouez, ouzh he goulenn dalc'hat da zimeziñ. Un den o c'hortoz eo Janos, o c'hortoz ma ve peursavet e di, o c'hortoz ur stael uheloc'h hag ur wreg da leuniañ ar c'hambrou e-giz ur pezh-arrebeuri ouzhpenn. Da grediñ n'eo nemet pimpatrom ur gwaz aotrouniek pa glask dibaouez lakaat e grabanoù war ar plac'h. Ken skrapidik eo ma c'houlenn outi dilezel ar studioù he doa boulc'het war ar gounezerezh (e sell eus ur vicher blijusoc'h) pe c'hoazh mont diwar he labour hag ober war e dro-eñ. Koulskoude, e lakaat da ludresadenn hep-mui a ve kement ha mont e-biou d'un dra bennak all a verzer a-hed ar film : pouez ar sodell war an dud. Rak bac'het eo Janos er boazioù ha n'eo ket evit mont war-lerc'h e chañs pa zifoup Juli en e vuhez evel un avel-red. « Perak ned it ket da lec'h all ? » a aters-hi. Evit Janos, ne oar ket penaos displegañ.

¹ Bannet e Frañs dindan an titl *Nouf mois*.

E vro zo amañ, er gêriadennig dindan an erc'h a seblant en em zastum en-dro d'ar greanti, en tiez heñvel-holl ha louet, gronnet a venezioù, er c'hafedioù ramzel leun a vicherourion ha pelloc'h, el lenn o flaeriañ ma'z ae gwechall da neuial. Aon en deus avat a guitaat ar bed anavezet ha'n em reiñ d'un darempred nevez ha nac'h a ra tarzhañ kombodig ar pemdez. Alies e van dilavar ha pa gomz, ne ra nemet gourdrouz, tamall pe lavarout e-giz un digarez, « Me ho kar ». Padal, o sellout ouzh e zremm c'hinet, e spurmanter a-wechoù un den all a steuz ken buan all ha war ar skramm ne chom ken nemet Janos o c'headal, klozet warnañ e-unan. Ken diaes eo bevañ. Ur wech hepken en deus hañvalet emdreñ, pa voe kresket gopr Juli. Hag an holl hag ober anezhi ur c'hast brientekaet gant ar rener hag ar penn-pare, ha Janos ha lopañ warno evit he gwareziñ. Diwezhatoc'h e vo graet ur c'hast ganti en-dro, gant tiegezh Janos o tamall dezhi bezañ plac'h-vamm ha klask skrapañ en un taol paotr, ti ha gwenneion. Met an dro-mañ, Janos a gas kuit an dud ha Juli zoken, hag adarre en em gloz a-dreñv stalafioù ha dorioù pell diouzh ar bed. O c'harantez zo padet nav mizvezh ha seblantout a ra c'hwitout. Diwar an derou eo bet ur c'henstourm hag azonus eo o saviad kevredigezhel er c'heñver-se — ur penn-pare, un darbarerez. Evit a sell ouzh Janos, mestroniañ Juli zo un doare da ersaviñ ouzh e diegezh, ar greanti hag ur vuhez voustrus. Ar sodell didec'hus-se dreist-holl a zeuy a-benn da skoilhañ ouzh o darempred.

Penaos kemañ ar vuhez ? Penaos sevel darempredoù gant ar re all ? Setu goulennoù er film, manet direspont. Ne c'hellomp nemet arvestiñ ouzh an div dudenn. Un den eus ar gevredigezh henvoazel eo Janos enta ha Juli a gas ganti ar strafuilh. Hogen piv eo ? Kevrinusoc'h eget ar paotr eo pa ra diouer dimp ar munudoù diwar he fenn. Ur garantez he deus bet gwechall ouzh ur paotr all dimezet hag ur bugel zo ganet a zesav bremañ. Daoust d'o disparti o deus dalc'het da gejañ an eil gant egile. N'eus ket bet displeget dimp perak eo aet digantañ, evel pa na vije ket an tremened-se pouezus ken. Rak an amzer-vremañ eo a vern ha deuet eo o c'harantez da vezañ un dra bennak all, bresk ha kreñv. An dra nevez-se ne anad ket en o c'homzoù hepken, hogen ivez en o jestroù, e luskoù o daouarn, er skeudennoù anezho o-daou. Tenerded ha fiziañs sioul. Pep hini a glask lezel egile en e frankiz, gwellañ ma c'hell. Evel un egin a zarempred dianav er pemdez. Gant Janos ivez he deus strivet da dreuzfurmiñ al liammoù etrezo. Stourmet he deus outañ evit gwareziñ he frankiz-hi ha dizoleiñ donoc'h piv eo. En aner eo bet avat. En diwezh e hañval kemer an tec'h ha mont a ra kuit diouzh

he zu da c'hounit he bara ha da wilioudiñ he-unan-penn. Nac'het he deus bezañ lonket ha kaout evel an holl ur gwaz, un ti, un embregerezh hag all... Un den war glask eus ur vuhez all eo Juli. « Me ho kar », a zigelont bewech evit klozañ o zabutoù, met ne spir ket da zisplegañ perak e chomont da vevañ a-gevret, ken digembezus eo o selloù ouzh ar bed. Ar verb-se etrezo, kleuz ha kollet e ster dioutañ, n'eo mui nemet ur falsalc'houez. « Karantez », petra a dalvez hervez an div dudenn ? Hag an hevelep tra eo ganto o-daou ? Juli a gar ar paotr all ivez ha hennezh a gar e wreg. Evel pa vijent rediet da dremen gant ar ger kozh-se e diouer unan all. En o daoulagad atersus e sav ur goulenñ dirak un dra dreistlavar ha chom a reont tav. Penaos reiñ ur ster nevez d'ar garantez ? Lusket o deus ur c'hantren na vo morse echu. Penaos gouzout ha ne zeuy ket ar paotr en-dro davet ar plac'h, pe ar c'hontrol ?

Kilenc honap zo savet evel ur goulenñ na c'haller respont dezhañ nemet dre c'houlenn a-nevez, ha ken kevrinus hag un tamm buhez eo. N'eus ket a gentel, na diskoulm, na c'hwitadenn. Emañ Janos ha Juli o vevañ dirazomp hep desteriañ, na displegañ, na kanteizhañ, ha diwarno e loc'h ar c'hudennoù stignet er film. Koulskoude, n'eo morse ar film un adsked eus ar werc'helezh, hag eñ tost a-wechoù d'un testeni war ar c'hemm o c'hoarvezout e stuzegezh Hungaria — ar bed henvoazel o frailhañ a bep tu. E gwirionez, diforc'h-mat eo diouzh ar filmoù-beveziñ all e kement ma tifloup dioutañ ur fetister par da hini ar vuhez. Evel pa he dije Marta Mészáros ranket ijinañ un doare all da filmañ. Pe anez, penaos dont a-benn da derriñ war an dozell, davit furmoù all a garantez ? Dirazomp e vev dremmourion filmet gant un den all nepell, ha damvezant eo an aozerez. Daeroù Juli en dibenn a zo muioc'h eget ar gwentloù hag he foan o vont digant Janos. Poan Juli oc'h armodiñ he buhez int ha hini Marta Mészáros o c'henel he film. Daeroù dirak ar goulo. Un tenerder kreñv-tre a ziskouez M. Mészáros ouzh an dud o c'hoari dirazi. Parañ a ra he daoulagad warno evit furchal don enno, dindan o dremmoù hag o c'horfoù, o neuzioù hag o jestroù, ken na hañval bezañ feuls a-wechoù. Emañ o sellout pizh outo a-ziadrefiv ur meni gwerenn-greskiñ, seul vui ma'z eo an istor kreizet war an div dudenn, hag ar bed tro-dro a zizoolomp a-ser ganto. Da heul o deus un doare hoqos kigek da gomz, touch ha sellout, tevel pell a-wechoù hag a-daol-trumm distagañ kompez o c'homzoù. Hag atersus int e-giz an dud a gejomp outo bemdez.

Chantal an NOALLEG.

LIZHEROU

Digant Yann-Baol an Noalleg da Guy Étienne.

Setu, a-benn ar fin, adstagañ a ran gant va lizher goude bezañ eñ dilezet abaoe div sizhun, ken skuizh on gant seurt dour-gwellen. E gwir, leun-barr eo ar muzul gant seurt glabousezh a-c'houde pemont vloaz : Roparz Hemon en deus komzet fraezh a-walc'h war an divoud — ar « yezh » an hini eo c'hoazh ! —, ha n'omp ket atebek war stad an traoù er c'heñver-se. A bep seurt a vez klevet ha lennet ! Anez un eskemm lizheroù a'm eus bet tro da lenn war *Ouest-France* etre F. Morvannou ha J.-M. Domenach o tennañ da « gudenn » ar yezh — ar brezhoneg, evel just —, dilezet 'm dije pep tra, ken aner e hañval din bezañ tabutal a-heligentañ war ur c'hraf a zo splann ha fraezh. E berr gomzoù, eus petra ez eus anv en daou lizher-se ? Karezñ a ra Morvannou broadelouriezh ha chaovinegezh c'hall Domenach, o tamall dezhañ gouruhelaat ar sevenadur gall ha diverzout kultur e bobl-efñ. Ha da zegas da arguzennoù an enebadur etre ur c'hultur koueriadel (breizhat) hag ur c'hultur bourc'hizel (gall). Setu an arroud : « *Qu'est-ce que l'on nous a proposé à sa place ? La langue française, soit. Sa possession n'est pas un bagage négligeable. Mais à quel prix ? Au prix de rejeter sa langue maternelle, la culture paysanne où elle s'enracinait, et pour accéder à quoi ? A la culture universelle ? Non, à la culture bourgeoise, pleine de mépris pour les langues et les cultures "d'en bas", populaires.* » Adkavout a reer c'hoazh un nebeut dodennoù a zo bet dezrannet e-barzh *La langue bretonne et la révolution*, Rennes, 1972, ha n'eo ket va amboaz distreiñ warno. Lavaromp buan-hag-aes ez eo distremenet a-grenn hiziv an deiz kudenn ar « vammyezh » ha hini ar sañset « kultur koueriadel ». Diwerchek penna-da-benn eo enta arguzennoù eus ar seurt. A-du-rall ez adkemer e genskriver bommoù eus al levr usveneged : « *Je n'aime pas le chauvinisme. Je n'aime pas non plus le masochisme. Ni certaine façon, très à la mode, de refaire l'histoire en gommant tout ce qui gêne. Il n'est pas vrai que le déclin des langues "régionales" soit dû seulement à une politique brutale d'assimilation, dirigée de l'extérieur ; cette politique n'aurait pas donné beaucoup de résultats si les gens du pays n'avaient pas, eux-mêmes pour de mauvaises et de bonnes raisons, souhaité parler français et oublier leur langue.* » Setu a zo splann. Ac'hanta ! Perak kenderc'hel da bleustriñ war ur yezh a zo bet dilezet gant an dud he c'homze ? Hag a-benn ar fin, ha n'eo ket luziañ ar gudenn mui-oc'h-mui, beuziñ ar pesk, degas atav « kudenn ar yezh » e kont ? Breizhiz o deus dilezet o zeodyezhoù evit ar galleg ha kement-se o deus kaset da benn en ur par berr a-walc'h. Abegoù mat o doa, memes tra, ha lavarout ez int bet rediet zo lakaat anezho da sotoc'h eget ma'z int ! E gwir, kreñv meurbet eo kemplezh an tru gant Breizhiz 'zo... Un araez eo bet ar galleg da dizhout ar bed arnevez, se zo sklaer, evel ma'z eo bremañ pouezus-bras gouzout yezhoù all evel ar saozneg da skouer, e tachennoù 'zo. N'eus kudenn ebet enta e sell ar « yezh » pa'z eus tu evit n'eus forzh piv da zeskñ yezhoù all. Hag an neb en deus beajet un tammig — sañset ez eus ur bern foeterien-hent du-mañ —, en goar ervat. Hag, forzh penaos, ha kudennoù yezhel zo e Breizh ? Ha n'eo ket gouest

an dud d'en em gompren kenetrezo ? Pe e galleg e ve, pe e brezhoneg, pe en ur yezh all ? Pelec'h emañ an dalc'h enta ? Lavarout emañ e par ar « yezh » zo lakaat kudenn war ar furm, an diavaez, ar gorre. Difenn ar « yezh » enta a zo difenn ur furm diavaez, difenn ur golo, goullou meur a wech. Ha padal, da'm meno, emañ an dalc'h en danvez, en eztaol, el lavar. Me oar mat ez eo un tammig eeunik kemer an divrannadur skolastek furm/danvez, met ur bazenn gentañ eo er preder. Anat n'eus ket danvez hep furm, n'eus ket a lavar hep yezh, ha n'eus ket furm hep danvez... Hon labour hag al lavar nevez o nodiñ ennañ (drezañ) zo liammet strizh an eil ouzh egile. Nag an eil nag egile, avat, n'en deus al lec'h kentañ. Ur wech lakaet war wei deberzhegezh ar furm e chom memes tra da ziskouez ez eus ganti un nebeut ampegadoù rekis ; pe e gerioù all, pa gomzan eus ar brezhoneg, ez eus da ziskouez ne c'haller ket ober forzh petra anez foeltrañ pep gousker d'al lavar nevez oc'h eskoriñ nomañ ha lomañ. Ni eo a zo e kont ha den ebet ne ray hon labour en hon lec'h.

Da gentañ, enta, e fell din tabutal, me ivez, a-zivout ar « furm », pa na ve nemet evit divoustrañ un tammig. Marteze e vin garv ha flemmus un disterañ, met kement-se a ziskouez e vin bet paket gant ar c'hoari ! Klask a rin neoazh bezañ trec'h da'm youloù, pegen diaes bennak e ve, goût a ouzon ervat... E gwir, un afer luziet kenan e hañval bezañ d'ar c'hentañ sell. Soñjit 'ta : nouspet doareoù-skrivañ, -distagañ, o tiwanañ bemdez-doue e korn ar brezhoneg razh ar c'hazetennoù — pa nad eo ket un doare-skrivañ personel-rik evit oristaled war glask eus un diforc'helezh bennak — ; pe c'hoazh ar sañset brezhoneg « purju » a ve boas kouerion Breizh-Izel d'ober gentañ, enebet ouzh ar brezhoneg « chimik » : eleze diouzh un tu ar « sistr bouchet mod kozh » ha diouzh an tu all an hini « a zo asid e-barzh », pe « eske me ouia-mein » evel a lavarer e'm « c'horn-bro » ! War a'm eus klevet e vo digoret ur skol-vamm e Naoned ? Met kudennoù loskus a zo, a-hervez : petore teodyezhañ arverañ da gelenn ar vugaligoù ? Dirouestlet int bet a drugarez Doue ! Graet e vo gant trefodach ur barreizig vihan a greiz Breizh, peogwir eo ur « yezh etre », war a'm eus klevet. Etre petra ha petra, avat ? Evel pa vije ar pal meur adsevel an teodyezhoù evel ma oant en 19t kantved. Pa ouzer pezh zo c'hoarvezet a-c'houde ez eus peadra da gaout aon evit ar paour-kaezh bugale o devo talvezet da voc'h-indez evit sorc'hennoù di-ster. Farsus e vije, ma ne vije ket ken truezus : diouzh un tu parlantoù trefodachet o vervel plarik, goustadik — gant o marv naturel evit ur wech ! —, divarrek da eztaolñ un dekvedenn eus kealioù ar vuhez a vremañ ha dilezet en abeg da se evit un darn vat, ha diouzh an tu all tud o klask « gwrizeniañ », intentit drevezañ restachoù brein, nemet e *kresk mat* an traoù e-barzh an teñ, c'hwil oar ! O vont diouzh seurt savboent e ve gwel ober gant « mobilet », « faoteilh », « inspirasion », « uzin », « mikro », « ekouteur », h.a., e-lec'h « c'hwil-tan », « kador-vrec'h », « awen », « greanti », « klevell », « komzell ». Hag a-benn ar fin, gant piv emañ ar gudenn ? Gant ar re a oar an daou ? N'eus kudenn ebet, war a ouzon, gant an dud a ra gant pezh a chom eus an teodyezhoù brezhonek evit en em gompren. « Ni 'n em zimerda », emezo e'm « c'horn-bro » — ya ur c'horn-bro er brezhonegva a'm eus-me ! N'eus preder purjelour ebet gant an dud ha ne vern dezho ober gant « breton mod kozh », pe « breton ha galleg kej-mej », pe... gant « galleg podoù », goût a ouzon ervat n'eus a-fet yezh a sevenadur evito, -ent saviadel-, met ar galleg. Ha c'hoant ebet n'o deus da zistreiñ d'an natur ouez evit ober plijadur da « baotred ar yezh » (hag ar merc'hed 'ta ?). Ar re-se a damall dimp distrujañ o zeodyezhoù mounoun.

Diogelñ a ran n'omp ket kiriek mard eont da get dre un distruj naturel. An natur burju eus ar burjuañ eo, na petra 'ta ! Daou zistruj enebet-krenn zo : ar breinañ hag ar c'hrouñ. Dav en em glevout diouzhtu da vat : emañ an holl deodyezhoù e par ar marv, e meur a lec'h, ha ne reont nemet kenderc'hel gant ar giladenn bet boulec'het a-bell'zo. E'm « c'horn-bro », da skouer, ez a war zistresañ afo, ken e par an ereadurezh ken e par ar c'heriadurezh. Tiegezhel-rik eo ouzhpenn se, tiegezhoù kozh a fell din lavarout, ha kilañ a ra eno zoken. Mechal hag e talvez ar boan difenn ur seurt plegenn. Me oar e vo lavaret din n'eo ket heñvel ar gont e pep lec'h, me oar ez eus tud oc'h ijinañ ur vuhez kevredigezhel gwirion tu bennak war ar maez e Breizh-Izel... Tud o hunvreal int a-benn ar fin ha reuzeudik, peogwir e ouzont ervat n'eo ket gwir tamm ebet. Lavaret ez eus bet alies ne fell ket dezho gwelout an traoù evel m'emaint. Ha farsus kenan e vije c'hoazh, ma ne vije ket ken tristidik : dalc'hidi ar yezh purju a oar-int al liesañ ar yezh arnevez ha ne oufent ket skrivañ ul linenn da ziskleriañ o c'harantez d'ar yezh-pobl a empentont hep ober gant un pe daou dermen nevez. Petra ra dezho lavarout « died-hud » pe « evaj majik » pa ouzont an daou ? Menegomp ivez e kavont da deskiñ kembraeg war ar marc'had, pezh a ziskouez ne gredont ket kalz er pezh a ziogelont a-hend-all. Evit piv e komzont neuze ? Pe, karout a rafent mirout un tachad gouez e Breizh-Izel, emañ un nebeut tud o kenderc'hel gant trefodachoù o'n em c'hallekaat mui-oc'h-mui ? Anat eo n'eus ket ezhomm prederiañ hir amzer evit gwelout ez eo disol ha lu penn-da-benn arguzennoù an dud kar-o-yezh-pobl. Ur c'henel a roe din an deiz all ur skouer fentus : n'ouzon ket mui petore kelaouenn vreizhek divyezhek oc'h embann barzhonegoù e galleg gant an droidigezh e brezhoneg — pe ar c'ontrol e ve ? —, nemet o doa kavet gwell ober gant termennoù nevez, hag int tost d'ar yezh-pobl ivez, e-lec'h ober *double emploi* ha bezañ lu penn-da-benn.

War betra eo soliet kealiadurezh ar burjuelourion ? Ha n'int ket stag c'hoazh e doare pe zoare ouzh restachoù kevredigezh an 19th kantved, bed ar parrezioù, ar c'hornioù-bro hag o farlantoù diniver ? Tud o vevañ e kêr ar peurliesañ, en arlez, o hiraezhiñ d'ar vuhez wechall pe ouzh he ijinañ kentoc'h. Anat eo o spered kloc'hdi pa c'houlennont da gentañ evit toullañ kaoz « eus pelec'h emaoch ». Hag evel ma lavar din Chantal : « Ha me neuze, ne'm eus korn-bro ebet ! Petra respont ? Ha ne c'hallan ket lavarout dezho penaos e vez distaget ar ger-mañ-ger-du-mañ. N'eus met brezhoneg berr-ha-berr evidon ! N'eus adanv ebet. » A-benn ar fin, mechal perak ned eont ket da vevañ razh war ar maez, pa blij dezho kement war a hañval. Kempeell e vije da nebeutañ. Hag evit gwir, ken euver eo an tabut-se, ma klevan ennon an heug o tont. Ya, erfin, ha n'eus met el ledenez-mañ e ve didalvoud an deskadurezh, ar stummadur ? Ha n'eus met er penn-mañ eus ar bed e ve priziet an digelenn, an dic'houzoud hag an diouiziegezh, war zigarez ez eo poblek, purju, ha me oar-me ! ? ! Ar pezh zo kassus eo e pad seurt glabouerezh abaoe un hanter gantved da nebeutañ ha dezrannet eo bet endeo meur a wech gant meur a zen. Kalz ne vern, bez' ez eus atav tud oc'h adchaokat an hevelep rimadelloù betek ar mare ma vo aet ar sigur da get penn-da-benn. Ha n'eus ket ezhomm da vezañ ur savant bras evit stadañ n'o deus ar yezhpoblkourion degaset netra, pe ken nebeut, abaoe an amzer m'emaint o ragachat. Mar en deus ar brezhoneg graet arakadennnoù ez eo bennozh da strivoù diastal un nebeut « kimourion » eo ha n'eo ket sur a-walc'h o lefvañ ha klemmichal, e-giz un toullad tud a ra mat-tre heptañ an tri c'hord eus an amzer. Stroñset an emframmoù

kozh e Breizh, tud a zo en em gavet divarc'het hag en arlez, ha dreist-holl ar re o doa kuitaet ar maezioù hep bezañ ebarzhet penn-da-benn c'hoazh e buhez ar c'héroù. Seul gent a se pa o deus tro da stadañ bemdez emañ ar galleg o c'hounit tachenn diwar-goust an trefodachoù o vordilhañ. Tu ebet da zistreiñ war-gil. Ha kaer o deus re ar purjuog klemm, tra ne ra, ken m'en em gavont en arlez mui-oc'h-mui gant ur gealladurezh a zo heklek un nebeut lec'hiennoù boutin o treuzpadout, hep ar sol kevredadel avat. (Sellit ar bommoù gallek kentañ e derou al lizher.) E lec'h o broudañ da brederiañ, kement-se o lak da vezañ taer pe diwasket. Hag int da ijinañ un doare-skrivañ nevez, skiantel ar wech-mañ, a ziskoulmo ar c'hudennoù ! An dud diwar ar maez a anavezo o yezh-int, peogwir e vo skrivet evel ma vez distaget ! Hag ar rac'hoan o vont en-dro c'hoazh... Ha war zigarez difenn ar yezh-pobl e tegasont ur meskaj spontus o lakaat en arvar ar yezh unvan ha solut, pa emañ o trec'hiñ ent saviadel. Ur gaou grevus a reont d'ar brezhoneg a-benn ar fin, hep degas tra ebet a nevez, nemet un dizurzh vrasoc'h. Hag an dorzh a c'hellomp kas en-dro d'ar gêr o tamall dezho foeltrañ ur yezh he deus dikouezet bezañ ur benveg mat a-walc'h betek-henn, pa lakaer e kont an holl labour a zo bet kaset da benn. Ha da c'hervel ar « c'hultur koueriadel » da zifenn o labour-tarvañ... Petra eo se ar « bobl » evito a-benn ar fin ? Ur c'heal gwall zispis, mat da lavarout forzh petra, pa ouzer ervat ne zeuy morse ar sañset « pobl » da sevel klemm ha ledan eo he c'hein. Ya, erfin, dav eo bezañ dall evit gwelout yec'hed ha glanded er vreinadurezh. Un anadenn vredkevredadel zo aze, hep mar, ha talvezout a rafe ar boan he studiañ. Ur meni spont, un emdec'h diouzh ar werc'helezh, un ezkounadur, un diverkadur evit a sell an traoù a c'hell bezañ diazeus, evel da heul ur gwallzarvoud pe ur stroñs bennak, klask ur repu er faltazi gleñvedel, en un tremened ijinet, en ur werc'helezh empentet, ur seurt skizofreniezh a ve deurus studiañ. Aon o deus rak ar pezh a zo dianav, divoutin, divoas. En em blijout a reont er sodell, en dozell, pa n'eus darvoud ebet o lakaat digempouez ha digompez o bed-int. Gwell ganto ur brezhoneg boutin, boas, sioulaus, trefoet, brein, gallekaet, pe gwell galleg zoken, eget un dra bennak diazeus o trefuiñ gorre lor o femdez, o lakaat brall enno, ouzh o lakaat e kont, o tioueliañ ar werc'helezh a fell dezho kuzhat, o tiskouez splann an distervez m'emaint ha reuzeudigezh o brizh-hunvreoù.

Evit klozañ e fell din burutellat un tammig un pe ziv ziogeladenn a-berzh Domenach, tennet eus an hevelep lizher : « *Il n'est pas nécessaire pour autant de rabaisser la culture française, la seule à travers laquelle, aujourd'hui, les français peuvent accéder à l'universel, et d'innombrables étrangers. () Le français est le véhicule d'une pensée critique et libératrice. Le breton ne pourrait pas jouer ce rôle.* » Anat ne c'hell « talvezout » ar brezhoneg nemet e kement ma teu da vezañ ul lec'h m'en em werc'hela ul lavar nevez. N'eo ket hepken e ve anezhañ dor al lavar planedennel a zo, eleze ar bed arnevez, bed an 20th kantved, bed ar gevredigezh c'hreantel a rizh kozh — a-walc'h eo ar galleg er feur-se, daoust ma'z eus ezhomm mui-oc'h-mui, hiziv an deiz, eus ar saozneg war dachennoù evel ar gimiezh, an elektronik, ar stlennoniezh, e berr diskiblezhioù kalvezel —, met kentoc'h e tigorfe dorioù nevez war dachennoù nevez, e ve ur benveg azas da « arnodif ar goull ». Setu penaos e komprenan an holl labourioù hon eus war ar stern. Seurt labourioù a zo da gas da benn e darempred gant ar bed-holl, rak un tamm e pep lec'h ez eus tud gant an hevelep gred. N'hon eus ket da vont da heul ar c'hreizennoù diavaez-se, met dav eo dimp pleustriñ amañ ha

bremañ war hon bed-ni. Ned eo ket an hollveziadelezh un dra bennak a dizher, eleze un dra bennak diavaez a ranker strivañ da ziraes, ur meni boudelezh sonnaet, ur pimpatrom da zrevezañ, met er c'hontrol, eskorin a ra en hon labour-ni, ha n'omp ket mistri warni, eskorin a ra pe get, dre hon dafar deberzhiek, evel n'eus forzh pe zafar, dindan ur golo ken deberzhiek all. Amplegadoù a zo evit a sell ar yezh evel ma'z eus gant n'eus forzh petore kenderc'hañ, avat. An diaz kevredadel a fell din menegiñ. Ned eo ket evel just keal an « diaz poblañsel » meizet gant un amboaz politikel. Dav kaout un niver a yezherion bras a-walc'h evit amparañ ar metou a bourchaso magadurezh danvezel ha kefredel, eleze e vo bras ar skoilhoù hep un diaz armerzhel ha kefredel doues a-walc'h. Ha se eo a'm lak da dabutal ha da garezin an naturelourion-goubarzhelourion o kaeañ ouzhimp. Estreget ar sell diazremm-se ez eus avat : dav kaout un donder amzer enlouch'et en dafar — un teñzor a lavarer en degouezh —, na c'hell talvezout nemet e kement ma'z eo adkemeret en ur c'hrouiñ, eilsavelet ha treuzfurmet. Ar metou diazremm ha diazerc'h eo a ra eus ur yezh dafar ul lavar, e gerioù all amveziad bonvezus. Anat n'eus kudenn yezhel ebet e Breizh. Tud dezho an hevelep yezh o deus alies mil boan d'en em gompren : n'eus met kemer e kont ar foz a zo etre tud o hiraezhiñ d'ar vuhez wechall hag ar re mennet da sevel ur sevenadur nevez. Diouzh un tu all, an hevelep lavar a c'hell en em gavout dindan furmoù disheñvel, ar furmoù-se o tont diwar un dafar a zo disheñvel en derou. Gwir eo ne c'haller ket « dibab » al lec'h ma teu ar bed dimp. Amañ e fell din menegiñ ur rebechig a vez graet dimp alies : treuzplaket e ve hon yezh diwar ar galleg ? Kavout a reer an tamall-se gant daou rumm tud da nebeutañ : ar re na ouzont nemet galleg ervat hag a glev ar c'hwezh anezhañ e pep lec'h, evel just, hag o vezañ ma'z int ivez purjuelourion c'hredus e lopont warnomp en anv ar purju (sellit ar pismigadurioù disol graet ouzh troiennoù poblek eus ar poblekañ evel *Ez an, Setu me, Digares me*, h.a.) ; hag ar re all a gav dezho ez eo gall nep preder oc'h ober dave d'ar bed kempred. Anat eo bet levezonet abaoe pell hon yezh gant ar galleg ha levezonet eo c'hoazh. Nemet e ve traoù gwechall gwelloc'h eget traoù bremañ, pechañs ? Ac'hanta, ar C'hallaoued o deus degaset traoù a bouez ha laouen eo bet Breizhiz d'o c'havout pa n'o doa netra a-hend-all. Ra vint trugarekaet amañ ! Petra a fell deoc'h : emañ ar sevenadur gall e-barzh hon dafar, plijet pe get ! Ha tu ebet da ziverkañ an dra-se. Ha perak e ve fall, forzh penaos ? Ar gudenn a zo bremañ n'eo ket klask diverkañ gant un taol gom dek kantved, met ensammañ an dra-se ha krouiñ. Ha disoc'h ar c'hrouiñ-se a vo brezhon kement ha ma fell dimp. A-du-hall e ve ret menegiñ levezonoù all — pep tra a zo mat da zafar —, ar saozneg, an amerikaneg, an alamaneg, hag all, hag all, ar vout ront en he fezh a-benn ar fin ! Labour a vo evit skolveureion an dazont !

Poent eo pellaat diouzh ar broviñsegezh, ha poent bras zoken. Pep tra a zo frouezh ar c'hrouiñ ha n'eus yezh naturel ebet nemet oc'hal evel ar moc'h. N'eus anv ebet a zifenn — pa na ve en em zifenn ouzh ar sañset difennourion —, n'en deus ar c'hrouiñ netra da zifenn. Hon benveg yezhel a zo ennañ ar mentoù diazerc'h ha diazremm eus an dafar en ampar, dav dezhi enta !

Digant Roger Le Nestour da Guy Stienne.

E'z lizher da Padrig an Habask (*Emsav*, 122/61-62, 1977) e tiogelez emañ da obererezh a vremañ e-maez amgant ar politikerezh. C'hwitadenn obererezh politikel E.S.B. zo bet stadet ivez gant Gwenael Maze da-geñver DOP-ROB 1976 (Sl. An arbennikadur emsavel ha leviadurezh E.S.B., *Emsav*, 112/121-127, 1977) hag e pennadoù all skrivet gantañ da c'houde. Bremañ emsomp muioc'h e-tailh da c'houzout perak hon eus graet tro-wenn. E gwirionez n'eus plas ebet evidomp war al leurenn bolitikel gall (a zo an hini vreizhat un arvez rannvroel anezhi hepken). Eus petra ez eus kont e Frañs bremañ ? Eus difenn emsav an 18t kantved ouzh e eneberion : e eneberion voniek eus an tu dehou pellañ evel just, hag ivez ar re all, kalz niverusoc'h, na zistaolont ket an emsav-se, met a fell dezho e ziren d'ar politikerezh dre ma kavont bastus an treuzfurmadurioù en deus degaset er bed. Hag emañ an tu kleiz hag an tu dehou oc'h en em gannañ war gudennoù a zo e gwirionez kudennoù eus an 19t kantved.

E pevarenn diwezhañ an 20t kantved n'eo ket bet kaset da benn c'hoazh ar greanteladur el lodenn vrasañ eus Frañs, ma chom bresk an ijinerezhioù a-dal d'an enkadenn a vremañ. Kement-se a zevoud e pep keñver ur isdioreadur a zo e disklot krenn gant hon amzer. E kalz kêrioù proviñsel bihan e vez sellet evel reizh e vefe truezek ar c'hlañvdiou hag a live izel ar skolioù. (Menegiñ a rafan a-walc'h degouezh Pondi, nemet e'm eus klevet lavarout ez eus bet arakadennoù bras ; un amzer zo bet avat ma kaven souezh four-mervel klañvdi Pondi). A-fet aveadurioù kevredin ez eus traoù na zlefant ket ober kudenn ken, evel an diouer a vagourioù evit bugale ar merc'hed o labourat. Kestall a reer evit an dalled, ar seizidi, evit an imbourc'h war ar c'hign-bev, h.a. : n'eus ket bet kavet c'hoazh ur c'helliderez foran o vostañ d'an ezhommoù-se. Da betra e tenn holl adreizhadurioù lerc'h-ouzh-lerc'h an deskadurezh, ma n'eo ket evit azdedaoliñ ur gevredigezh dezhi ul lumiadur naontekvidik ?

Troomp war-du kudennoù dibarekoc'h da Vreizh (n'eo ket da Vreizh hepken avat). Da zifenn emañ c'hoazh al likelezh ouzh ar gloerourion. Daoust d'ar strivoù o deus graet da arnevesaat, n'eo ket deuet c'hoazh ar pep muiañ eus ar gouerion a-benn d'en em zijabliñ penn-da-benn diouzh an emframmoù henvoazel. Hir-tre e vez atav o devezhoù labour ha ponner e van pouez an digenvezed war o doareoù-bevañ. Padal, skouer ar c'hibboudzim a ziskouez e c'hallfe ivez labourerion ar gounezerezh anavezout ur vuhez kevredigezhel kalz reizhoc'h. Arabat lavarout e c'hoarvez kement-se en ur vro bell : un soz nevez eus ar glad a c'hell sellout ivez ouzh Breizhiz. Met an aozadurioù kouer arakadefañ zoken, evel ar " Paysans Travailleurs " pe ar M.O.D.E.F., ne lakaont ket en arvar a-benn ar fin ar mod-kenderc'hañ a vremañ diazezet war ar staloù hiniennel, a ro an tu marteze d'an dielon da vezañ dizalc'h (ha c'hoazh, nebeut-ouzh-nebeut), met o lak da baeañ ker kenan o dizalc'hiezh.

Azonus eo kudenn ar Gopr izek. Anat eo ez eo divastus evel m'emañ. Sevel anezhañ da 2 400 lur a rofe d'an holl an tu da bremañ digudenn ar pep reañ, hep rankout krennañ war ar boued ha traoù-diazeñ all. Evel just e tegasfe ivez seurt kresk trumm eus ar Gopr izek diaesterioù ouzhpenn da reoñ ar monc'hwezh hag arvaroù evit dazont embregerezhioù 'zo e-touez ar re vihan hag etre. Arabat klask diwelout ar c'hudennoù-se a zo gwir, nemet ez eo dav lavarout e talvezont da guzhat traoù all dianzavadusoc'h. An devoud end-eeun e vez sellet evel digembzus ur Gopr izek dereat hag un armerzh yac'h, daoust m'emaomp en unan eus broioù pinvidikañ ar bed,

steuziadur an emskiant vroadel o c'hoarvezout bremañ e Frañs evel en holl vroioù kevalour. Padal eo poent bras skarat da vat ar c'hudennoù naontekvidik. Emañ an diaz stummadel-poblañsel o kemmañ afo. N'eo ket mui Frañs ar vro bloueziat evit an div drederenn ha greantel evit an drederenn diwezhañ ez eo bet keid-all. Mui-ouzh-mui en em gav ar C'hallaoued tolpet er bannlevioù nevez, er c'harterioù trobarzhiek, er Z.U.P.-où. Hag ar hoblañs nevez-se ne c'houzañvo ket dizivezh e vefe tremenet e-biou d'he c'hudennoù, pe e vefe arveret ar re-mañ evit an dilennadegoù hepken. Forzh pe hent a vo kemeret enta, en em gavo ar vloc'henn c'hall dirak dislavarou don na weler ket penaos e c'hallo trec'hifi dezho.

Mar bez ezhomm distrujañ ar Stad c'hall, ne vo ket evit "dieubiñ" Breizh, Okitania, h.a., met evit gallout dont er-maez eus ar c'hudennoù dispredet ma patouilhomp. Ne vo nemet ur wech diantket diouzh an isdioreadur e c'hallimp stigmañ en un doare reizh kudenn an darempredoù etre Bro-C'hall istorek hag ar rannvroioù trobarzh. Neuze e c'hallo obererezh U.D.B. hag ar strolladoù rannvroel all kemer e ster gwirion. Rak evit an ampoent n'int nemet pempet rod ar c'harr. Diskuliañ a reont isdioreadur ar rannvroioù trobarzh, nemet ez eo kalz barrekoc'h ar c'hleiz gall egeto d'e ziverkañ.

Anzav a ran ez on bet un tammig re vrastresek. Lakaet e'm eus kevatal tu dehou hag eneberion emsav an 18th kantved diouzh un tu, tu kleiz ha dalc'hidi an hevelep emsav diouzh an tu all. N'eo ket ken eeun an traoù : diaes e ve lavarout emañ an tu dehou a-vloc'h a-enep emsav an 18th kantved. Bez' ez eus un tu dehou republikan a zo e hil Dispac'h 1789. Nemet ez eus gant an dehouidi an doug da lemel pep nidiadegzh digant an emsav-se, da ziren hemañ d'ar politikerezh pur dre ma spir dezho an treuzfurmadurioù en deus degaset.

05 03 78.

*

Digant Chantal an Noalleg.

Lapous-den Penn ar Bed... Setu ! An dro gentañ eo bet din arvestiñ ouzh ur pezh-c'hoari brezhonek ! E Ti ar C'hultur Roazhon eo bet c'hoariet da-geñver "Kejadennoù ar c'hoariva amatour breizhek" a zo padet a-hed miz c'hwevrer. Diwar *The playboy of the western world*, oberenn ar skrivagner iwerzhonat, John Millington Synge, eo bet ar pezh-c'hoari-se addispleget gant C'hoariva Brezhonek Penn-ar-Bed (C.D.U.B.)¹ ha leurennet eo bet gant harp Guillaume Kergoulay² eus *Le Théâtre du Bout du Monde*. Tud ar C.D.U.B. o deus dibabet ar pezh-se e sell da reiñ buhez en-dro d'ar c'hoariva brezhonek, dre bellaat diouzh ar farsoù ha sketchoù patronaj boas, ha se daoust d'ar c'hudennoù a rankont talañ outo adal ma reont gant ar brezhoneg.

¹ Centre Dramatique Universitaire Brestois.

² Skrivet en deus ar pezh-c'hoari, *Tard dans la nuit*.

Petra eo an istor ?... Un davarn louet, ur gwele louet e foñs ar pezh, ur siminal en ur c'horn ha berrloeroù o sec'hifi e-kichen, a-us d'ar siminal un daolenn eus ar C'hist, taolioù ha skifivier. Tud ar c'hoari, mezvieron, merc'hed o'n em gannañ, o huerniñ, un tad-kozh araous... N'e'm eus dalc'het koun nemet eus furlukined... Pegeen Mike, merc'h perc'henn an davarn, zo bet goulnnet da bried gant ur c'henderv dezhi, paotr nay hag aonik. Setu ma tegouezh Christy, ur paotr yaouank, o tec'hout den ne oar rak petra. « Lazhet 'm eus va faour-kaezh tad », emezañ, ha bod a c'houlenn. Er gériadenn e klask an holl mont da welout al « lazher e dad » hag ar merc'hed pergen a zered da rodal en-dro dezhañ, Pegeen en o zouez. Neuze e teu tre Mahon kozh, tad Christy, c'hoant ennañ da dalvezout d'e vab e daol pal. Evit gwir, n'eo ket marvet ha Pegeen a gompren ez eus bet livet gevier dezhi... An tad hag e vab a gas kuit. War al leurenn ne chom ken nemet he zad, daou vezvier ha hi. Evel en derou e tiskenn dezho pep a werennad vier, evel pa na vije bet morse eus Christy, ha gant ur vouezh hiraezhus e stag da ganañ : « Kollet e'm eus ar brasañ lapous-den a oa e Penn ar Bed ». N'eus bet netra kemmet, pe ken nebeut, hag an amzer a ya e-biou...

Souezhet on bet gant ar c'homzoù kentañ, evel pa o dije distaget ur yezh estren. A-nebeudoù avat, e'm eus en em voazet diouzh o gerioù hag o fouez-mouezh. Hogen n'on ket bet, siwazh, evit kaout deus ouzh dibun an istor. Dic'hoarzh, digas on manet hag aet on skuizh zoken. Evelato ne oant ket dremmourion gwashoc'h eget reoù all. En diwezhañ e'm eus stiaket va daouarn, didrouz, evel dre druze, peogwir e oa ar c'hentañ pezh-c'hoari brezhonek a selaouen outañ ; evit unan gallek, n'e'm bije ket graet. Dipitet on bet enta ha n'eo ket war zigarez edo c'hoariet e brezhoneg e ve ret e veuliñ. Ar c'hevredig ivez ne hañvale ket bezañ gwall entanet. Ur pemont den bennak a oa deuet. Diouer a stlenn ? Ne gav ket din, pa'z eus tu da ne vren piv da gavout ar stlenn en deus ezhomm. E-touez arvesterion an noz-se e oa moarvat tud all evelomp, war glask eus « traoù all ».

Da c'houde on chomet da selaou ouzh ar breud ha dre ma n'e'm eus ket tizhet neuze displegañ fraezh va mennozioù, e klaskin e ober el lizher-mañ. Da gentañ o deus lavaret penaos int deuet da c'hoari e brezhoneg ha petra o deus c'hoant da ober. Studierion eus Skol-veur vBrest, brezhonegerion a-vihanik pe get, e oant gwechall p'o deus graet anaoudegezh. Hiziv n'int mui stag ouzh ar skol-veur ha, da heul, e nac'hont bezañ "intelektualed". Da skouer, n'eo ket o fal difenn tezennoù 'zo diwar c'hoari. Dav eo merzout avat e kaver en o zouez tud arroudet-mat war ar saozneg ha mard eont da gerc'hat o fezhioù-c'hoari a-ziavaez-bro, n'eo ket hep abeg, pa'z eo aesoc'h dezho eget mont rag-eeun d'al lennegezh vrezhonek. Diouzh o c'hrediañ, n'eus ket a c'hoariva brezhonek ! Amplik ez eont ganti ! Gant seurt poellata e ve koulz dezho treiñ pezhioù gallek e brezhonek. Seblantout a reont disoñjal ez eo ken nes dezho ar sevenadur gall ha hini Iwerzhon. Bilgeriañ a rafent moarvat ez eus liammoù keltiek etre Breizh hag Iwerzhon, met siwazh, n'e'm eus ket spurmantet ar speredegzh voutin-se a zo bet anv anezhi. Ar farsadennoù-se n'eus nemet Breizhiz evit o friziañ, pere int ? Daoust ha n'int ket dedennet dres gant ar arvezioù lec'hel ha proviñsel eus pezhioù-c'hoari Synge ? Lennet 'm eus tu bennak e oa aet ar skrivagner da dremen ur pennad-amzer e kornog Iwerzhon e sell da daolenniñ doareoù-komz ha-bevañ e dudenoù. A-benn ar fin, kaer o doa diogeliñ ar c'hontrol, ne oa ket kalz kemm etre *Lapous-den Penn ar Bed* hag ur c'hozh pezh-

c'hoari patronaj. Keal zo ganto ivez da c'hoari diwezhatoc'h un oberenn all gant Synge, tremenet endeo war ar skinwel. Ar spi a'm eus e vo uheloc'h al live. Tro 'm eus bet ouzhpenn da verzout levezon vras Kergoulay en o zouez, pa'z eo deuet a-benn da aloubiñ ar gomz meur a wech. Klasket en deus displegañ penaos o doa strivet da dostaat ouzh ur « c'hoariva evit ar bobl », eleze evit « an holl ». Gwall zispis seurt troiennoù en e c'henou !

Aze dres e keomp gant un diaester spontus, « dibarek da Vreizh », gouez dezho : kudenn ar yezh, kudenn ar brezhoneg. Penaos ober 'ta evit bezañ komprenet gant an holl, ken er c'héριοù, ken war ar maez ? Diskouezet o deus anat bezañ kontammet gant afer an trefoedachoù evel ma'z eo an hanter (pe ouzhpenn ?) eus ar vrezhonegerion. Ne fell ket dezho ur yezh unvan hepken, ur pouez-mouezh unvan ne lavaran ket. Adaozet o deus, da skouer, pezh-c'hoari Synge evit ober gant gerioù anavezet gant an holl. Diaes e ve a dra sur, ha gwel e ve dezho deskiñ afo ur poched teodyezhoù, ha kement hag ober, koulz dezho mont e galleg, evel m'o deus graet e-kerz ar vreuradenn. Evit ur wech e vije bet tu da gomz brezhoneg ouzh tud dianav !... Neuze e souezhont gant ersavioù an dud un tammig dre-holl : ar re-se ne gomprenont ket, ne vourront ket ; atav e vezont o pismigañ ar yezh pe ar pouez-mouezh. Kerse a oa ganto na vezañ komprenet gant an holl, daoust d'o strivoù. Heñveldra e voe e Roazhon daoust pegen gorrek o deus distilhet o frazennoù (gant studierion ar gêrbenn, ne ouzer morse !).

A-bouez redek war-lerc'h un tasmant ez int paket d'o zro e lasoù an trefoedachoù, hag andiles ha dister eo o c'hoariva. Mirout, merañ ha difenn ne glasket ken. Ne fell ket dezho tremen da drefoederion, na da intelektualed, na da dud engouestlet kennebeut, na... Erfin, n'int mui netra, nemet bevezierion : bevezierion brezhoneg. Un tammig diac'hinek e'm eus kavet o doare da ginnig ar pezh-c'hoari e galleg : « une pièce en langue bretonnante » (? !). Klafñ int gant ar yezh, pa greizont ar c'hudennoù en-dro dezhi, klafñ ivez gant an digenvez m'en em gavont, ken na vanont en ur c'helc'h-bac'h. Strivañ a reont da bellaat diouzh o c'hudennoù-int hag o buhez, ha nac'h a reont loc'hañ diwar o digenvez end-eeun dre leuniañ ar goull gant mojennoù : ur « yezh komprenadus evit an holl », ar « geltegezh ». E-se ne reont nemet adchaokat. Aze e teu da goun din un droienn a'm eus klevet gant un den yaouank. Hervezañ, komz brezhoneg hiziv an deiz, ne c'hell bezañ nemet un « adkrouidigezh istorel », eleze un distro didorr d'an tremened : « adkrouiñ » ar yezh, he adkavout hag he mirout evel m'edo gwechall-gozh, evel ma vo da viken. En hevelep doare o deus tud ar c'hoari nac'h et diazezañ war labour an Emsav (« Ar c'hoariva brezhonek ne dalv ket ar boan e c'hoari ! ») ha gwel e kavont distreiñ d'ur bed kozh estren, met kelt.

Nac'h a reont bezañ « engouestlet » er ster politikel. Adkavout a ran aze va goulennoù diwar-benn ar skeudennva hag ar c'hoariva : petra 'c'hellont bezañ ? N'int ket hepken eztaolioù en ur yezh bennak, gant ur c'halvezerezh bennak, hogen ivez buhezadurioù diforc'h diouzh hon hini. An noz all edon engortoz eus ur c'hoariva disheñvel, n'eo ket engouestlet, hogen emouestlet d'ar vuhez hag o tigeriñ dezhi hentoù all. Betek pegoulz e vin engortoz eus kejadennoù gant « tud » all diwar al labour a reont ? Unan bennak er sal en deus klasket displegañ damc'hwitadenn al laz-c'hoari e-mesk ar vrezhonegerion all. « N'eus ket a gedvuhez vrezhonek », emezañ. Petra

'dalvez « kedvuhez » hervezañ ? Hag an dremmourion yaouank-se o doa un dra bennak da lavarout en o anv-int an noz-se ?... Dipitet int... N'int ket komprenet gant an holl... Hogen pelec'h emañ ar gudenn yezhel ? Evidon-me ne welan nemet unan, e par al lavar. Petra o deus da « lavarout » 'ta ? Ne oan ket deuet evit klevout un nebeut bommoù brezhonek. Ne'm deur ket ha ne ra ket diouer din. Deuet e oan evit kejañ ganto. Distreiñ a rin marteze gant ar spi ned eo ar pezh-c'hoari-se nemet ur poent-loc'hañ e sell d'en em arroutañ war ar vicher, anez menel en un hent-dall. « Digeriñ an nor d'ar c'hoariva brezhonek en-dro », aze n'emañ ket an dalc'h. Penaos avat imbours'hif doareoù-eztaolif nevez ? Penaos arnodif ar vuhez ? Pe laz ar yezh neuze ?

02 03 78.

[Faint, illegible text, likely bleed-through from the reverse side of the page.]

GERVA YEZHHEL 1977

abeg a stad 121/49
 adc'havaelañ 123/46
 adelladerezh 122/52
 adelladñ 124/25
 adelladur 121/32
 adextaolif 124/18
 advael 121/51
 adwerc'helaat 124/19
 aerviñs 124/17
 a-geveskemm 121/54
 allemannour 123/30
 amaezhier 121/55
 amdroc'hed 122/26
 amgwerinegezh 124/35
 amkan 124/5
 amkaniad 121/50
 amparañ 121/23
 amplegad 122/61, 124/49-52
 amplegañ 121/28
 amreal 121/46, 123/38
 amsavadur 121/35
 amsavat 121/39
 amsaver 122/38
 amsaviñ 121/44, 123/35
 amveziad 121/5, 124/26-31
 amzaeladur 121/20
 amzalc'het 121/35
 andezvek 121/42, 122/39
 andiles 124/58
 andisplegadus 124/16
 andivezek 123/41
 anfeulzour 122/45
 angerzh 124/42
 ankloer 122/24
 annifv 122/5
 anstourmelour 123/51
 anvelic'hweluniadour 123/30
 anvleouriezh 121/44
 anvouezhier 123/37
 anvroat 122/35
 aozad 122/14
 apofatek 123/11
 araez 121/, 124/48
 araez-ektaolif 124/4
 araez-kehentif 121/6, 124/22
 araez-kenderc'hañ 121/32

araez-pouezañ 121/28
 arbennelezh 121/14, 123/18
 arbennigour 121/56
 arbennikaat 121/25-55
 arc'hadur 124/5
 arc'hweleñ 121/33, 124/3
 ardead 121/55
 ardivink-kenderc'hañ 124/43
 arempred 123/61
 argelañ 123/57
 argemm 122/17
 argerzhad 121/36
 argerzhadur 121/59
 argrec'h 123/20
 arlakaat 121/58
 arlakadel 121/59
 arlakadenn 121/59
 arlakadurezh 121/18
 arleviañ 124/34
 arlevier 121/35
 ariez 121/25-49, 124/30-41-42-50-51
 arleziad 121/50
 arleziad 122/25-55, 124/30
 arouesad 123/11
 arouesaer 123/11
 arouezoniezh 124/13
 arreadek 123/29
 arselladus 121/59
 arveradius 121/24
 arvevat 121/39
 arvroker 122/51
 arwarzh 121/47, 122/23
 arzaeladenn 121/31
 arzaeladur 121/20
 arzaeladus 121/44
 arzaelañ 121/20
 askenderc'hañ 121/20
 askoridik 124/27
 askorus 121/49
 assammadur 123/19
 astennidik 124/27
 ateb-aour 123/40
 atebeg 121/37-47, 124/35
 atebegrezh 121/23
 atebek 121/55, 124/42-48

GERVA YEZHHEL

61

ateb-oberoù 121/3
 atoradur 121/60, 123/59
 atorif 121/55, 123/61
 azas 124/52
 azasaat 121/59
 azasadur 124/25
 azgwelout 122/22
 banner-fuc'hellou 124/28
 bec'hiek 123/12
 bedouriezh 121/58
 bellouriezh 121/38, 124/6
 benevelour 123/51
 beskadoriad 121/43
 beziad 121/59
 bidondrev 124/34
 blankiour 123/31
 bleiniad 124/32-39
 bloavezhiañ 121/49
 bloc'hellad 122/3
 bloc'helezh 121/25-53
 bloc'henn 121/23
 bon 123/61
 bon-daspugn 124/26
 bondoug 122/42, 123/44
 boniek 121/6
 boniekaat 121/16, 124/33
 bonnañ 124/32
 bonreizh 121/28
 bonvezañ 121/20
 bonveziad 123/12
 bonveziadelezh 121/14-21, 123/12-19
 bonvezus 123/19, 124/52
 boulañjouriezh 123/33
 brastresek 124/56
 bredelezh 121/11
 bredelfenner 133/57
 bredelfennerezh 123/57
 bredkevredadel 124/51
 bredospital 123/45
 bredvezegerezh 122/42
 brezel a loc'hadoù 121/35
 brezel a savlec'hioù 121/35
 brezeliek 121/35
 brient 121/32
 brientek 121/49
 brientekaat 121/42
 brizhsoliañ 121/16
 buhezad 124/16
 buhezal 122/23
 buzad 122/17, 124/36
 c'hweluniad 121/6, 124/3
 c'hweluniaded 121/49
 c'hweluniadel 121/6, 124/3
 c'hweluniadif 124/3
 c'hweluniadour 123/34
 Dael 121/47
 daellad 121/46, 122/36, 123/35
 daeliek 121/40, 122/23, 123/43
 daelvezh 122/28
 damkanouriezh 121/60
 danframm 121/35
 dangorelezh 121/12
 dangoreleurezh 121/14
 daranver 122/4, 123/39
 daranverezh 121/46, 122/42
 darblegañ 124/8
 dargouezhel 121/57
 darleviad 124/30
 darreuziad 121/27
 darsankerezh (— empenn) 123/61
 darvennad 123/45
 darvennout 121/42, 122/27, 124/40
 darvennoz 123/16
 daspugnadur 121/28
 davead 124/11
 daveader 124/11
 daveadif 124/10
 dazbec'hiañ 123/57
 dazbriañ 123/41
 dazrannadur (— al labour) 121/56
 debertzegrezh 122/52, 124/49
 debertzhek 121/, 124/52
 dec'haly 124/11
 dec'hmegenn 123/17
 dedaolad 121/30-62
 dedaolif 122/65
 dedarzh 124/13
 dedarzhañ 124/13
 deglevus 122/26
 denoted 124/11
 deogadur 122/48
 derc'had 123/3
 derc'houezañ 122/24, 124/29
 derc'houezour 121/41, 123/31-46, 124/3-39-40
 derc'houezus 121/24
 destuziadur 122/56
 deur 121/57
 deuriad 121/57
 devennadenn 122/39
 devennañ 122/27

devoud 121/58
 devoudañ 121/49
 devoudel 121/61
 devouder 121/35
 dezrannerezh 121/28
 dezrannus 121/61
 dezreadus 123/18
 dezvadurezh 121/23-50, 123/31
 Dezveg al Labour 124/3
 dezvegezh 121/46, 122/32
 dezvek 122/28, 124/7
 dezvel 121/23
 dezverezh 121/31
 dezverezhel 122/28
 dezverk 121/40
 diadrez 124/12
 dialgerc'h 124/34
 diargil 124/24
 diarsell 121/7
 diasaezh 124/12
 diazerc'h 122/7, 124/52
 diazremm 122/9, 124/52
 diazremmaat 124/14
 diazremmek 124/16
 dibezhekadur 121/56
 dibezhiadus 124/24
 dibun 124/57
 dic'houbrenadus 123/47
 dic'hwel 124/3
 dic'hweleg 123/44, 124/13
 didec'hus 121/59
 diferadur (roll an — ioù) 123/31
 diforc'helezh 124/49
 digembezus 121/28
 digenreadus 123/57
 digevanekaad 121/16
 digoll-ezfredañ 124/4
 diheboelled 123/29
 diloc'hel 122/27
 dilaziek 123/48
 dinaz 122/50
 dinazel 123/31
 dinazelezh 123/31-34
 direadur 123/57
 diren 123/57
 direndael 124/54
 direvoud 124/17
 direzadur 122/30
 direzañ 121/43
 dirgel 121/6, 123/33
 diskeladeg 121/48, 124/6
 diskelañ 122/27
 diskounadur 123/41
 dislank 122/19
 disrannour 124/28
 disreol 123/27
 diungenezh 121/7
 divaeziañ 122/20
 divezel 122/64
 divigad 124/26-28
 diwerc'hek 123/34, 124/48
 dizireadus 123/18
 doareadel 121/40, 123/33
 doare-ektaolñ 124/59
 dodenn 121/5, 124/48
 dodifñ 121/59, 123/16
 dogmenn 121/31
 donvoriad 124/37
 dornwezhour 121/40
 dourrenel 121/51
 drefuzour 121/49
 drefuzouriezh 122/26
 drestfram 121/35
 droukvoz 124/33
 dullhad-ambilh 123/47
 ec'hwel 123/31, 124/3
 ec'hwelañ 121/27
 ec'hweleg 121/56
 ellaveladur 121/11
 ellavelañ 121/11, 123/55, 124/52
 ekologour 122/8
 emdarzhegezh 121/23
 emdarzhek 121/24
 emfram 121/40
 emgontrollezh 124/10
 emouez 123/48
 emouezañ 124/8
 emouiziekadur 121/56, 124/7
 emplegañ 121/24
 emsavferenn 121/15
 emstriver 124/40
 emvennerezh 122/62
 emwerc'helaat 123/18
 endodifñ 122/36
 enepdaeliek 121/40
 enepdrefuzour 121/51
 enepdrefuzouriezh 122/23
 enepmilour 122/23
 engwezhiañ 123/38
 enluadur 122/48, 123/40
 enluskadur 122/25
 enluskañ 124/5
 ensavadur-dezvañ 121/23

ensavadur-erounit 121/23
 ensavidigezh 123/58
 ensaviñ 123/57
 ensavus 124/16
 Ensellerezh al labour 124/3
 ensezadur 122/51
 ental 123/57
 entuad 122/29
 entuadur 121/37
 eorizh 121/19
 eoulvaez 124/37
 erbar-lezenn 121/49
 ergerc'henn 123/57
 ergorad 121/59
 ergoregezh 121/10
 ergorel 121/12-34
 ergorelezh 121/11
 ergorenn 121/59
 ergorenn-dezeviñ 121/10
 erluell 123/60
 ersav 121/23, 122/42
 ersezet 124/36-41
 ervennadenn 121/46
 erzerc'hadenn 121/19
 erzerc'hadur 121/16
 erzon 122/27
 eskoriñ 121/59, 124/49-52
 estez 123/37
 Etrech'hweluniad 124/33
 etreemsavelezh 121/21
 etrieriezh 123/47
 ezholaadur 123/36, 124/38
 ezholiñ 123/35
 ezkanad 123/38
 ezkonadur 124/51
 eztrevad 123/5
 falswerc'helezh 123/57
 film-beveziñ 124/47
 filmvarner 123/50
 forzh 124/23
 frammadur 121/51
 frankveizour 122/29
 frankvicheriat 123/34
 funig-vegel 122/43
 galluzour 123/31
 galvadenn 121/46
 gedour 123/30
 gennad 121/33, 122/15, 124/26
 gopr-dic'hwel 124/4
 gopr tiegezh 124/5
 goubarzhel 121/3
 goubarzhelour 121/17, 124/52
 goubrenerezh 124/22
 gouez 124/20
 gougevanif 122/20
 gougevredif 121/18
 gouzlelour 121/55
 gouzlelouriezh 122/34
 gouzel 123/62
 gourc'hwel 122/15, 124/3
 gourc'hweleg 124/6
 gouriz-bac'h 121/28
 gourlakaat 121/40
 gourstal 121/55
 gourhelaat 124/48
 gourzhbeller 124/22
 gourzhbellerezh 123/61, 124/22
 gourzhlanv 123/7
 gourzhtreiñ 122/33, 123/46
 gourzhtrois 123/60
 gouskor 123/12-57, 124/49
 gouskorañ 122/12, 123/57, 124/12
 gouvennoz 121/50
 gouvriad 124/23
 gouzañvat 121/44
 gouzer'hel 123/47
 greantour 124/43
 greantva 124/37
 gwadserc'h 123/55
 gwarellañ 123/10
 gwarzh 121/51
 gwastad 122/11
 gwazad 122/15
 gwazadur 124/27
 Gwazadur StIennaerezh 121/38
 gwazerezh 123/44
 gwazour 124/6-23
 gwazva 121/42, 123/35
 gwazvod 122/30
 gwengelek 121/19, 122/54
 gwerc'h 121/24
 gwerc'hañ 121/, 122/61, 124/20
 gwerc'hek 121/6-60, 123/51-60
 gwerc'helaat 124/51
 gwerc'heladur 121/24-53
 gwerc'helezh 121/11, 124/47-51
 gwerc'henn 121/31
 gwerinelour 124/54
 gwezhour 124/26
 gwezhour-douar 121/30
 gwezhroll 123/28
 gwiaenn werinek 121/30

gwillouti 122/42
 gwir-c'hweluniad 121/27, 124/54
 gwir-c'hwelañ 121/27
 gwirvoud 123/57
 gwirziadek 122/4

habaskterour 124/37
 hanbarzh 124/54
 hanezel 122/13, 124/58
 hapaks 123/12
 hav 123/39
 heboellaat 122/20, 123/28
 helosk 121/52
 hennad 121/10
 hepkorñ 121/55, 123/62
 herouezadur 121/29, 124/8
 heulward 122/65
 hilastaliñ 123/51
 holgant 124/32-34
 holveliek 123/45
 hollveziadelezh 122/48, 124/52
 hontarouez 124/9
 hontarouezelezh 124/14
 hontger 124/11
 hontkenderc'hañ 121/12-54
 hontved 124/11

intrudu 121/43
 iskevredad 124/27
 iziunad 121/22, 124/7

jiskardour 123/46

kadervour 121/42
 kadoriad 121/47
 kadour 121/29
 kalvezad 124/16
 kalvezbureviadek 121/33
 kalvezder 122/42
 kalvezel 124/8-51
 kalvezerezh 124/58
 kalvezveli 121/31
 kamp-addiorren 123/45
 kantaezañ 122/34
 kantaezek 121/62
 kantouezad 123/33
 kantouezañ 121/10
 kantouezek 121/60
 kantouezel 121/58
 hantreizhadur 123/52
 kantreizhañ 122/10, 123/45, 124/47
 kargad milourel 121/38

karism 124/18
 karradio 123/28
 katafatek 123/56
 kealiadurezh 121/33
 kedelfenn 121/32
 kedskor 124/55
 kedveno 121/43
 kedvuhez 121/11, 124/59
 kedvuhez 123/33
 kefleuniañ 121/57, 122/60
 keflezel 123/43
 keflod 121/59
 keflusker dre helosk 121/52
 kefridiad 124/23
 kefridiel 121/42, 122/24
 kehenterezh 121/6
 kehuzed 122/27
 keistiadur 121/42, 122/32
 keisiañ 121/51, 122/28, 123/41
 kelennadour 123/39
 kellidañ 121/40, 122/21
 kellidel 121/39
 kelliderezh 124/53
 kellidour 121/39, 122/26
 keltegezh 124/58
 kembeli 122/37
 kembellek 124/40
 kemplezhded 121/32
 kempoellid 121/62
 kenberc'hentiez 121/33
 kenc'hweluniaded 124/7
 kendehter 124/11
 kenduad 123/47
 kenelwernelour 121/31
 kenemsklaeriadur 123/13
 kenemsklaeriañ 123/15
 kenfestadelezh 123/53
 kengantadur 122/58
 kengevread 124/4
 kengevreadel 124/4
 kengladek 121/26
 kengladekaat 121/28, 124/41
 kengladekadur 121/33
 kengladelour 122/29
 kengor 124/3
 kennez 121/49
 kentsenenn 123/6
 kentael 124/26
 kentaozad 124/19
 kentestaoliñ 124/19
 kentidik 123/18
 kentizhek 122/62

kentod 121/29, 122/31, 123/35
 kentodadenn 124/44
 kentodiñ 121/24
 Kenvarc'had 123/45
 kenvicherad 124/7
 kêrelaat 124/30
 kêriekaat 124/30
 ketep 122/24
 kevadegal 121/12
 kevadegelezh 121/13
 kevanzalc'hiezh 122/14
 kevanadur 123/47
 kevanek 121/5
 kevanekadur 121/23
 kevanif 121/39
 kevareizhañ 121/22
 kevarouezour 121/38
 kevarzhelezh 123/24
 kevelad 124/17
 kevelop 121/45
 kevelourel 121/33
 kevelouri 121/33
 kevenblezh 124/9
 kevenep 124/13
 kevraokaat 124/8
 kevraoueg 123/44, 124/31-39
 kevraouif 124/3
 kevrat 123/28, 124/4
 kevread 123/34
 kevreadel 121/26, 123/46
 kevreadur 121/50, 124/33
 kevredig 121/46, 124/57
 kevredik 124/5
 kevredin 121/48
 kezarouriezh 123/33
 kezivik 123/20
 kleizelour 123/49
 kletadur 124/7
 kletadurezh 123/54
 korfunladel 121/59
 korvoerezh 123/46
 kospañ 121/37, 123/39
 kosped 121/43, 123/32
 kospidigezh 121/37, 122/28-41
 koulzataer 121/39, 122/27
 koulzataerezh 124/39
 kravez 122/54
 kravezel 121/31
 krazer 124/29
 kredek 124/28
 kreizva 124/29

lakadel 122/8
 lavar-gavael 122/9
 laz 121/55
 ledanv 123/6
 ledanviñ 123/6
 ledarzour 124/20
 lelaniver 123/31
 lelaniverek 123/33
 lestr-bale 124/39
 leufviñ 122/41
 leterc'had 123/6
 leterc'hadenn 123/20
 leterc'hañ 123/4
 leur-da-aer 124/31
 leurennadur 122/60
 leurrenif 124/56
 leviad 122/35
 leviadezh 124/35
 leviadurezh 121/23
 leviouerezh 124/35
 liesvroadel 123/61, 124/38
 loezadur 123/47
 loezañ 122/33
 logos 123/17
 ludi 122/38
 lunegor 122/3, 123/16
 luskad-dieubiñ 124/37

mael 121/29
 magouri 124/53
 maodiern 121/42, 213/32
 marvgosp 121/43, 123/46
 metou 121/45
 metou-tiñvañ 122/31
 meuriadelouriezh 124/25
 mezell 122/15
 milour 121/29
 milouerezh 124/24
 milourek 122/33
 milourel 121/28
 moederezh 121/34, 123/8
 monc'hwezh 124/53
 morvezhen 124/38

naontekvidik 123/19, 124/53
 naouaz 122/41
 nerzhaouegezh 121/49
 neuzelezh, 123/57
 neveztrevadennerezh 124/30
 nevid 121/45, 124/27
 nevidek 121/32
 nid 123/11

nidiadel 121/13
 nidiadelezh 121/12
 noosferenn 121/15

oberelouriezh 123/61
 ouzhpennad 122/15

pastell 122/37
 pellaour 123/38
 pellvanek 123/44
 pennboelladur 124/10
 pennholierezh 121/36, 122/25,
 124/55

pennour 121/38
 peurgalvezeladur 122/45
 peurvezegeladur 122/45
 planedennelaat 121/13
 poblaters 123/46
 preti 121/55
 proleterekadur 121/55, 123/61
 purju 124/49
 purjuog 124/51
 purjuelour 124/49-50

rakarlakadenn 121/59
 rakgouestladeg 122/36
 raksavelañ 121/31
 reizhiadek 121/7-28
 reizhiadekaat 121/53
 reizhkredennegezh 122/63
 reizhwirieghez 121/28
 rekipe 121/56
 remzad 123/47
 remzadiñ 121/41, 122/23
 revel 123/51
 revelezh 122/44
 revoud 124/17
 revout 124/17
 rezid 123/8
 rezidek 122/3
 riegezh 122/47, 124/41
 riek 122/6
 riez 124/29-54
 riezadelezh 122/26, 124/25
 ristenn 122/10, 123/59
 rizh 124/8
 rizhek 122/55
 roll-derc'houezañ 121/23

sankenn 124/23-37
 saveladur 121/24
 savelañ 121/59

savelegezh 121/6
 savelegour 121/12
 saveleñn 121/58
 saviadel 123/61
 sezva 122/38
 skalfad 123/47
 sifrekaat 124/16
 skarat 122/30
 skizofreniezh 124/51
 skog 124/6
 soliazelezh 121/12
 soliadelour 121/55
 soliadelouriezh 122/34
 solwez 123/19
 sonterez 123/49
 stadadenn 121/58
 stad-askre 123/54
 stadegoù 121/38
 stael 124/3-7
 staelad 121/5
 stael-divizout 121/28
 stlenn 121/38, 122/14, 124/57
 stlennañ 121/5-38
 stlennañyoc'hek 123/61
 stlenner 121/43
 stlennoniezh 124/51
 stourmelour 123/50
 sturiadour 124/25-36
 sturvod 121/39

tangleuziañ 121/39
 taol-nid 121/51
 tarwazerezh 121/43, 122/26
 tebegezh 123/41
 Tevezeg 121/42
 Tevezvod 121/42, 122/28
 trabedoniezh 123/57
 tralavar 124/10
 treadegel 121/11
 tredanwarellek 121/59
 treloc'her 122/35
 treuzlec'hiañ 123/57
 treuzstaelañ 121/44, 123/37
 trevonnañ 123/14
 trevourel 122/23
 trevvac'hadur 121/34
 trevvac'hañ 121/29, 124/26
 trezerc'hañ 123/6-57
 trobarzh 123/39, 124/56
 treziad 123/28
 trobarzhek 121/29, 124/56
 tru 124/48

uc'hek 123/28
 uhelgefridiad 123/37
 unarouezus 123/3
 unezholadek 122/33
 unpliaou 122/26

unveziadelezh 121/14
 unwerzhel 122/50

yezhpoblkarour 124/50
 yonez 121/50

E ti Moulerezh ar Baol - Bali ar Marichal-de-Latre-de-Tassigny
Diskleriet hervez lezenn : eil trimiziad 1978
Niverenn ar mouler : 41420
Ar merour : G. MAZE

EMBANNADURIOU ALL EMSAV

E galleg :

- E.S.B. 1 — Les données socio-historiques de l'Emsav, 5 F.
- " Breiz Atao " et la dialectique de libération (diviet).
- Objectifs, but, finalité (diviet).
- Les aspects particuliers de l'organisation révolutionnaire (diviet).
- Aperçu des rapports entre l'Emsav et l'évolution économique et sociale de la Bretagne (diviet).
- Analyse des thèses de Robert Lafont, Morvan Lebesque (diviet).
- La langue bretonne et la révolution, Rennes, 1972, 10 F.
- E.S.B., A. de la Borderie, Boris Porchnev, Les Bonnets Rouges, 10/18, Paris, 1975, 12 F.

E brezhoneg :

- Dastumadennoù pevarmiziek eus 1967 da 1975 : 20 F al levrenn.
- 12 niverenn evit 1976 : 6 F an niverenn.

EMSAV

B.P. 125 — 35003 RENNES CEDEX
C.C.P. 2460 10 Z RENNES

Lakaat 10 % ouzhpenn evit ar mizoù-kas